

Erwän ar MĒNSA

Priz
an
Daspren

J M BOURC'H

1982



IMBOURC'H, KELAOUENN A STUDI

Trizekvet bloavezh

Niverenn 151-152-153

30 Gwengolo 1982

Priz an Daspren, gant Erwan ar Menga.....p.3

oo

Koumanant-bloaz : 70 lur. KRP : 1 534 25 N Roazhon
Y. Ollivier. E miz Genver e krog ar c'houmanantoù
ha reiñ a reont ar gwir da zegemer ar stagadennoù
da zibab ar re a garfed prenañ.

Priz an niverenn-mañ : 30 lur.

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.
Burloud, 35 000 Roazhon.

oooooooooooooooooooooooooooooooooooo

Niverenn-wask : 50 015

Un niverenn ordinal eo an niverenn driek
-mañ. N'eo ket da baeañ ouzhpenn ar
c'houmanant enta.

Emañ embannet an oberenn-mañ en esperan-
teg ivez. Ar re a garfe kaout ar skrid
esperantek ivez a c'hell skrivañ d'ar
gelaouenn.

Kaset eo an niverenn-mañ war un dro gant
an niverenn 154, 31 Here 1982.

UR GER A-RAOK

Bro ar c'halvarioù eo Breizh. Hogen e-tal ar savadurioù-se, siwazh, e vez gwelet nebeutoc'h a wazed, o zog dindan o brec'h, nebeutoc'h a verc'hed o chapeled en o dorn, eget na veze gwelet ergentaou o prederiañ war ar Basion hag o pediñ Hor Salver. Plijout a ra d'ar gristenion koulskoude klevout an danevell diwar-benn poanioù Jezuz, hag an holl a zo kerse ganto dre ma ne vez mui distaget, e-kerzh ar Sizhun Santel, Sarmon ar basion. Neuze, hon eus soñjet rentañ servij dezho, da lavarout eo, ober plijadur hag ober vad dezho o reiñ dezho da lenn Danevell ar Basion.

Un danevell eo eta a ginnigomp deoc'h, ha n'eo ket ul labour a zezvarnerezh, un danevell avat a zo aozet diwar an Avieloù hag an Hengoun. Adkavout a reot enni mennozioù bet displeget gant oberourion anavezet, evel an Doktor Barbet, Daniel Rops h.a. Pezh a zo nevez avat eo e kavot en danevell-mañ, ouzhpenn testenioù tennet eus an Avieloù, arroudennoù e-leizh eus Levrioù ar Skriturioù Sakr ha, dreist-holl an diouganou mesiazek (darn eus an arroudennoù-se koulskoude n'int ket meneget ger-evit-ger). Hag o vezañ ma pad poanioù ha dismegañsoù an Aotrou Krist a-hed e vuhez war an douar, en em astenn an danevell adalek an deiz maz eo deuet da vezañ den betek an deiz maz eo savet a varv da vev.

+++++

DIWAR-BENN LEVRIOU AR SKRITUR-SAKR

Setu, evit ar re na ouzont ket, da be Levr
ar Skritur e kas an arouez-mañ-arouez :

Testamant kozh :

Gen. Geneliezh. Ex. Ermaeziadeg. Lev. Levie-
gezh. Num. Niveroù. Deut. Adlezenn. I Sam.
Samouel. I Reg. Roueed. I, II. Chro. I., II.
Danevellou. Jud. Yudit. Job. Yob. Ps. Salmoù.
Prov. Lavarioù. Eccl. Prezegour. Sap. Furnez.
Eccli. Iliziadel. Is. Izaiaz. Jer. Yeremiaz. Lam.
Klemmganoù Yeremiaz. Ez. Ezechiel. Dan. Da-
niel. Os. Ozeaz. Am. Amoz. Mi. Mic'haz. Haba.
Habakouk. Ag. Agea. Za. Zac'hariaz. Mal. Ma-
lac'hi.

Testamant Nevez :

Mat. Mazev. Ma. Mark. Lu. Lukaz. Joa. (AViel)
Yann. Act. Oberoù an Ebestel. Rm. Lizher Paol
d'ar Romaned. I, II Cor. Lizher Paol da Go-
rintiz. Gal. Lizher Paol d'ar C'halated. Eph.
Lizher Paol da Efeziz. Col. Lizher Paol da Go-
losiz. II Tim. II Lizher Paol da Dimoteos.
Hebr. Lizher Paol d'an Hebreed. I Pe. I Lizher
Pêr. I Joa. I Lizher Yann. Apo. Diskuliadur
Yann. Vul. Vulgata. LII. Ar Seikont.

+++++

DIVIZ EN NENV
EVIT MAD AR PEC'HER

Anezhañ e-unan e pella ar pec'her diouzh Doue. Hag ouzh ar pec'her hepken e noaz ar pec'hed. Gellet ha dleet eta en devije Doue dilezel an den en e bec'hed hag en efedoù anezhañ. " Petra eo an den marvel evit ma 'z pefe soñj anezhañ ? Pe Mab an Den evit ma taolfes pled outañ ? " (Ps.8,5). Hogen'karantez eo Doue' (I. Joa.4,16) ha karout a ra an dud goude maz int kablus. "Ne ra ket en hor c'heñver hervez hor pec'hedoù, ha n'hor c'hastiz ket diouzh hor gwalloberoù..."(Ps.102, 10) : "Ned eo ket marv ar pec'her a blij din, met ar pezh a blij din eo e tistrofe ar pec'her diouzh e wall-hent hag e vevfe..." (Ez.33,11).

Ya, trugarezus hag hollgarantezus eo an Aotrou Doue," (Ps.102,8). Hogen, daoust hag-eñ e c'hell pardoniñ anez goulenn un digoll ? Hag-eñ e c'hell tremen gant un digoll diouzh hor galloud-ni ? Hag-eñ e rank goulenn ur digoll peurgevatal ?

Kevrin eo Doue. "Ouzh piv e hañvalfec'h Doue ? " (Is.40,18). "Ha piv a c'hello meizañ e vraster ? " (Eccli.18,3). "An hini a fell dezhañ meizañ e veurdez a vezo sebezet gant e glod ! " (Prov.25,27, Vulg.)

Rak-se, n'omp ket evit gouzout petra a

c'houlenn reizhded Doue. Hogen ma ne ouzomp ket petra en devije Doue gellet ober, e ouzomp petra en deus graet : lakaet en deus ne vije gwalc'het ar pec'hed nemet gant un dic'haou peurgevatal !

Ur falloni hogos divent eo ar pec'hed : un dismegañs eo ouzh meurdez divent Doue, ha distrujañ a ra en den donezon divent ar c'hras. Evit bezañ peurgevatal e rank an digoll bezañ divent ivez. Ne c'hell ket eta an den, krouadur gwan ha, muioc'h c'hoazh, saotret gant ar pec'hed, reiñ an digoll-se : "Ne c'hell den ebet reiñ da Zoue an dic'haou na paeañ dezhañ priz e zaspren..." (Ps.48,8).

Doue hepken a zo divent. Met daoust ha gellout a c'hell Doue en em lakaat e lec'h ar pec'her ? N'eo ket d'an hini a zo bet dismegañset digoll an dismegañs : "An hini en deus pec'het, hennezh eo a varv..." (Ez.18,20). Ouzhpenn-se, dic'houzañvat eo Doue : ne c'hell eta na gouzañvat na digoll !

Ha da viken e vo kollet an den neuze ? Nann : "Leun a garantez eo Doue..." (Ps.102,8) hag "emañ ar garantez hag ar reizhded o vont d'en em gavout ha d'en em vriata..." (Ps.84, 11).

Doue, Furnez Peurbadel, a gav tu d'unaniñ (mar geller komz evel-se rak n'eus nag eneberezh na diemglev etre uhelberzhioù Doue) e Reizhded divent hag e Drugarez divent "en ur gas e vab e-unan en ur c'horf heñvel ouzh hini ar pec'her..." (Rm.8,3). "Rakdibabet araok krouidigezh ar bed..." (1 Pe.1,20) e respont ar Mab : "Plijout a ra d'ın seveniñ da youl, o Tad..." (Ps.39,9). Hag ar Ger a zo deuet da vezañ den ! " (Joa.1,14).

An Aotrou Krist eo ar Ger en em c'hraet den

MAB DOUE A GEMER HON NATUR A BEC'HERION

"Ar ger a oa Doue... Hag ar Ger a zo deuet da vezañ den..." (Joa.1,14). Burzhud diglevet karantez an Tad "en deus karet kement an dud ken en deus roet dezho e Vab unganet ! " (Joa.3,16). Burzhud ken dilavaradus all karantez ar Mab "a zo en em izelaet e-unan, hag eñ par da Zoue, dre gemer doare ur sklav,oc'h en em lakaat heñvel ouzh un den!" (Phi.2,6-7).

O plegañ d'ar gaou livet gant kasoni an Diaoul, "gaouiat ha tad ar gaou" (Joa.8,44), e teu an den da vezañ pec'her dre un taol a zisentidigezh hag a lorc'h diboell : o c'hoantaat en em lakaat heñvel ouzh un doue..." (Gen.3,5). O vont diouzh ar c'hoantdiskleriet gant karantez an Tad e teu ar Ger da vezañ Dasprenour dre un taol a sentidigezh hag a zilorc'h don enebet-krenn ouzh hini Mab-den : "Oc'h en em lakaat heñvel ouzh un den..." (Phi.2,7).

Ar C'hrouer a zeu da vezañ krouadur ; an Hollc'halloudeg a gemer gwanderioù mab-den ; an Hini-Divent en em gloz e bevennoù strizh ; Mestr an hollved a zeu da vezañ sklav ; an Hollbad a zeu da vezañ marvel ; an Hini-Santel a berc'henn ur c'hig heñvel ouzh hini ar pec'hed ; ar Garantez a wisk natur hec'h enebour ! Diouer a ra ar gerioù evit displegañ an emizelidigezh-se ! Evit gwir, divuzul eo ar

c'hemm a zo etre Doue hag an den. Setu perak - dirak an diouer a c'herioù da zisplegañ an izelidigezh-se, e lavar Sant Paol : "Da netra en deus en em lakaet ! " (Phi.2,7).

Gallet en devije Ger Doue kemer hon natur-den, da vihanañ evel ma oa deuet er-maez eus daouarn ar C'hrouer, gant he donezonoù led-naturel : diskarg diouzh ankenioù an ene, diouzh al labour poanius, diouzh ar skuizhder, diouzh ar gozhni, diouzh ar marv... Nann, ne gemer ket natur Adam evel m'edo a-raok ar pec'hed met evel m'emañ goude ar pec'hed : deuet eo ar Ger da vezañ den "en ur c'horf heñvel ouzh hini ar pec'hed..." (Rm.8,3.)

Ent reizh eta e oa an natur-den e Jezuz-Krist ar pezh ez eo hon hini, an natur-den diskaret gant ar pec'hed, gant hec'h holl wanderioù ha nammoù, "nemet ar pec'hed n'en deus ket bet. Gant se ez eo bet amprouet e pep tra en hevelep doare ha ni..." (Hebr.4,15). Poanioù ar c'horf : an naon, ar sec'hed, ar skuizhder, an taolioù, ar gwallgaserezh, ar goulioù,... ar marv. Doanioù ar galon : bezañ digomprenet, dilezet, trubardet, dismegañset, kasaet, kunujennet, tamallet e gaou...Ankenioù an ene : bezañ doaniet, heuget, enkrezet, nec'het, spontet...

Ma oa gwir den Jezuz e oa gwir Doue ivez. Ha krediñ a c'hellfemp neuze e oa gouestoc'h dre se da herzel ouzh ar poanioù. Ur fazi eo hennezh hag a zo da bellaat diouzh hor spered. Ar c'hontrol eo a zo gwir : natur Doue ennañ ne gemm natur an den nemet evit reiñ dezhi un temz tener-tre ha n'en deus bet den ebet, ha kizidik-dreist eta. Rak-se e oa ar boan kalz brasoc'h e Jezuz eget enomp. Ur wirionez eo,

hag arabat eo dezhi mont diouzh hor spered o lenn an displegadenn-mañ eus gouzañvidigezh Jezuz e-doug e Basion.

Gellet en devije Jezuz ivez ober ur burzhud evit distanañ ar boan ennañ hag he lemel kuit anezhañ zoken. N'en deus ket henn graet. Kentañ burzhud a reas Jezuz e voe e Kana Galilea..." (Joa.2,11). War-dro tregont vloaz e oa neuze. Ha pa ra ur burzhud "e vez en abeg d'an dud, evito da grediñ ennañ..."(Joa.11,42) ha bepred evit mad ar re all : "An dud dall a wel, ar re gamm a gerzh, ar re lovr a vez glanaet, ar re vouzar a glev, ar re varv a adsav da vev..." (Mat.11,5).

Ur c'hemm hepken etre Jezuz ha ni : ouzhpenn e gizidigezh dreist ez eo un Doue a c'houzañv, evelomp, muioc'h egedomp zoken !

Muioc'h egedomp, ya, rak "n'en deus ket Doue espernet e Vab e-unan..." (Rm.8,32). Hag adalek an deiz maz eo deuet da vezañ den betek maz eo saveta varv da vev, e vezo ervat, hervez an diougan "den a c'hlac'har ha boas ouzh ar boan..." (Is.53,3).

.....

EUS AN NENV D'UR C'HRAOU
DRE GORF UR WERC'HEZ

Dont a ra Doue da vezañ den ; asantiñ a ra da gemer "ur c'horf heñvel ouzh hini ar pec'hed..." (:Rm.8,3). Pebezh emizelidigezh ! Pebezh dismegañs !

Da vihanañ e teuio da vezañ den gant ur c'horf deuet d'e vent, hep tremen dre ar pazennoù un tammig dismegañsus ha poanius maz eo bezañ douget, bezañ ganet, bezañ bugel ? Nann ! "E pep tra e ranke an Aotrou Krist dont da vezañ heñvel ouzh e vreudeur..." (Hebr.2,17), bezañ unan anezho, unan eus o gouenn : "Eus gouenn David hervez ar gwad," (Rm.1,3), "ganet gant ur vaouez" (Gal.4,4).

Neuze, da "ya" Mari e respont "ya" ar Ger "N'ac'h eus ket kavet mat an olokostoù nag ar sakrifizoù evit ar pec'hed ; neuze e teuan, Tad, evit ober da youl." (Hebr.10,6-7).

"Ha gallout a c'hellfe Doue ober e annez e-touez an dud war an douar ? " (I Reg.8,27), a c'houlenne Salomon outañ e-unan. Gwir eo ; ha dibab a ra da vammvro ur vro drec'het ; da vamm, ur verc'h dilorc'h a-ziwar ar maez : "Ur werc'hez a goñsevo hag a c'hano ur mab a vo graet anezhañ Emmanouel, - da lavarout eo, Doue ganeomp..." (Is.45,18).

Ar furnez hollbadel en em gloz e korf Mari ! "N'ac'h eus ket bet prederi dirak korf ur werc'hez ! " (Te Deum). Ar Ger hollc'halloudek, eñ

hag en deus krouet an neñv hag aozet an douar, (Is.45,18), "a leugn an hollved," (Sap. 1,7), "ha na c'hell bezañ dalc'het na gant an neñvoù na gant neñvoù an neñvoù," (I Reg.8, 27), en em zalc'h en ur groueell-den, "a zeu da vezañ an |tamm| kig-se ! " (Joa.1,14): "En askre va mamm on bet furmet e kig ; e-pad dek miziad-loar on bet kaletañ en he gwad..." (Sap.7, 1-2)

Ar c'hentañ aberzh-daspren ez eo (rak buhez an Aotrou Krist en he fezh a zo dezhi talvoudegezh un daspren), ha pegen bras aberzh ! Hep mar ebet, ez eo ar vuhez krouellek-se, peuzdianav c'hoazh, kentañ tonkadur pep den. En degouezh-mañ avat ez eo emskiantek ar groueell ; rak, kerkent ha maz eo bet krouet ene an Aotrou Krist en deus bet an ober gant e c'halloudegezhioù dezhañ e-unan : ar meizerzh hag ar mennerezh. Ha Doue eo ar groueell -se !

E-pad maz eo brasez Mari ez aoz Ragevezh-Doue ganedigezh ar bugel-Doue : "Embannet e voe ur gourc'hemenn a-berzh Kaezar-Augustus evit enskrivañ holl dud an douar, ha mont a rae an holl da lakaat o anvioù, pep hini d'e gêr..." (Lu.2,1-3). Jozef a rank mont da Gêr David. Met perak ez a Mari gantañ ? Hag-eñ eo dav dezhi ? Ha faziet eo bet e sigur eur he gwilioud abretaet gant stroñsadennoù ha skuizhderioù ur veaj kant-hanter-kant kilometr war azen ? Hag hi a fell dezhi seveniñ an diougan : "Betlehem, ac'hanout e teuio an Hini a vezo pennrener war Israel..." (Mi.5,2) N'eus forzh ! E pep doare ez eo bet gourc'hemenn Kaezar ar benveg dibabet gant Ragevezh-Doue evit pourchas d'ar Bugel-Doue reuzeudikañ ganedigezh a c'heller da soñjal.

Erru e Betlehem, "ne oa ket a blas evito en ostaleri" (Lu.2.7), na kennebeut-all en tiez prevez, ken degemerus bepred koulskoude e-touez ar Yuzevion. Mard eo peurleuniet kêr ez eo en abeg d'an niveradeg end-eeun.

Plegañ a rank Jozef ha Mari da glask repu e kevioù ar rec'hell tost da gêr. Hag en ur c'hraou-kev eo, etre un ejen spontet un tammig hag an azen skuizhet gant ar veaj, pell diouzh pep skoazell, dibourvez diouzh ar pep retañ, e-kreiz an noz yen-skorn, e teu ar Bugel-Doue er bed : "Etre daou loen en em ziskouezi..." (Haba.3,2,LXX). E-pad ma oa beuzet pep tra en ur sioulder don ha m'he devoa an noz tizhet kreiz he redadenn herrus, e tiskennas ho Ker hollc'halloudek, Aotroù, eus lein an neñvoù, eus an tron roueel-se, war an douar." (Sap.18,14-15). Hag ar Werc'hez-Vamm "e vailhuras hag e lakaas en e c'hourvez en ur prezeb..." (Lu.2,7).

"Eus an tron roueel... en ur prezeb!" ul laouer evit al loened ! Ar Mesiaz a c'hell adkemer komzoù Salomon: "Me ivez, o vezañ ganet, am eus alanet an aer voutin ; kouezhet on war an douar hon resev holl en hevelep doare; hag evel gant an holl, e voe ur gouelvan va c'hentañ kriadenn. Desavet on bet e mailhurennoù hag e-mesk an trubuilhoù..." (Sap.7,3-4).

Lavarout a c'hell ivez ez eo e zienez ar gwashañ-holl. D'e c'hanedigezh e kav ar paou-rañ eus ar vugale, da vihanañ, ur fougenn d'e c'houdoriñ, ur c'havell d'e zegemer, un tantadig d'e dommañ. Salver ar bed avat ne gav nemet ur c'hraou digor d'ar pevar avel, un duilhad plouz en deus Jozef ranket tennañ digant al loened.

An aelez a gan d'e c'hanedigezh ; ur ste-

redenn vurzhdus a ro keloù d'ar bed ; ar vesaerion a zeu da azeuliñ"ar c'haerañ e-touez bugale an dud..." (Ps.44,3). Ar poupig avat a chom diseblantoc'h eget al loened skoelfet e traoñ ar c'hev. "Anaout a ra an ejen e vesaer hag an azen e vestr..." (Is.1,3). Er c'hev-se da vihanañ e sellont o-daou ouzh an degouezhioù divoas-se hag e tiskouezont o souezhenn pe o aon dre ur fiñvadenn bennak naturel ha dihabask. An hini nevez-c'hanet avat, serret e zaoulagad hag e zaouarn, ne wel netra hag a chom dizamant ! Ur skrign, ur gouelvan hep-ken pa c'hoarvez gant an avel skornus skeiñ ouzh e zremm goñvet. Gourlammat a ra, ha fiñval e garvanoù tra ma vez an ejen o ruflañ hag an azen o hinnoal... Ne c'hell ket ober muioc'h !

Pa sav an heol ez a al loened-se diouzh ar c'hev da beuriñ. Ar c'hrouadurig dic'halloud avat ne c'hell ket bevañ paneve d'e vamm. "An Hini a ro bara da gement a zo bev..."(Ps. 135,25) a c'hortoz pep tra digant e vamm, laezh ha preder ! Evit un Doue, pebezh izelidigezh !

oooooooooooooooooooooooooooo

SENTUS OUZH AL LEZENN

Mab da Abraham e oa ar Mesiaz. Hag an amdroc'hadur eo a veze merk an emglev etre Doue diouzh un tu, hag an Uheldad hag e ziskennidi diouzh an tu all. Rekis e oa evit pep paotr eizh deiz goude ma oa ganet : "Hennezh a vezo merk an emglev etrezon-me ha c'hwi : pa vo eizh deiz ar bugel e vezo amdroc'het..." (Gen.17,11-12).

Ne oa ket dalc'het ar Bugel-Doue d'al lezenn-se a wad marteze ? Hogen an hini a zo "deuet da gas da benn al Lezenn ha da skuilhañ e wad evit engroez an dud a-benn disteurel o fec'hedoù..." (Mat.5,17 ; 26,28) a zo o vont da gemer an darvoud-se a sentidigezh hag a boan koulskoude:"A-benn an eizhvet deiz merket e voe amdroc'het ar bugel." (Lu.2,21).

Echu an niveradeg he devoa ar familh didro a-ziavaez kavet repu en un ti degemerus, sur a-walc'h (Mat.2,11). Eno eo e voe sevenet al lid, eeun-tre. Un darvoud heverk, koulskoude: "Roet e voe dezhañ Jezuz da anv, evel ma oa bet anvet gant an ael, kent dezhañ bezañ krouet e korf e vamm..." (Lu.2,21)

Jezuz, da lavarout eo, Salver, "rak eñ eo a salvo e bobl eus he fec'hedoù..." (Mat.1,21). Hep gouzout da zen e tremenas an darvoud-se avat : boutin e seblantas bezañ an anv diouganus-mañ rak bugale all henn douge.

"Gouestl din pep kentañ-ganet : din eo. Daspreñañ a ri |gant un oan| da vibion gentañ-ganet. Ma n'he deus ket |ar vamm| arc'hant a-walc'h evit degas un oan,e kinnigo ur re durzhunelled pe ziv goulm..." (Lev.12,8).

Ne sell ket ar c'hinnig hag an daspreñ-se ouzh ar Bugel-Doue marteze ? Hogen an hini"en deus lavaret o tont er bed-mañ : nag aberzh na profadenn n'o deus plijet dit, met ur c'horf ac'h eus kempennet din |levit e aberzhañ|;neuze e teuan evit ober da youl." (Hebr.10,5-7), ne gollo ket an tu-se d'en em ginnig a-nevez en e bezh evel m'en deus graet c'hoazh d'ar c'houlzm'en deus en em c'hraet den : "A-benn an deizioù merket evit ar c'hlanidigezh, hervez Lezenn Voizez, e kasjont Jezuz da Jeruzalem da vezañ kinniget d'an Aotrou..." (Lu.2,21).

An diouganerion o devoa roet da c'houzout an donedigezh-se d'ar Mesiaz en e Dempl,lorc'h Israel (Ez.24,21) : "Leuniañ a rin an ti-mañ a glod, eme Zoue..." (Ag.2,8). Rak "a-raok nemeur e teuio en e Dempl an Aotrou a glaskit, Ael an Aotrou a c'hoantait..." (Mal.3,1).

Ha penaos e teu en e Dempl an Aotrou-se ? Kollet e-etouez an engroez,hep gouzout da zen!

Kinnigidigezh e Vab a roas da Zoue en deiz-se, hep mar ebet, muioc'h a glod eget n'o devoa roet dezhañ an holl brofadennoù kinniget en Templ betek neuze. Hogen ar c'hozhiad Simeon hag an diouganerez Anna hepken, sklerijennet gant ar Spered Santel, a anavez ar Mesiaz.Ha ne voe c'hoazh nemet evit degas soñj o devije da c'houzañv, eñ hag e Vamm santel : "Ar bugel-mañ a zo lakaet da vezañ ur sin a enebiezh. Ha te, Mari, a vo treuzet da ene gant ur c'hleze..." (Lu.2,34-35).

Ha kollet en engroez e tostajont "evit kinnig

ur re durzhunelled pe ziv goulm yaouank..." (Lu.2,24).

Gant kinnigadur ar beorion eo e rankas bezañ dasprenet an hini a zeue da zasprenañ ar bed, an hini "a zo dezhañ an neñvoù hag an douar ha kement a zo ennañ..." (Ps.88,12). Pebezh izelidigezh !

Ar Bugel-Doue a c'helle tremen hep seveniñ lidoù an amdroc'hadur, ar c'hinnig hag an daspren. Dreist d'al Lezenn emañ al lezennour. Ha Ger-Doue a oa Lezennour kemennadurioù Moizez. Ouzhpenn-se, n'en deus ar bugel reizh-wiriek na da vezañ perc'hennet na da vezañ anzavet. Ha Mab Doue dre anien eo ar Mesiaz: "Va Mab out-te ; me am eus da c'hanet..." (Ps.2,7).

Gouzout a ra natur mab-den lakaat da dalvezout he zitloù, azgoulenn he gwirioù, lakaat he brientoù en a-raok, pellaatan dismegañsoù hag ar poanioù. Ar Mesiaz avat "n'en deus ket dalc'het d'e gendere evel Doue ; met en eneb, en deus en em izelaet e-unan dre gemer doare ar servijer ha dre sentiñ..." (Phi.2,6-8).

.....

AN HARLU

Setu m'en em ziskouezas un ael eus an Aotrou da Jozef ha lavarout dezhañ: 'Sav, kemer ar bugel hag e vamm ; didec'h da Vro-Ejipt ha chom eno ken na lavarint dit rak Herodez a ya da glask ar bugel evit e lazhañ' Sevel a reas Jozef, kemer gantañ ar bugel hag e vamm e-kreiz an noz, hag en em dennañ da Vro-Ejipt ..." (Mat.2,13-14).

Ar gasoni endeo ! Ne zale ket an diouganou da zont da wir. "Ur maen-skoilh e vezo ; ur garreg a deuker outi ; ur griped evit tud Jeruzalem..." (Is.8,14). "Ar bugel-se a zo lakaet da vezañ diskar hag adsav evit kalz en Israel ha da vezañ ur sin a enebiezh..." (Lu.2,34).

Ha tec'hout a ra Roue Israel, izelek, dindan an deñvalijenn, a-zirak ur c'hevezer. Pe gentoc'h, e bellaat a reer evit e saveteiñ, rak an "hini a laka da vevañ hag a lakada vervel.." (I Sam.2,6), "a zalc'h en e zorn an nerzh hag ar galloud" (I Chron.29,12) ne c'hell ket tec'hout zoken evit en em ziwall diouzh ar mac'homer !

Tec'hadenn boanius evit ar bugel, bloaz dezhañ d'an hirañ. Disparti dic'hortoz ha trumm ; tennad-hent hir ha poanius etre daou benn an deiz evit mont ar pellañ ar gwellañ diouzh ar mac'homer ; kouskedenn e kambr ar stered... Ne c'hell ket an dec'hidi goulenn

degemer, an nozvezhioù kentañ da vihanañ, gant aon rak dedennañ an evezh. Evit tremen an noz en em damoloder en ur pleg-douar; diaesoc'h, paouroc'h ha yenoc'h eo c'hoazh eget kev Betlehem !

Kent na darzho an deiz e sant ar bugel ar yenijenn en e vailhurennoù gleb. E griadennoù a zihun e vamm... Ha bez' ez eus un dra bennak da vihanañ evit digrizañ ur banne dour d'ober un tamm gwelc'hiñ d'ar poupig ?

Nag a reuzeudigezh e-pad ar gerzhadenn hir-se war wenodennoù poultrennek an harlu ! "Ya, gwall-hegaset on bet adal va yaouankiz!" (Ps.128,2).

War-lerc'h ar gerzhadenn-se, hir ha poanius, e tegouezher gant an drevadenn yuzev, bras ha degemerus-tre, diazezet er rannvro-se, en tu-hont d'an harzoù.

En ur vro estren eta eo e tizho ar Bugel-Doue e zeskamant kentañ war ar vuhez. Doue eo, hogen den eo ivez. Hag o vezañ den e rank bezañ sujet da holl lezennoù kreskadur ar c'horf hag ar spered e-keñver an oad-kentañ, an oad-krenn hag an oad-gour : "Ar Bugel a greske hag a greñvae, ha leun e oa a furnez." (Lu.2.)

War an douar a harlu eo e tistago ar Ger, Krouer ar Bed, e gentañ komzoù : "Immi (mammig)" ; "Abba (tadig)" ; ez arnodo ar Furnez hollbadel he c'hentañ pazioù, - n'eo ket avat hep stekiñ kalet ouzh an douar m'o deus poaniet he gourdadoù warnañ, nag hep ur bosigern bennak ouzh he zal ; e c'halvo an Hollc'halloudeg e vamm war e sikour, aon ennañ rak unan eus e grouadurion. Ya, 'kouezhet on war an douar hon resev holl en hevelep doare; hag evel gant an holl, desevet on bet e-touez

ar gouelvanoù hag an trubuilhoù..." (Sap.7,3-4).

Evel gant an holl (nemet an harlu ouzhpenn marteze), poanioù bihan diniver an oad kentañ a laka e zaeroù da redek, daeroù avat ma vez a-walc'h ur pokig digant e vamm d'o sec'hiñ war e zivjod.

Deuet keloù dezhañ dre un ael e oa marv Herodez ezeas Jozef kuit eus Bro-Ejipt "hag e teuas da chom en ur gêr a oa hec'h anv Nazared, evit ma teufe da wir ar pezh a oa bet lavaret gant an diouganer : Nazaredad e vezo graet anezhañ." (Mat.2,23). Ne oa ket un titl enorus rak ne oa ket brudet kalz ar gêriadenn - war a hañval : "Hag eus Nazared e c'hell dont un dra vat bennak ? " (Joa.1,46).

Ur wech erruet er gêr e vez graet gourc'hemmennoù d'ar vamm evurus : karet e vez kalz ar vugale en Israel. "Bravat krouadurig!" a estlammer. Se a zo evit ober plijadur d'ar vamm marteze rak skuizh-marv, e-giz e dud, e oa ar paotrig o tegouezhout, war-lerc'h un hir a veaj war gein un azen, a-hed un tri-c'hant kilometrad bennak dre wenodennoù poultrennek. Soñjit en un avrelod, ruziet e zaoulagad gant huchenn an hent, livrin e zivoc'h gant gwrez an deiz, sanket an hanter eus e zornig en e c'henoù, gant an hiraezh pe marteze, piv 'oar, dre ma oa ur gwall gildant bennak o klask toullañ munsunoù ar bugelig kaezh...

An tri bloavezh kentañ eus buhez un den a zo ar re galetañ, war a lavarar, ha pa vefed ur bugel moumoun zoken...

.....

AR BUGEL A NAZARED

E Nazared ez eo buhez paour ha dizarvoud un tiegezh dilorc'h a vicherourion diwar ar maez. "Evit ar bugel, - kreskiñ ha kreñvaat a rae, leun a furnez..." (Lu.2,40).

Ur bugel fur eo Jezuz. Ober a ra levenez e dud ; reiñ a ra un taol skoaz dezho evit labourioù munut ar gilvizerezh hag an ti : "Me ivez a zo bet ur mab e-keñver va zad, ur mab tener ha nemetañ e-keñver va mamm..." (Prov. 4,3).

Kas a ra da beuriñ an daou pe dri dañvad a vez da bep tiegezh paour war ar maez. Mont a ra da skol ar sinagogenn, c'hoari gant e gamaladed hag e gendirvi (ar re-mañ e ra an Aviel e vreudeur anezho, Mat.13,35, hervez un dro-lavar semitek). N'eus netra en e zoare avat a laka kemm etrezañ hag ar vugale all a oad gantañ. "Dilezet en deus e gendere gant Doue oc'h en em lakaat heñvel ouzh un den..." (Phi. 2.,7).

A-vihanik, koulskoude, en deus Jezuz an emskiant eus e vaberezh-Doue hag eus e gefridi a zasprenour. Ar respont a ro d'e dud en Templ henn diskouez ervat : "N'ouzoc'h ket em eus da vezañ war-dro traoù va Zad ?" (Lu.2, 49).

Petra a c'hell soñjal ar bugel-se neuze, pa lenn, e skol ar sinagogenn, dindan renerezh

ar mestr, el Levrioù Santel n'eus nemeto da lenn en amzer-se, pennadoù zo o taolennañ e donkadur-eñ e-unan ? "Kinniget em eus va diskoaz d'ar re a skoe ganin ; n'em eus ket kuzhet va dremm ouzh an dismegañsoù hag ar skopadennoù..." (Is.50,6). "Arerion o deus aret va c'hein ; treset o deus irvi hir warnañ..." (Ps.128,8,17). "Kement hini am gwel a ra goap ouzhin. Rak chas e-leizh a zo en-dro din ; ur bagad tud fall am arsailh ; toullañ a reont va daouarn ha va zreid..." (Ps.21,8,17). "Adalek sol an treid betek ar penn n'eus netra a yac'h : gloazioù, goulioù bev ha n'int ket bet lienet na louzaouet gant an eoul gwakaus... Bet eo trebarzhet, brevet ha ne zigore ket e c'henoù, evel un oan kaset d'ar gigerezh..." (Is.1,6 ; 53,5,7).

D'an oad-se e vezer plijet a-walc'h gant an danevelloù spouronus. Re griz eo houmañ avat. Ha pa ouzer e vior an haroz hag ar gouzañvad anezhi ! Na pebezh dazont dedennus evit ur bugel eizh pe zek vloaz, leun a nerzh hag a yec'hed, ha na c'houlenn ken tra nemet bevañ ! Pet gwech, e-pad ar pedennoù hag al lennadennoù er gêr pe er sinagogenn, he devo Mari graet ouzh he Mab goulennou enkrezet o stagañ he sell ouzh e hini !

Padal, d'an oad-se e tisoñjer buan ar reuzioù da zont. Ugent, pemp bloaz warn-ugent, se a zo ken pell p'emeur bugel ! O tont er-maez eus ar sinagogenn ne soñj ken en diouganou. C'hoari a ra da vat gant e genskolidi war hent an distro, - gant e gendirvi hag e amezeion vihan ur wech deuet d'ar gêr. "N'eus c'hwervder ebet ouzh e zaremprediñ, anoaz ebet, levenez ha joa avat..." (Sap.8,16).

Ur vouezh flour a laka ar c'hoarioù da baouez : "Jezuz, pelec'h emañ da zeñved ? " "Ya, mammig, emañ o vont..." Hag eñ gant e loened : div pe deir dañvadez, o oaned, hag an azen kozh a oa aze paz eo bet ganet, an hini en deus e zouget-dizouget war hentoù an harlu, ha servijer mat da Jozef c'hoazh.

An ein-se o lammat en-dro d'ar bugel a zegas soñj dezhañ ez eo-eñ ar Mesaer, ar Pastor degaset gant an Tad da salviñ e bobl : "Salviñ a rin va deñved, eme Zoue ; lakaat a rin warno ur pastor hepken hag a vo priñs warno" (Ez.34,22-24). An ein habask-se avat a zegas soñj dezhañ ivez " e ro ar Pastor e vuhez evit e zeñved..." (Joa.10,11), hag ivez pe dre zoare e vo Salver : "Evel an oan kaset d'ar gigerezh..." (Is.53,7). Hag an holl ziouganou glac'harus a zeu en-dro d'e soñj.

Kaerderioù ar maezioù avat a gas kuit ar soñjoù du. C'hwesha a ra Jezuz frond ar gwinizheier hag ar gwinieier dasstrewet a vleunioù. Pignat a ra war gribenn un dorgenn da arvestiñ en diabell ouzh an erc'h o skediñ war Menez Hermon hag ouzh ar mor o strinkelikat. Neuze e kan meuleudi da Zoue en abeg d'an holl gaerderioù-se : "Kanit d'an Aotroù, holl oberoù an Aotroù ! E veulit hag e ganmeulit da holl viken ! Skorn hag erc'h, meulit an Aotroù ! Menezioù ha krec'hioù, meulit an Aotroù ! Holl blant an douar, meulit an Aotroù ! Morioù ha stêrioù, meulit an Aotroù ! Loened gouez ha tropelloù, meulit an Aotroù : meulit ha kanmeulit-eñ da virviken ! " (Dan.3,57...)

Pa vez alaouret ar c'hrec'hiennoù gant an heol o vont da guzh, e tistro Jezuz d'ar gêriadenn, pignet war an azen kozh habask. Eeunhag-eeun e teu neuze d'e spered an diougan

kozh, hag e ganañ a ra a-bouez-penn evit diskouez al levenez ez eo leun-barr e ene ganti o welout kaerder ar bed krouet : "Trid eta gant al levenez, merc'h Sion ! Kan gant al laouenidigezh, merc'h Jeruzalem ! Setu ma teu da Roue davedout. Santel ha Salver eo, izelek hag azezet war un azen..." (Za.9,9). Laouen eo da vihanañ ar pennad-mañ hag a embann donedigezh ar Mesiaz da Jeruzalem !

Prestik goude avat, a-daol-trumm, e tav ar bugel, kollet en un huñvre... Ur soñj teñval a aloub e ene adarre. Ya 'vat ! An dra-se a c'hoarvezo dres paz aio da Jeruzalem : "Lezet e vo Mab an Den etre daouarn ar veleion-vas hag ar Skribed ; ganto e vo barnet d'ar marv, daskoret d'ar Baganed a raio goap anezhañ, hag a skourjezo anezhañ a-raok e lakaat d'ar marv..." (Ma.10,33-34).

E gwirionez, evit ur bugel, nag ur preder dalc'hus, mantrus, nag ur pistig peurbadus !

Distro er gêr e sikour Jezuz e vamm da aozañ boued. Mont a ra da gerc'hat un tamm bod spern disec'h d'ober tan, ar seurt spern-se a zo hir ha kalet-houarn he drein, hag a ra dezhañ soñjal en e gurunenn da zont !

Danevellañ a ra d'e vamm ar pezh en deus gwelet hag arvestet outañ war ar maezioù. Da c'houde e ra un dro e stal Jozef ; dedennus e vez bepred d'ur paotr gwelout labour e dad. Ha klevout a ra an taolioù morzhol a sank ar potennoù bras er c'hoad : dao, dao ! Ha trumm e vez degaset d'e soñj komzoù mestr ar sinagogenn : "Toullañ a reont va daouarn ha va zreid..." (Ps.21,17).

A-ratozh eo, hep mar ebet, en deus ar Mesiaz dibabet da vamm ur vaouez a-ziwar ar maez, ha da dad un dornvicheour, ur c'halvez !

"Ha Jezuz a greske, leun a furnez.." (Lu.2, 40). Hep ket a var : gant ur skol eus ar seurt-se e teuer buan da vezañ poellek !

"Izaag a lavaras d'e dad : 'Setu an tan hag ar c'heuneud ; met pelec'h emañ an oan evit an aberzh ? 'Hag Abraham da liammañ Izaag, e vab, d'e lakaat war an aoter, war ar c'heuneud, da gemer e gontell evit troc'hañ e c'houzoug d'e vab..." (Gen.22,7,9-10). Den n'en deus lennet an arroudenn-mañ hep bezañ bet fromet gant an druez. Koulskoude, kuitez e voe Izaag gant ur vunutenn bennak a spont. E vuhez-pad avat en devezo bet Jezuz ar gwel eus e Basion !

*** *** ***

D'e zaouzek vloaz e teu ar bugel da vezañ "mab al Lezenn" ha diwar neuze e vez dalc'het gantañ d'he gourc'hemennoù: yun d'an deizioù a binijenn, pirc'hirinded d'an Templ d'an deizioù-gouel bras : "Teir gwech ar bloaz ez aio ar wazed dirak Yaweh, ho Toue, d'al lec'h en devoa dibabet..." (Deut.16,16).

"Pa voe deuet Jezuz d'e zaouzek vloaz e pignjont da Jeruzalem, evel ma vezent boas d'ober, da zeiz gouel Fask..." (Lu.2,42).

Ar c'hentañ pirc'hirinded-se hervez al Lezenn a ro tu da Jezuz d'en em ginnig d'e Dad adarre : "Nag aberzh, na profadenn n'o deus plijet dit ; met ur c'horf ac'h eus kempennet din [evit e aberzhañ dit]. N'ac'h eus kavet mat nag al loskaberzhioù^o nag al lidlazhioù evit ar pec'hed ; neuze e teuan evit ober da youl, ô Doue..." (Hebr.10,5-7).

Henn gouzout a oar Jezuz : e gorf a vo an

dic'haou n'eus nemetañ kavet mat gant an Tad. Ha begeliadegoù an ein ha c'hwezh ar maged o sevel diwar al loskaberzhioù a zegas soñj dezhañ ez eo-eñ "Oan Doue a zilam pe-c'hed ar bed..." (Joa.1,29), hag e vo dasprenet an dud "gant gwad prizius an Oan dibec'h ha dinamm-se..." (I Pe.1,19). Setu perak e chom da ziskleriañ pell amzer d'an doktored dis-megañsoù, poanioù ha marv ar Mesiaz. Ha, boazet maz int da sellout ouzh e glod hag ouzh e c'halloud hepken, "e chomont sebezet-holl..." (Lu.2,47).

En oad emañ Jezuz, hervez al Lezenn, ha kret d'e oberoù. Henn diskouez a ra dre e emzalc'h en Templ hag e respont d'e dud: "Perak eta em c'hlaskec'h ? Ne ouzoc'h ket em eus d'ober war-dro traoù va Zad ? " (Lu.2,49).

Neuze emañ Jezuz o vont d'en em frankizañ diouzh e dud ? Henn ober a c'hell, hag emañ en oad ma vez ar re yaouank youlek da vezañ dizalc'h ha dedennet d'en em dremen da dud ; hag ouzhpenn, Doue eo. Koulskoude'e tiskennas gant e dud hag e teuas da Nazared, ha sentus e veze outo..." (Lu.2,51).

"Hag eñ Mab Doue, en deus desket dre c'houzañv petra eo ar sentidigezh..." (Hebr.5, 8). "En em izelaet en deus dre sentiñ..." (Phi. 2,8).

oooooooooooooooooooooooooooo

AR C'HALVEZ A NAZARED

"Diwar c'hwezenn da dal e tebri da vara," (Gen.3,19). Anat eo ne c'helle ket ar Salver pellaat dioutañ ar pezh a zo un heuliad eus ar pec'hed. Desket en deus anaout an dra-se, hag a-vihanik, war-dro dek pe unnek vloaz rak "ned eo ket chomet pell er skol..." (Joa.7, 18). Ha setu neuze "Galloud ha Furnez Doue" (1 Cor.1,24) o teskiñ ar vicher a galvez dindan renerezh Jozef.

Micher galet evit ur bugel, gant ar binvioù a oa en implij d'ar mare-se. Ret eo ober pep tra a-bouez an dorn : diskar, kilviziañ, raskañ ... D'an oad-se, ha pa vezer nerzhik ha kalonek, e vezer gwak ouzh al labour, ha diampart ivez. Dre-se e reuzier ouzh barradoù skuizhder torrus ha divius : evit Jezuz evel evit ar re all ez eo evel-se ez a ar vicher er c'horf, evel ma lavarer.

Un abardaez, war a gonter, e teu Mari tre er stal-labour da lienañ he Mab a zo troc'het ledan e zorn dezhañ gant ur gizell en ur echuiñ laz un arar. O welout ar gouli hag an tamm koad-se e stumm ur groaz ha ruziet-holl a wad e sav dour da zaoulagad ar Wer-c'hez a soñj diouzhtu er C'halvar. Neuze, Jezuz, habask ha laouen : "Ned eo netra, mammig ; gwashoc'h ' vo din c'hoazh ! " Hag eñ da boket d'e vamm d'e frealziñ.

Ur vojenn e vefe houmañ ? A c'hellfe bezañ. Pegen gwirheñvel eo koulskoude ! Seurt reuzioù a vez gant ar vicher-se. Ha daoust ha n'en deus ket fellet dezhañ kaout anaoudegezh eus hon holl boanioù ?

"Ne oar ket an den petra a c'hoarvezo gantañ..." (Eccl.10,14). Gouzout a oar Jezuz, eñ, petra a c'hoarvezo gantañ. Na pa vez o tougen ur planken war e skoaz pe o sankañ tachou, - pep tra a zegas dezhañ dalc'hmat soñj eus e donkadur. Gwell eo chom hep anavezout an dazont, a lavarer. Gwir eo, - dreist-holl pa vez ken kriz ! Gant pellweladoù eus ar seurt-se, e gwirionez, e teu ar vuhez da vezañ ur gwir gwallhuñvre. Gant ul levenez don eo koulskoude e kalviz ar prenn ma vo tachet warnañ un deiz evit dasprenañ ar pec'hed, rak ar prenn a zegas dezhañ bepred soñj eus e gefridi.

Desket ar vicher gant Jezuz, setu ma klañv ha ma varv Jozef : un disparti gloazus hag a lez karg an tiegezh gant an den yaouank.

Kalet e vez ar vuhez a-wechoù. Paour e vez an dornvicherour, hag e dalc'h an arvalion e vez e vevañs. Dont a ra Jezuz da c'houzout petra eo bezañ degemeret gant komzoù ginet o tegas ar pezhioù-arrebeuri bet fardet gantañ, gant gevier a-wechoù all a-berzh klianted displeal ha na fell ket dezho paeañ, gwelout ar varc'hadourezh aozet dezhañ distailet war zigarez pe zigarez gant ostizion dagnouz, klevout rebechoù c'hwerv digant mondianed rok. Ne ziskouezer azaouez dibar ebet e-keñver ar paotr yaouank bet ganet a dud paour. "Ha n'eo ket hennezh eo mab Mari ? " (Ma.6,3). A-wechoù e vez kerse gantañ ; a-wechoù e vez doaniet. Ne glemm ket evelato : ar gwall ne dizh e

doare ebet "an hini a zo ganet santel" (Lu.1, 35) hag "emañ o chom hag o kemer korf ennañ kefleunded an Doueelezh..." (Col.2,9).

Fellet eo da Jezuz sammañ hon tonkadur en e bezh : hor reuzeudigezhioù, hon enkrezioù, hor strivoù, hol labourioù, hor skuizhderioù, hon dismegañsoù. "N'eo ket deuet Mab an Den evit bezañ servijet, met evit servijout..."(Mat. 20,20). Hag hep gouzout da zen en em brient d'e gefridi dre ar bedenn hag ar boan.

Tremen tregont vloaz eo Jezuz; ha den ebet, nag e-touez e genvroidi nag e-touez e gerent nesañ zoken, ne oar ha ne zamgred ez eo ar micherour paour-se ar Mesiaz ken gortozet, Mab Doue : "Ha n'eo ket hennezh mab ar c'halvez? Ha n'eo ket e vamm an hini anvet Mari ? " (Mat.13,55). "E vreudeur - e gendirvi - o-unan ne ouient ket ! " (Joa.7,5). "E gwirionez, un Doue kuzh out-te, Salver Israel ! " (Is.45,16).

oooooooooooooooooooooooooooo

AN DOUE PENEDOUR

Tregont vloaz eo Jezuz: an oad ma kemer ar veleion o c'harg (Num.4,3).Emañ ar Rakkannad "an den-se kaset gant Doue, Yann e anv,"(Joa. 1,6) endeo o prezeg donedigezh ar Mesiaz:"Grif pinijenn, rak tost emañ Rouantelezh an Neñvoù ..." (Lu.3,6). An arouez roet gant an Tad eo "ur vouezh a youc'h er gouelec'h..."(Is.40,3). Respont a ra Jezuz : "Setu me, Tad : dont a ran evit ober da youl..." (Ps.39,8-9). Serriñ a ra e stal, ha mont kuit eus e di. Un aberzh bras eo dezhañ mont digant e vamm ha diwar e labour."

"Neuze ez eas Jezuz da gavout Yann, war ribl ar Yordan, evit bezañ badezet gantañ..." (Mat.3,13).

Holl vuhez prevez Jezuz a zo bet sentidigezh hag izelegezh. Kentañ gread e gefridi dirak an holl a zo un ober a sentidigezh hag a izelegezh ivez. Badeziant Yann a zo "ur vadeziant a geuzidigezh evit distaol ar pec'hedoù..." (Ma.1,4).O tont e-touez engroze ar benedourion da resev al lid-se evit ar bec'herion ha da c'hrátaat ober pinijenn en em laka a-youl e renk ar bec'herion an hini a zo "santel, dibec'h, didamall, dispartiet diouzh ar bec'herion..." (Hebr.7,26).

Ar Rakkannad e-unan a zo souezhet: "Me eo

am eus ezhomm da vezañ badezet ganit, ha te eo a zeu d'am c'havout ! " - "Lez da ober, eme Jezuz, rak evel-se e tleomp kas da benn pep reizhder..." (Mat.3,14-15).

Ha petra eo pep reizhder ? Bez' ez eo en em laka Jezuz e renk kentañ ar bec'herion "o vezañ m'en deus Doue e lakaet da vezañ pec'hed evidomp..." (II Cor.5,21) rak "an Oan dibec'h ha dinamm eo an Aotrou Krist..." (I Pe.1,19) a zo "an Oan a zilam pec'hed ar bed..." (Joa.1, 29).

An Tad e-unan a gav mat teurel evezh ouzh an izelegezh-se kontrol da lorc'h ar pec'her : "Hemañ eo va Mab muiañ-karet am eus lakaet ennañ va levenez..." (Mat.3,17).

"War benn ar bouc'h e lakaio Aaron an holl bec'hedoù, hag e roio urzh d'e gas d'ar gouelec'h ; ar bouc'h a gaso gantañ an holl bec'hedoù d'un douar distro..." (Lev.16,21-22). Bouc'h ar pec'hed, koulz lavaret, eo deuet Jezuz da vezañ : "Warnañ en deus Doue lakaet pec'hedoù pep hini ac'hanomp. Ha Jezuz e-unan en deus kemeret hon drougeroù war e choug," (Is.43,11). Neuze, evel bouc'h ar pec'hed, "e voe blieniet Jezuz gant ar Spered d'ar gouelec'h..." (Mat.4,1).

En ur resev badeziant Yann en deus grataet Jezuz ober pinienn. Kentañ a reas e voe seveniñ e ouestl. E-kreiz ar c'hrec'hiennoù krin ha didud tost da Jeriko, e-unan "gant al loened gouez" (Mat.1,13), dindan gwallamzer ar maread yen ha glavek-se, "e yunas e-pad daou-ugent devezh ha daou-ugent nozvezh..." (Mat.4,2). Yun klok ; "Tamm ne zebras e-doug an deizioù-se..." (Lu.4,2). Pinienn galet, hir ha dreistlavar ! Ha dalc'homp soñj en deus Jezuz an hevelep natur-den ha ni ; ha mar yun evit ober pinienn ne raio ket ur burzhud da

skañvaat e samm.

"Va magadurezh eo ober youl an hini en deus va degaset..." (Joa.4,34). Ac'hanta, fonnus e vo ar vagadurezh war ar menez-mañ ! Diwar ar c'hrec'hiennoù gouelec'hek-se endeeun e spurmant Jezuz an hent a gas a Jeriko da Jeruzalem, un hent ma valeo warnañ un deiz da vont d'ar marv... Neuze e soñj er pezh a c'hello lavarout d'e ziskibion : "Setu : pignat a reomp da Jeruzalem ha Mab an Den a vo lakaet etre daouarn ar Veleion-Vras hag ar Skribed ; ganto e vo barnet d'ar marv ha daskoret d'ar baganed a raio goap anezhañ, a skopo ouzh e zremm, a skourjezo anezhañ hag a stago anezhañ ouzh ar Groaz..." (Ma.10,33-34). Hennezh eo youl e dad... e vagadurezh !

Ha muzuliañ a ra Jezuz kement a ya d'ober e gefridi galonek, ha kement poan euzhus a zo dalc'het enni. Neuze e ped an Tad da reif dezhañ an nerzh rekis. Hag asantiñ a ra d'an aberzh-uhelañ : "Ra vo graet ar pezh a fell dit, Tad ! " (Mat.26,39).

A-benn an daou-ugent devezh ha daou-ugent nozvezh-se a zigenvoud, a yun klok, a brederiadur, a sentidigezh ouzh youl Doue, a asantidigezh d'an aberzh, "e teuas naon dezhañ ; hag an temptour da dostaat outañ..." (Mat.4, 2-3).

*** **

"Deuet eo Mab Doue evit distrujañ oberoù an diaoul..." (I Joa.3,8). Dereat eo dezhañ neuze kregiñ gant e gefridi dirak an holl dre ur stourmadenn ouzh an enebour-se ha kaout en e gefiver un emzalc'h disheñvel-krenn diouzh hini ar pec'her. Ar pastor degaset gant Doue "evit

bezañ priñs war e zeñved" (Ez.34,24) a zle,da gentañ, stourm ouzh "priñs ar bed-mañ". (Joa. 14,30) ha gounit an trec'h warnañ.

Evit Jezuz n'eo ket atizadur an diaoul ur blijadur, - un emgann hag un enkreuz, ne lavaran ket ; un emgann seul boaniusoc'h maz eo Jezuz diviet gant daou-ugent devezh a yun hag a anken.

Ar c'houlz mat-se eo a zibab an diaoul ha da gregiñ e kinnig dezhañ terriñ e naon: "Maz out Mab Doue,gourc'hemenn d'ar vein-mañ treiñ da vara..." (Mat.4,3). Komz eus bara d'ur stomok marnaoniet gant daou-ugent devezh a yun klok ! Hennezh hepken hag a zo bet duet gant an naon a c'hell gouzout pebezh merzhrinti ha pebezh riskl a sav diwar hevelep komzoù.

Graet gantañ tro-wenn oc'h atizañ al lontegezh e klask an diaoul broudañ ar vrasoni ha c'hoantegezh ar madoù. N'eus tu ebet avat da drec'hiñ war Jezuz : "Kerzh kuit, Satanaz... E lezel a reas neuze an diaoul..." (Mat.4,10-11). "Emañ Priñs ar Bed-mañ o tont hogen n'en deus galloud ebet warnon..." (Joa.14,30).

oooooooooooooooooooooooooooo

AR MAEN SKOILH

O tont er-maez eus ar gouelec'h e sko Jezuz war-du ribloù ar Yordan.Ha Yann d'estlammiñ: "Setu Oan Doue,an hini a zilam pec'hed ar bed ..." (Joa.1,29).

Erru eo deiz ar silvidigezh merket gant Doue : kregiñ a ra Jezuz gant e gefridi a-ouez d'an holl. Neuze e reno e-pad ouzhpenn daou vloaz buhez kalet an abostol, buhez ur baleerbro: "Hent a rae a-dreuz kêrioù ha bourc'hioù, en ur brezeg hag en ur embann keloù-mat Rouantelezh Doue..." (Lu.8,1), a sinagogenn da sinagogenn, a rannvro da rannvro,meur a wech "skuizh gant an hent" (Joa.4,6),o vevañ diwar aluzonoù,o kousket e ti e vignoned pe e kambr ar stered : "Al lern o deus toullou ha laboused an neñv o deus neizhioù; Mab an Den avat n'en deus lec'h ebet da harpañ e benn..."(Lu. 9,58). Ur vuhez gouestlet en he fezh d'ar re all: "Kement a dud a veze o tonemoneañ en-dro dezho ma ne gavent ket zoken amzer da zebriñ boued.Ne vern pelec'h ez ae,bourc'hioù,kêrioù, pe diegezhioù war ar maez, e lakaed ar re glañv war al leurennoù hag e peded anezhañ d'o lezel da stekiñ ouzh bevonn e vantell ; ha kement hini a stoke outañ a veze paret..." (Ma.6,31,56).

Daoust ma oa bec'hius an devezhiadoù-se e tremene Jezuz darn eus an nozvezh pe an nozvezh a-bezh o pediñ, hep diskuizhañ.

E Kafarnaom en devoa kelennet er sinago-
genn, dieubet un den diouzh an diaoul, pareet
mamm-gaer Bêr, ha "pa voe deuet an abardaez-
noz hag aet an heol da guzh e voe degaset
dezhañ an holl glañvourion hag ar re a oa
dalc'het gant drouksperedoù... hag antronoz
vintin, pa oa teñval anezhi c'hoazh, e savas
hag o vont er-maez e pellaas betek ul lec'h
distro evit pediñ..." (Ma.1,32,35).

E dibenn devezh skuizhus ar greskadez vara
"goude bezañ rediet e ziskibion da bignat er
vag ha da dreizhañ en e raog d'an tu all ez
eas war ar menez da bediñ. Ha war-dro ar
pevare beilhadenn-nnoz - war-dro teir eur eus
ar beure - e teuas en ur gerzhout war ar mor,
davet e ziskibion, bec'h bras dezho rak an
avel a oa a-benn..." (Ma.6,45,46,58).

E Jeruzalem "e veze en Templ e-doug an
deiz o kelenn. Ha diouzh an noz e chome war
ar menez anvet Menez an Olivez o pediñ (ha
petra e oa an divizoù hirbad-se tal-ouzh-tal e-
unan gant e Dad ?) Ha beure mat e teue ar
bobl davetañ d'an templ evit e selaou..." (Lu.
21,37-38).

Hag an arvestoù-se danevellet gant an avie-
lourion ne c'hoarvezent ket bep an amzer, -
bemdez, ne lavaran ket, pe dost. Ha koulskoude
- goude an devezhioù divius e vije bet dleet
mat - ha talvoudus-kenañ - kemer un tammig
repoz. Hogen e-pad hogozik tri bloaz ne roas
Jezuz astal ebet d'e brezegerezh.

"A bep tu e teued d'e gavout ; ar bobl
a-bezh a zerede d'e saludiñ (Ma.9,15), "dre ma
oa bamet ar bobl gant e gelennadurezh" (Mat.
22,33) ha "dre ma tremene Jezuz oc'h ober ar
mad hag o tieubiñ kement hini a oa dalc'het
gant an Droukspered..." (Act.10,38). Hag an

drivliadeg-se a oa dezhañ, hep mar ebet, un
digoll eus e skuizhderioù ha, dreist-holl, ur
frealz e-kreiz e boanioù, diveizusted an engroez
ha kasoni e enebourion. Rak, e gwirionez, ne
ne vanke nag an diveizusted nag ar gasoni !

"Un neved e vo ; hogen ur maen-skoilh e vo
ivez, ur garreg a deker outi..." (Is.8,14). "Ur
sin a enebiezh..." (Lu.2,34) o devoa lavaret
Izaiaz ha Simeon. Da wir e teu o diouganou,
adal an derou, ha mui-ouzh-mui.

"Kalz a dabut a oa diwar e benn e-touez an
dud. Darn a lavare: 'Un den mat a zo anezhañ'
- 'N'eo ket,' a lavare darn all. 'Touellañ a
ra an dud.' Reoù zo a zisklerie : 'Hemañ, evit
gwir, a zo ar Profed.' Hiniennou all avat a
enebe : 'Hag eus Galilea e teufe ar Mesiaz ?
N'eo ket eus Betlehem ? ' Disrann a oa eta
e-touez an dud en abeg dezhañ..." (Joa.7,40,
41,43).

Paz erruas Jezuz war zouar Genezared "e voe
degaset dezhañ an holl dud klañv hag e bediñ
a raent d'o lezel da stekiñ ha, pa ne ve ken,
ouzh bevenn e vantell..." (Mat.14,35-36). Met
pa zegouezhas e Kafarnaom da zasorc'hiñ
merc'h Yairoz, "e raent goap outañ..." (Mat.9,
24.)

E Sic'har, "pa oa deuet ar Samaridi d'e
gavout e pedent anezhañ da chom ganto..."
(Joa.4,40). Met en ur vourc'h all eus Samari "ne
voe ket degemeret gant tud ar gêriadenn..."
(Lu.9,53).

E Kafarnaom "e oa an engroez ouzh e glask.
P'o devoe e gavet e talc'hjont warnañ evit nad
aje ket diouto..." (Lu.4,42). Degouezhet e bro
Gadara avat "ez eas an holl dud kêr a-benn-
hent dezhañ ; ouzh e welout e pedjont anezhañ
da bellaat diouzh o douarou..." (Mat.8,34).

"E Kafarnaom - adarre - en em lakaas da

gelenn er sinagogenn da zeiz ar sabad. Souezhet -bras e voe an dud gant e gelennadurezh. Hag ar vrud anezhañ a redas kerkent e pep lec'h." (Ma.1,21-22,28). "Degouezhet e Nazared, kêr e vugaleerezh, e savas en e sav evit ober al lennadenn er sinagogenn da zeiz ar sabad; an holl avat a yeas droug enno. Hag i o sevel d'e vountañ er-maez eus kêr ha d'e gas betek un tarroz eus ar menez evit e stlepel d'an traoñ; o tremen dre o c'hreiz avat ez eas kuit..." (Lu.4,16, 28-30).

Gouzout a ouie Jezuz e oa tonket d'an traoñ bezañ evel-se; lavaret e oa bet gant an diouganerion. Koulskoude, an disranniez-se, an divezusted-se, an heskinadur-se, a oa poanius-bras evitañ, hag eñ "ken hegarat ha ken izel a galon..." (Mat.11,29), "degaset da ziskleriañ ar c'heloù-mañ d'ar beorion, da frealziñ ar re a zo mantret o c'halon, da gemenn d'ar brizonidi e oa bet digoret dor o zoull-bac'h, da embann ur bloavezh a drugarez a-berzh an Aotrou..." (Is.61,1-2), "da reiñ e vuhez evel daspren evit an dud..." (Ma.10,43).

Seul washoc'h a se e oa doaniet Jezuz moarvat gant kasoni ruz e enebourion touet, stank o niver: pennoù-bras, lezennerion, beleion, skribed, sadukeidi, farizianed! "Stankoc'h eget blev va fenn eo ar re a vag ouzhin kasoni hep abeg, ar re a implij ar gaou a-enep din!" (Ps.68,5).

Mennoziou an den difeiz e-keñver an den reizh evel maz int livet gant skrivagnour Levr ar Furnez, ha doareoù-ober e enebourion evel maz int dançvellet gant ar Salmour, a skeudenn deomp gwir boltred enebourion Jezuz:

"Enkomp an den reizh, peogwir e ra diaez deomp ha peogwir en em sav a-enep d'hon

doare-bevañ, pa damall deomp terriñ al Lezenn ha bezañ treitourion d'an diorroadur a zo bet roet deomp. Stad ennañ e lavarez eo perc'henn da anaoudegezh Doue hag ober a ra anezhañ e-unan Mab an Aotrou. Bepred emañ aze evel ur rebech d'hor soñjoù, hag ar gwel anezhañ hepken a zo deomp ur bec'h. Rak e vuhez n'eo heñvel tamm ebet ouzh hini ar re all, disheñvel -krenn maz eo e stumm-bevañ. War e veno ned omp nemet breinadurezh; hag en em fougeal a ra da gaout Doue da Dad... Amprouomp-eñ gant dismegañsoù ha boureviadurioù, maz anavezimp e basianted ha ma welimp, en efed, e habaskter. Ha kondaonomp-eñ d'ur marv mezhus..." (Sap.2, 12-16, 19-20). "Va enebourion a wash war va c'homzoù a-hed an deiz. O holl vennoziou a zo troet a-enep din da n'azout ouzhin. En em strollañ a reont e-kuzh evit spiañ va c'hammedoù ha magañ gwall-gasoni ouzhin..." (Ps.55, 6-7).

"Evitañ da vezañ graet kement a vurzhuoù dirazo, ne gredent ket ennañ..." (Joa.12,37)... "hag evit gwaskañ warnañ e c'houlennent c'hoazh digantañ diskouez dezho ur sin eus an neñv..." (Mat.16,1).

"Droug bras enno en em lakajont da zerc'hel warnañ hag ober dezhañ komz diwar-benn kalz a draoù, en ur stegnañ antelloù dezhañ da bakañ ur gomz bennak eus e c'henoù..." (Lu. 11,53-54). "Perak debriñ hag evañ a-gevret gant publikaned ha pec'herion... Perak e chom da ziskibion-te hep yuniñ, tra ma yun diskibion Yann? Perak ne vironent ket Hengoun ar re gozh, pa gemeront o fredoù gant daouarn dic'hlan?" (Ma.2,16,18;7,5). "Setu ma ra da ziskibion - o tifrannañ pe o vresañ pennoù-ed d'o debriñ - ar pezh a zo difennet ober d'ar sabad... Hag aotre a zo livez da reiñ ar

pare da zeiz ar sabad ? Dre beseurt gwir e rez an traoù-se - kelenn en Templ - ha piv en deus roet dit ar galloud-se? Hag aotre en deus ar gwaz da gas kuit e wreg evit n'eus forzh peseurt abeg ? " (Mat.12,2,10; 21,23; 19,3). "Ar vaouez-mañ, tapet en avoultriezh, a zle bezañ labezet, hervez lezenn Voizez : ha te, petra a lavarez ? " (Joa.8,4-5). "Pe aotre a zo pe n'eus ket, da baeñ an truj da Gaezar ? ..." (Mat.22,17).

Dre ar goulennou lorbis-se e klaskent hep ehan an tu d'e faezhañ ha d'e lakaat da goll e vrud ha da zegas warnañ enebiezh ar rabined, eus an eil rangredenn pe eben, pe ar Romaned. "Hogen ne c'helljont ket e dapout en e gomzoù..." (Lu.20,26), rak gant ampartiz ha nerzh e responte Jezuz "d'ar ouenn fallakr hag avoultrerez-se, d'ar skribed ha farizianed pilpous-se, tud diboell ha dall, beziou gwennrazhet ha gouenn naered-gwiber..." (Mat.12,39; 23,13,17,27,33).

Kounnariñ a raent neuze : "Arabab dit diouganañ en anv Doue, pe anez, e varvi dre hon daouarn..." (Jer.11,21). Ha dre o c'hounnar - evit e zivrudañ dirak ar bobl e roent dezhañ ar gwall-anvioù dismegusañ : "Daoust ha n'emañ ket ar gwir ganeomp pa lavaromp ez out ur Samariad ? " (Joa.8,48). Ur Samariad, hag un disivouder eta ! Ar gunujenn euzhusañ-holl ouzh un Israelad ; ouzh Jezuz neuze, Mab Doue ! "Gouzout a ouzomp ez eo an den-se ur pec'her..." (Joa.9,24). "Komzoù disakr a zo gant he-mañ..." (Mat.9,3). "Un droukspered a zo ennañ hag emañ o sodiñ..." (Joa.10,20). "Ul lonteg eo, un ever gwin, ur mignon d'ar publikaned ha d'ar bec'herion..." (Mat.11,19).

Dallet ha broudet gant o c'hasoni griz, "e

kasjont gwarded da gregiñ ennañ..." (Joa.7,32). "Meur a wech e kemerjont mein evit e labezañ..." (Joa.8,59;10,31). ne gredent ket henn ober dirak an holl avat, pe e tec'he Jezuz diouto.

"Int-i ez eas ur c'horfad droug enno, hag e klaskjont kenetrezo petra a c'helljent ober dezhañ..." (Lu.6,11). Hag en diwezh "e tivizjont e lakaat da vervel..." (Joa.11,53). "Kuzul a savont a-enep din hag ez iriennont tennañ diganin va buhez..." (Ps.30,14).

"Ar sklerijenn he deus luc'het en deñvalijenn hag an deñvalijenn n'he deus ket he dalc'het ! Deuet eo e-touez e re, hag e re n'o deus ket e zegemeret ! " (Joa.1,5-11).

Ya, avat ! Bez' e c'hell Jezuz lavarout d'e ziskibion : "Mar en deus ar bed kasoni ouzhoc'h, gouezit en deus bet da gentañ kasoni ouzhin..." (Joa.15,18).

Diaes e kave Jezuz ar gasoni-se. "O va fobl, petra am eus graet dit ? E pe zoare em eus graet goap ac'hanout ? Respont din!" (Mi.6,3). "Evit priz va c'harantez e teuont da vezañ va enebourion ; ha me, ne ran nemet pediñ. Rentañ a reont din an droug evit ar mad, ar gasoni evit va c'harantez ! " (Ps.108,4-5). " evel-se emañ evit ma teuo da wir ar gomz a zo skrivet en o Lezenn : va c'hasaet o deus hep abeg ! " (Joa.15,25).

Pegen doaniet e tlee bezañ o welout en em aheurtent er pec'hed, eñ hag a oa "deuet evit ar bec'herion..." (Mat.9,13).

Nag a gerseennou ivez a-berzh e re, e ziskibion, e ebestel o-unan !

Tud e gerentiez, o klevout e gomzoù hag o verzout e gundu, dre ma n'o devoa ket kompre-

net c'hoazh e oa-eñ ar Mesiaz, "a zeue evit kregiñ ennañ, rak krediñ a raent e oa aet e skiant-vat digantañ..." (Ma.3,21). C'hwec'h miz kent e varv "e vreudeur - e gendirvi - ne gredient ket ennañ..." (Joa.7,5).

E ziskibion o-unan ne vezent ket feal bepred kennebeut. E Kafarnaom, da heul ar burzhud dispar hag anat koulskoude eus kreskadeg ar bara, goude ar brezegenn, kalet da glevout, diwar-benn ar 'bara a vuhez', "ez eas war o c'hiz kalz eus e ziskibion ha paouez a rejont a vont gantañ..." (Joa.6,66).

Pebezh pasianted ivez evit kenteliañ e ebestel ! A-walc'h e vo ober anv amañ eus un estlammadenn a-berzh Jezuz evit reiñ da anaout e veze tenn al labour : "Ha c'hwi ivez a zo c'hoazh ken dispered-se ! " (Mat.15,16). "Penaos ne gomprenit ket c'hoazh ? ... Kerzh adreñv, Satanaz - Pêr - ! rak da soñjoù n'int ket soñjoù Doue met soñjoù an dud..." (Ma.8,21 & 33). "Filip, keit amzer a zo abaoe m'emaon ganeoc'h ha n'am anavezez ket c'hoazh!" (Joa.14,9). Da zeiz ar Bignidigezh zoken, hag int o krediñ dalc'hmat emañ tost adsavidigezh rouantelezh Israel gant ar Mesiaz e c'houlennont outañ c'hoazh : "Aotroù, ha bremañ eo emañ o vont da adsevel rouantelezh Israel . " (Act.1,6). An deiz diwezhañ m'emañ ganto, ha n'o deus ket komprenet c'hoazh !

Koulskoude, da noz diwezhañ e vuhez varvel, daoust da wanderioù stank e ebestel, ha goude gouzout'e kavint holl ennañ un dro da bec'hif... " - e holl ziskibion e zilezas hag a dec'has kuit - ; hag emañ Pêr war-nes e zianzav teir gwech : "N'anavezan ket an den-se..." (Mat.26 31, 56,34,72), e kred evelato gallout lavarout d'an Unneg : "C'hwi a zo bepred chomet feal

din em amprouadurioù..." (Lu.22,28).

Gras Doue ha pasianted Jezuz o deus troet Unnek anezho a-benn an diwezh : "Glan ez oc'h ; n'oc'h ket holl avat. Rak anaout a rae piv a zlee e werzhañ... Unan ac'hanoc'h a zo o vont d'am gwerzhañ..." (Joa.13,10-11,21).

oooooooooooooooooooo

UN TAOL-TRUBARDEREZH
E-PAD AR PASK DIWEZHAN

'E-pad m'edo ar veleion-vras hag henaourion ar bobl o klask gouzout penaos tapout krog e Jezuz dre widre evit e lakaat d'ar marv, ez eas Judaz, unan eus an Daouzek, da gavout ar veleion evit e werzhañ dezho..." (Ma.14,1,10).

Judaz, "unan eus an Daouzek ! Ar mignon!" (Mat.26,14,50), eñ eo an trubard ! Pebezh poan evit kalon Jezuz, eñ ken mat, ken hegarat ! "Mar befe c'hoazh un enebour am dismegañsfe, e c'hellfen gouzañv an dismegañs. Met te eo, va c'heneil, va mignon hag an nesañ d'am c'halon, am boa ganit darempred dudius!" (Ps. 54,13-15).

Abaoe bloaz dija en devoa Jezuz kemennet gant evezh d'an den trubuilhet-se diwall mat a gouezhañ en islonk ma oa erru war ar ribl anezhañ : "Daoust ha n'eo ket me am eus ho tibabet, c'hwi ho taouzek ? Hag unan ac'hannoc'h a zo un diaoul, koulskoude ! " (Joa. 6,70). Hogen serret kloz en devoa Judaz dor e galon : nac'het en devoa digeriñ e ene d'ar c'hras. Ha Jezuz hag a lenne e kalon an dense beunek ha trubard, n'e c'houzañve ket hepken war e dro : reiñ a rae dezhañ e garantez ; en em ginnig a rae dezhañ. Nag a vadelezh, nag a basianted ! Ha nag a boan ivez !

Daoust d'an holl ginnigoù-se en em aheurte Judaz en e bec'hed ; irienniñ a rae da gas e daol da benn ; raktresañ a rae e dorfed ; ar pilpouz ne zilez ket e Vestr ; an trubard ne laka ket e Aotrou etre daouarn e enebourion met "al laer a zalc'he ar yalc'h hag a gase gantañ ar pezh a veze lakaet e-barzh..." (Joa. 12,6) ; hennezh a werzh e Zoue : "Pegement a fell deoc'h reiñ din ha me e werzho deoc'h ? Tregont pezh-arc'hant ! " (Mat.26,15).

Dereat e kav Judaz ar marc'had. Tregont pezh-arc'hant : priz ur sklav, hervez al Lezenn (Ex.21,32). D'e veno, ne dalv ket an Den-Doue muioc'h eget ur sklav : tonket eo ar marc'had !

Se a oa ivez ar sammad arc'hant rakwelet gant an diouganer : "Tregont pezh-arc'hant. Taol-eñ d'ar poder : ar priz dispar-se o deus lakaet warnon ! " (Za.11,12-13). Dleout a rae Jezuz gouzañv an dismegañs-se c'hoazh : bezañ lakaet e kemm gant ur sklav !

"Ar Veleion-Vras hag ar Skribed a oa o klask penaos tapout krog e Jezuz, - ket e-pad ar gouel avat, gant aon na savfe tousmac'h e-touez ar bobl. Met o kevout Judaz e voent laouen..." (Ma.14,1-2, 11). Ha gant ar c'hoant d'ober o mad eus un dro ken mat, e voent ali pakañ krog ennañ an deiz ma kavje an trubard an tu d'e lakaat etre o daouarn.

Judaz, eñ, mall gantañ kaout gopr e drubarderezh "a glaske un degouezh mat evit e lakaat etre o daouarn, hep gouzout d'ar bobl" (Lu.22,6). O c'hortoz kas da benn e viltañs ez eo ar pilpouz-mañ divergont a-walc'h da vont en-dro e kompagnunezh e Vestr bet nevez gwerzhet gantañ ! E zegemer a ra Jezuz bepred gant kement a vadelezh, e-giz pa ne ouije ket peseurt torfed en deus graet. Pebezh karantez

ha pebezh glac'har ivez ! "Hag-eñ ned eo ket ur ranngalon evit unan gwelout e vignon hag e geneil o treiñ da vezañ e enebour ? "(Eccli. 37,2.)

"Da zeiz ar Bara Dic'hoell, ma tleer aberzhañ ar pask, e kasas Jezuz Pêr ha Yann d'henn aozañ..." (Lu.22,7-8).

Gouzout a oar Jezuz petra a zo ouzh e c'hortoz, koulskoude, maz a e kêr. Henn lavarret en deus en derc'hent d'e ziskibion : "Gouzout a rit emañ erru ar Pask a-benn daou zevezh hag e vo gwerzhet Mab an Den da vezañ staget ouzh ar groaz..." (Mat.26,2). Padal ne gil ket dirak an aberzh ha "deuet an abardaez e tegouezh Jezuz gant an Daouzeg," (Ma.14,17). Hiraezh en deus bet evelato o kimiañ diouzh e vamm !

Pa voe deuet an eur - war-dro c'hwec'h eur d'abardaez pe dost - ez eas Jezuz ouzh taol hag e ebestel gantañ. 'C'hoant bras am eus bet da zebriñ ar Pask-mañ ganeoc'h, kent din gouzañv ; rak n'henn debrin ken betek ma vo sevenet en e leunder e Rouantelezh Doue', emezañ dezho..." (Lu.22,14-16).

Debret e veze ar Pask hervez un arlid kemennet a zegase koun eus an Hebreed o kimiañ prim-ha-prim diouzh Bro-Ejipt : "E zebriñ a reot buan-ha-buan, ho pazh en ho torn, gant louzoù c'hwerv..." (Ex.12,11,8). Laouen ha fromet war un dro eo Jezuz. Emañ eur an aberz bras o tostaat, an eur ken c'hoantaet. Hogen degas a ra an holl arlidoù-se ar c'houn eus ar pezh a zo ouzh e c'hortoz: bezañ eñ e-unan an oan lazhet, drailhet, tached, diwadet e gorf. An difrae a zo stag ouzh an arlid a zegas ar soñj eus feulster ha mall e enebourion; al louzeier c'hwerv : ar vestl, ar gwinegr hag

an holl gunujennoù a vo stlapet outañ ; ar vazh : an taolioù a vo skoet gantañ hag ar groaz ma laosko warni e huanad diwezhañ.

Laouen ha fromet eo Jezuz ivez o soñjal en traoù pouezus-dreist emañ o vont da ziskleriañ ha da seveniñ e-pad an diwezhañ Pask-se. Ha da gentañ e ro c'hoazh d'e ebestel un testeni a vignoniezh ur gentel a izelegezh, ur skouer a garantez. Hervez kelenn ar Fur : "Seul vrasoc'h ez out, seul izeloc'h a galon e tleez donj da vezañ..." (Eccli.3.20), eñ, o Mestr hag o Doue, "en em laka da walc'hiñ treid e ebestel ha d'o zorchañ gant al lienenn a oa en-dro d'e zargreiz..." (Joa.13,5).

Strivañ a ra Jezuz ivez, par ma c'hell, evit herzel ouzh Judaz a seveniñ ar marc'had euzhus tonket etrezañ hag ar Veleion-Vras. Kemer pe glask a ra un digarez bennak evit lakaat keuz da sevel e kalon ar renaviad. An damveneg evezhiek-mañ a ra, da skouer, en ur walc'hiñ treid an trubard : "C'hwi ' zo glan ; n'oc'h ket holl avat..." (Joa.13,10). Tamall kuñv : "Ret eo ma teuio da wir ar Skritur: an hini a veze o tebriñ bara ganin en deus savet e droad a-enep din..." (Joa.13,18). Gourdrour spontus : "Gwa d'an den-se maz eo bet gwerzhet Mab an Den gantañ ! Gwell e vije bet dezhañ chom hep bezañ bet ganet ! " (Mat.26, 24).

Komz ebet avat ne denera ar galon aheurtet-se ; komz ebet ne sklerijenn an ene-se dallet gant ar wallc'hoantegezh !

"Jezuz a zo strafuilhet en e greiz gant ar from..." (Joa.13,21). N'eo ket enkrezet gant e donkadur-eñ e-unan ; gant hini an trubard, ne lavaran ket. A-benn e selvel emañ o vont da gomz fraeshoc'h c'hoazh: "Me en lavar deoc'h, unan ac'hanoc'h a zo war-nes va gwerzhañ."

(Joa.13,21).

A vouezh izel ha truezus e teuas ar respont
Krenañ a ra e vouezh o tistagañ hevelep
komzoù ; ur seurt meurdez ha glac'har a zo
enni. Ne gred ket e ziskibion ez eus bet irien-
net da seveniñ seurt torfed ha kennebeut all
ez eo bet unan anezho an atizer anezhañ. Rak-
se "en em c'houlennent etrezo piv a oa an hini
a oa o vont d'ober an dra-se..." (Lu.22,23).
"hag azrec'het-bras e stagas pep hini da la-
varout dezhañ : 'Ha me eo, Aotrou?' Judaz e-
unan - gant un divergontiz sebezus - a
c'houlennas : 'Daoust ha me eo, Mestr?' - 'Ya,
te ' lavar mat', eme Jezuz..." (Mat.26,22,23).

A vouezh izel, leun a druez, e voe distaget
ar respont a voe klevet gant Judaz hepken. Ar
vouezh-se, hag ar sell truezus hag aspedus-se
a-berzh ar Mestr e daoulagad, an trubard,
daoust ha degas a raint ar c'heuz erziwezh ?
Ne raint ket ! En e dorfed e chom kinviet
Judaz ; disprizout a ra ar c'hras hag aspe-
dennoù e Vestr : "Pa sank an den difeiz en
islonk ar pec'hed e ra e baotr faeüs !" (Prov.
18,3).

Gant evezh "e c'houlennas Yann : "Piv eo,
Aotrou ? Ha Jezuz da respont dezhañ: 'an hini
ez an da soubañ un tamm evitañ hag a roin
dezhañ...' Hag o vezañ soubet un tamm bara e
roas anezhañ da Judaz..." (Joa.13,25-26).

Hervez ar c'hustum e oa ar jestr-se un
testeni a fiziañs hag a garantez don. Bez' e
tleje Judaz bezañ nac'het an testeni-se a ga-
rantez pe anzav e dorfed. Hogen ar pilpouz,
kuzhet gantañ e vennad, a gemer hag a zebr
an tamm, ken dinec'h ha tra ! An testeniou-se
a garantez hag a drugarez avat ne lakaont
ket an azrec'h da sevel e kalon an trubard,
pell emañ : e beurhegasin ha kreskin ar goun-

nar en e greiz ne reont ken ! Nac'h a ra ha
nac'h a raio Judaz pep sikour eus ar c'hras
ha kement skoazell a garfe e Aotrou reiñ
dezhañ. An dra-se a zo komprenet gant Jezuz.
Neuze..."ar pezh ac'h eus da ober, henn gra
buan ! " (Joa.13,27).

Ned eo ar gerioù-se nag ur c'hemenn nag ur
c'huzul, - un dilez, ne lavaran ket. "Ha Judaz
da sevel ha mont er-maez raktal..."(Joa.13,30)
Jezuz a zo fromet ha doaniet o sellout outañ :
"Zoken an hini a oa va mignon, am boa fiziañs
ennañ, a zebre va bara, a douell ac'hanon
hag a sav a-enep din..." (Ps.40,10). War-dro
eizh eur e oa.

"Mab ar Gollidigezh" (Joa.17,12), peurhegaset
hag o virviñ gant ar gounnar, a gerzh dre an
noz a gammedoù herrek. Gouzout a oar ez aio
Jezuz da Venez an Olivez, en ul liorz: "Anaout
a rae al lec'h rak alies e oa deuet Jezuz di
gant e ziskibion..." (Joa.18,2).

Se eo a glaske : "Un degouezh mat evit e
lakaat etre o daouarn hep gouzout d'ar bobl."
(Lu.22,6). Mont a ra da gas keloù d'ar Vele-
ion-Vras eta, hag irienniñ ganto e sell da
herzel Jezuz. Ha da virout na vije graet fazi
ebet e tiviz ganto ar sin-mañ : "An hini a bo-
kin dezhañ, hennezh eo : tapit krog ennañ ha
kasit-eñ ganeoc'h gant evezh..." (Ma.14,44).

Tra m'emeur oc'h irienniñ evit e herzel hag
e lakaat d'ar marv, "en noz end-eeun ma voe
gwerzhet" (I Cor.11,23), "pa ouie Jezuz e oa
deuet e eur da dremen eus ar bed-mañ davet e
Dad, goude bezañ karet e re a oa er bed, en
o c'haras betek ar penn pellañ..." (Joa.13,1).
"E-pad ma tebrent e kemeras Jezuz bara ; hag
o vezañ lavaret bennozh e rannas anezhañ hag
e roas d'e ziskibion en ur lavarout : 'Kemerit

ha debrit ; va c'horf eo kement-mañ'. Da c'houde - e dibenn ar pred - e kemeras ur c'hop, hag o vezañ lavaret bennozh, e roas anezhañ dezho : 'Evit holl dioutañ ; rak va gwad eo kement-mañ, gwad an emglev nevez, a vo skuilhet evit engroez an dud, da zistaol ar pec'hedoù', a lavaras dezho..." (Mat.26,26-28)

Emañ Jezuz o paouez seveniñ ar pezh en devoa lavaret bloaz ' zo : "Me eo ar bara bev diskennet eus an neñv ; hag ar bara a roin eo va c'horf evit buhez ar bed. Rak va c'horf a zo magadurezh wirion ha va gwad a zo evaj gwirion..." (Joa.6,51,55).

An oan-Pask emaint o paouez debriñ, an oan aroueziel, a lez e lec'h d'an Oan gwirion:"Oan Doue, a zilam pec'hed ar bed..." (Joa.1,29). An Emglev Kozh,Siellet gant gwad ar c'holeoù (Ex.24,5-8) hag an amdroc'hadur (Gen.17,11) a lez e lec'h d'an "Emglev Nevez diazezet e gwad an Aotrou Krist skuilhet evidomp..." (Lu. 22,20).

Sakramant an Aoter eo an testeni uhelañ a garantez a-berzh Jezuz. Kinnig a ra e gorf evel aberzh-dic'haouiñ, skuilhañ e wad evit distaol ar pec'hedoù, en em reiñ e-unan evel magadurezh,krouiñ un eñvoradur eus e Basion: "Lezet en deus ul lid-eñvor eus e vadoberoù ; roet en deus ur vagadurezh d'ar re o deus doujañs outañ..." (Ps.110,4-5). Ha da viken e pad an testeni-se a garantez, an eñvoradur : "Grit kement-mañ evit ober an eñvoradur ac'hanon..." (Lu.22,19).

P'emañ an dud oc'h iriennañ evit e forban-
nañ eus ar bed e-kreiz ar boureviadurioù kris-
sañ, e sav evito en e garantez un doare
bezañs diwelus nemet gwirion, hag a zo da
beurbadout betek fin ar bed : "Un drugar eo

din bezañ e-touez mibion an dud..." (Prov.8, 31).

Laouen eo Jezuz o reiñ deomp an testeni-se eus e garantez, o soñjal e madoberoù ar sakramant-se, en testenioù a garantez, a veuleudi, a azeulerezh, a vezo douget dezhañ dre se. Poan en deus avat o welout ar c'hasonioù, an disakridigezhioù a vezo graet en e geñver a-hed ar c'hantvedoù e sakramant e garantez.

Poan en deus ivez o soñjal e gwanded e ebestel : "C'hwi-holl fenoz a gavo ennon un abeg a bec'hed ; rak skrivet eo: "Skeiñ a rin gant ar Mesaer, ha stlabezet e vo a bep tu deñved an tropell..." Pêr a lavaras dezhañ : 'Ha pa zeufe an holl da gaout drouk-skoilh en abeg dit, evidon-me ne rin biken ...' Respont a reas Jezuz : 'En noz-mañ,kent d'ar c'hilhog kanañ, em dianzavi teir gwech...' Ha Pêr da respont : 'Ha pa rankfen mervel ganit, da zianzav ne rin ket...' Hag an holl ziskibion a lavaras kement-all..." (Mat.26,31-35).

Pêr ! "An hini a zo stad ennañ dre ma chom start en e sav, ra ziwallo da gouezhañ!" (I Cor.10,12) ; neuze,"arabat dit kaout lorc'h; az pezet aon, kentoc'h ! " (Rm.11,20). Gouzout a oar Jezuz petra a c'hoarvezo : "Gouzout a ran o deus re a fiziañs enno o-unan ; ned eo ket o nerzh par d'o lorc'hentez, ha prometet o deus muioc'h eget na c'hellint kas da benn!" (Jer.48,30). Hogen n'o dislavar ket. Koulskoude e ro dezho da intent pebezh kasoni a zo warnes sevel outo: "An neb n'en deus ket a gleze, ra werzho e vantell da brenañ unan ; rak da wir e tle dont em sigur ar gomz-mañ eus ar Skritur : 'Lakaet eo bet e renk an dorfetou-
rion.' E gwirionez, kement a sell ouzhin-me a zo tost d'e dermen..." (Lu.22,36-27). "Mar en

deus ar bed kasoni ouzhoc'h, gouezit en deus bet da gentañ kasoni ouzhin..." (Joa.15,18).

Faziañ a reont diwar-benn mennoz ar Mestr - ha war ar ger 'kleze' 'e lavaront dezhañ : 'Aotroù, sed amañ daou gleze.'Ha respont a ra Jezuz diwar c'hoap, hep o difaziañ:'Trawalc'h eo!' (Lu.22,38).

"War an hent m'emaon o vont gantañ o deus kuzhet evidon o lasoù!" (Ps.141,4). Henn gouzout a oar Jezuz. Ne gil ket koulskoude : war-dro nav eur "o vezañ aet er-maez e tennas, evel ma oa kustum, war-du Menez an Olivez,ha war e lerc'h e teue e ziskibion..." (Lu.22,38).

Astennet un tammig eo bet ar pred. Kement a draoù en devoa Jezuz da lavarout d'e ziskibion er vodadeg diwezhañ-se ! D'erc'hel a reas a-hend-all da gomz ganto a-hed an hent ha dreist-holl e traonienn ar stêr Gedron. Ar brezegenn hir-se a zo da lenn en he fezh en Aviel (Joa.14,17), a zo kimiad ha testamant a garantez an Doue o vont d'ar marv.

oooooooooooooooooooooooooooo

E LIORZH AN TREMENVAN

Goude ar brezegenn hir-se "ez eas Jezuz gant e ziskibion en tu all d'ar froud Kedron. Eno e oa ul liorzhañ maz antreas enni gant e ebestel..." (Joa.18,1). Dek eur noz e oa awalc'h.

Gouez ha prederius, garv ha doueüs eo al liorzhañ-se anvet Getsemani, ma weler ac'hano Templ Jeruzalem ha beziou traonienn Jozafad. Stergannek e oa an noz, - noz ar Sav-Heol. Al loar-Bask, e-kreiz an neñv, a astenne war an douar meinek skeudoù bras an olivez. Skrijadennoù an evned-noz hepken a dorre a-wechoù ur sioulder fromus.

Getsemani, da lavarout eo : "Gwaskell-eoul". Dibabet mat eo al lec'h, an anv ivez... Eno e vo gwasket Mab an Den ; eno eo "ez eo bet plijet gant Doue e vreviñ gant ar boan..."(Is. 53,10).

"Jezuz a lavaras d'e ziskibion:'Azezit amañ, tra ma vin-me o pediñ.' Kemer a reas gantañ Pêr, Jakez ha Yann, hag e krogas spont hag anken ennañ. Neuze e lavaras dezho : 'Trist eo va ene da vervel. Chomit amañ ha beilhit.' Aet un tammig pelloc'h e kouezhas d'an douar, ha pediñ a rae evit maz aje an eur-se pell dioutañ, mar gellje se bezañ! Tad, pep tra a c'hellez ; tenn ar c'haliriad-se diouzhin !

Padal, bezet graet, n'eo ket ar pezh a fell din-me, hogen ar pezh a fell dit-te," emezañ. (Ma.14,32-37).

"Trist eo va ene da vervel!" O tont tre el liorz e steuz sederni e ene ; sevel a ra en e greiz un anken dreistlavar : "Va c'halon a zo gwasket em c'hreiz ; enkrez ar marv a gouezh warnon. Taget on gant an aon hag ar spont, ha kridienniñ a ran ! " (Ps.54,5-6). "Ne oar ket an den petra a c'hoarvezo gantañ..."(Eccli.10, 14). Met gouzout ha gwelout a ra Jezuz pebezh boureviadurioù emañ war-nes diwaskañ. Klok ha kriz e tremen an daolenn dirak e zaoulagad : trubarderezh, dilezidigezh, skourjezadur, flac'hadoù, skopadennoù, taolioù, kurunenn-spern, kondaonidigezh euzhus, kroazstagadur kriz. Neuze, e-pad ouzhpenn teir eurvezh, en em gann ar poell hag ar gizidigezh an eil gant egile. Ar spered en em stag ouzh youl an Tad ; met ar santerezh hag a euzh ouzh ar boan, ar c'hoant-bevañ a zo gwriennet e pep den, an aon rak ar marv hag a zo poaniusoc'h a-wechoù eget ar marv e-unan, - kement-se holl a samm hag a drubuilh ar paour-kaezh natur-den, hag houmañ en em sav... Hag eñ hag a oa mall warnañ gwelout e eur o tont hag evañ e galiriad, a asped e Dad "evit maz aio an eur-se pell dioutañ, evit ma vo lamet ar c'haliriad-se a-ziwar e ziweuz..." (Ma. 14, 35-36).

Hogen an Tad a ziskouez chom hep respont da c'houlenn e Vab : "Va Doue, perak ec'h eus va dilezet ? Perak out aet pell diouzh va fedenn ha va c'hlemmoù ? Me a gri ha te ne respontez ket ! Na chom ket pell diouzhin rak en anken emañ. Va c'halon a zo deuet da vezañ evel koar : emañ o teuziñ e-kreiz va c'horf ! " (Ps.21,2-3,12,15).

"Distreiñ a ra Jezuz davet e ziskibion, hag o c'havout a ra kousket : 'N'hoc'h eus ket gallet beilhañ un eurvezh-pad ganin ! Ya, gredus eo ar spered, - gwan avat ar c'horf,' emezañ dezho." (Ma.14,37-38).

Evit gwir, ergentaou o devoa holl mennoziou mat. Met ar c'houk en deus gounezet war o youl-vat, ha n'int ket gouest nemeur da harpañ o Mestr ! "Gortozet em eus unan bennak da gemer truez ouzhin, hag hiniebet n'en deus graet ! Klasket em eus unan bennak d'am frealziñ, hag hini ebet n'am eus kavet ! " (Ps.68,21).

"A-nevez, o vezañ pellaet, e pede o lavarout an hevelep komzoù..." (Ma.14,39). Ar paour-kaezh natur-den strafuilhet gant an aon, an enkrez, ar boan, a asped : "Na guzh ket da zremm ouzh daservijer, rak en anken emañ : hast d'am selaou ! " (Ps.68,18).

D'an ampoent-se avat emañ an traoù evel pa ne vije ken Jezuz "ar Mab a zo enañ levenez an Tad..." (Mat.3,17) ; kentoc'h avat, bouc'h ar pec'hed "en deus Doue lakaet an holl bec'hedoù warnañ, skoet gant Doue, diskaret ha kastizet en abeg da bec'hedoù e bobl..." (Is.53,6,4,8). Dirak daoulagad Doue e seblant Jezuz bezañ ar Pec'hed e-unan. Dre se "ez eo deuet da vezañ mallozh evidomp..." (Gal.3,13). Hag an Doue reizh-divent ha teir gwech santel ne c'hell ket gouzañv dirazañ ar re a zo milliget en abeg d'ar pec'hed : "Kit kuit diouzhin, tud villiget ! " (Mat.25,41).

Asur eo : ned eo ket milliget Jezuz, en enep avat ; ned eo ket hepken "an Oan dinamm" (I Pe.1,19) met d'ar pred-se end-eeun e ra c'hoant e Dad hag e c'hell lavarout : "An Tad a gar ar Mab ; ha ganin emañ, o vezañ ma ran

ar pezh a blij dezhañ..." (Joa.3,35 ; 8,19).

"Ha deuet a-nevez davet e ziskibion, e kavas anezho kousket adarre rak pounner e oa aet o daoulagad gant ar mored. O lezel a reas hag ez eas da bediñ evit an trede gwech, o lavarout c'hoazh an hevelep komzoù..." (Mat.26,43-44). 'Tad, mar fell dit, kas ar c'haliriad-mañ diouzhin ; koulskoude, ra vo graet da youl-te, ha n'eo ket va hini-me ! ' Neuze en em ziskouezas dezhañ un ael eus an neñv evit e gennerzhañ..." (Lu.22,42-43).

N'en em ziskouez an Tad ; ne aotre ket zoken d'an natur-Doue e Jezuz adsevel e naturden aet gwan ; ur c'hrouadur eo a zegas da gennerzhañ ar Ger, Krouer an hollved ! Un dismegañs ouzhpenn adarre... Ar sikour a zeu koulskoude, hogen n'eo ket da lemel, da vihanañ ha pa ne ve ken, c'hwervoni ar c'haliriad poan ha krizder ar stourm ; ne ra nemet kreñvaat ar stourmer evit ma c'hell gouzañv muioc'h c'hoazh : "Plijet eo bet gant Doue e vreviñ gant ar boan..." (Is.53,10).

'Tad,... ra vo graet da youl-te!" (Mat.26,42). Asantiñ a ra Jezuz da youl an Tad ; asantiñ a ra bezañ brevet gant ar boan. Ha flastret eo o welout ar poanioù a zo war-nes kouezhañ warnañ. Hogen pouez ar pec'hed e vrev kalz gwashoc'h c'hoazh. Gwelout ha dougen a ra holl bec'hedoù ar bed, re an tremened, ar re a-vremañ, re an dazont, gant o niver hag o grevusted ; an dismegañs divent a reont da Zoue ; ar gollidigezh peurbadel a dalvezont d'ar re gablus, dianaoudek hag aheurtet maz int, foranet ma vez gant ar bec'herion ar grasoù a drugarez a goust ken ker dezhañ, - ma ne c'hell mui, a-benn ar

fin andur ar samm eus an enkrez kriz e wask. Enebet-krenn eo ar santelezh hag ar pec'hed : an eil a zistruj egile. Hogen ar santelezh hec'h-unan eo Jezuz: "Ganet santel eo..." (Lu.1,35). Ha setu-eñ sammet gant pec'hedoù an hollved hag an holl amzerioù, gant lorgnez an holl gantvedoù : "Doue en deus lakaet da gouezhañ warnañ pec'hedoù pep hini ac'hanomp ... Hag eñ e-unan en deus kemeret hon droug-oberoù war e choug..." (Is.53,5,11). Deuet eo da vezañ kengret gant hon torfedoù : "Doue en deus e lakaet da vezañ pec'hed evidomp..." (II Cor.5,21). Penaos neuze e c'hell derc'hel ken euzhus roll hag hini bouc'h ar pec'hed ? An dra-se a zo evitañ ur boureviadur na c'hellomp ket da vezañ, ha dre vuzhud hepken ne varv ket, dre ma rank mervel war ar groaz goude bezañ gouzañvet kalz muioc'h a voureviadurioù all.

Koulskoude, peogwir e tlefe mervel, sañset, diwar-bouez kement a boanioù, e c'houzañv ar stourm diwezhañ ouzh ar marv : "Kouezhet en enkrez ar marv e pede gredusoc'h..." (Lu.,22,44) : "Va savete,va Doue,rak emañ an dourioù o vont d'am beuziñ ! Sankañ a ran e fank an islonk, ha n'em eus netra d'en em harpañ warnañ. Va zenn eus ar fankigell, na vin ket beuzet enni..." (Ps.68,1-2,15). Ken kriz e voe an enkrez "ma teuas warnañ ur c'hwezenn evel takennoù gwad a zivere war an douar..." (Lu.22,44).

An darvoud-se, dibaot-tre,anvet gwadc'hwezenn gant ar vezeion, a zo ur seurt koll-gwad dindan groc'hen, astennet d'ar c'horf en e bezh. Pezh a zo kiriek d'hevelep anaez ez eo ur wanedigezh-korf devoudet gant ur spontadenn pe un enkrez don, a ro brall d'ar spered

penn-da-benn. Fellout a ra da Jezuz gouzañv c'hoazh an degouezh dreistordinal-se a lakaio e gorf da vezañ kizidik-eston ouzh ar gwallgarezhez a ziwasko goude.

"Distreiñ a reas Jezuz davet e ziskibion ha lavarout dezho - diwar zamgoap, moarvat : 'Kousket a c'hellit bremañ, ha diskuizhañ ! setu deuet an eur ma vo lakaet Mab an Den etre daouarn ar bec'herion ! ' (Ha gant nerzh ar wech-mañ) : 'Savit ! Deomp ! Setu m'emañ tost an hini am gwerzh', emezañ c'hoazh. (Mat. 26,25-46). Evit gwir, c'hwi hag a oa prest ergentaou da vervel ganin, setu ar c'houlz deoc'h da ziskouez ho fealded hag ho kalonegezh rak "o nesaat emañ va enebourion am heskin gant trubarderezh..." (Ps.118,150)."Ha Jezuz c'houzout kement a c'hoarvezfe gantañ, a yeas etrezek e enebourion..." (Joa.18,4).

"En em gavout a rae Judaz, unan eus an Daouzeg, ha gantañ ur strollad niverus a dud, klezeier ha bizhier ganto, kaset gant priñsed ar veleion hag henaourion ar bobl. Ha kerkent, o tostaat ouzh Jezuz, e lavaras Judaz: 'Salud, Mestr!' hag e pokas dezhañ. 'Va mignon, petra a rez ! ' a lavaras Jezuz..." (Mat.26,47,49-50) en ur zegemer pok an trubard, hag o c'houzout evelkent e oa ar pok-se merk e drubarderezh.

Va mignon ! "Mar befe un enebour am dismegañse e c'houzañven an dismegañs ; met te eo, va c'heneil, va mignon, hag an nesañ d'am c'halon, am boa ganit darempredoù dudius..." (Ps.54,13-15).

Va mignon ! Daoust hag an anv-se a garantez dalc'het d'an trubard a zo o vont da denneraat e galon ha da lakaat keuz da sevel enni ? Nann, ne ray ket ! Diblegus e chom Judaz. Neuze e klask Jezuz trubuilhañ e askre

dre ziskouez dezhañ pegen euzhus eo e emzalc'h : "Judaz, gant ur pok eta e werzhez Mab an Den ! " (Lu.22,48). Kuzhat a rez da gasoni ha da widre dindan ouel ar garantez. An diwezhañ gras eo. Met dinac'h a ra Judaz bepred ! Ha gloazet don eo Jezuz gant an dinac'h-se.

"Neuze ez eas Jezuz etrezek enno hag e lavaras : 'Piv a glaskit ? ' Hag int da respont : 'Jezuz an Nazaredad.' Eñ a respontas: 'Me eo!' O klevout ar gerioù-se avat e souzjont hag e kouezhjont d'an douar..." (Joa.18,4-6). Ur ger hepken a zo a-walc'h dezhañ evit skeiñ enebourion d'an douar !

"Pa sav ar re fallakr a-enep din evit lonkañ va buhez, pa zeu va enebourion, ez eo int -i a vranñsell hag a gouezh ! " "An Aotrou Krist, galloud Doue..." (I Cor.1,24), "hag a sko e enebourion d'an douar dre vraster e c'halloud..." (Ex.15,7), a ziskouez d'an dud-se e c'hell ober goap ouzh o irienn ha te-c'hout a-dre o daouarn, "o tremen dre o c'hreiz da vont kuit" (Lu.4,30), ma fell dezhañ - evel m'en deus graet meur a wech pa vezent mennet da gas da benn ur gwalldaol a-enep dezhañ.

Pa voent savet en o sav en-dro "e c'houlennas outo a-nevez : "Piv a glaskit ? " Hag int a lavaras : 'Jezuz an Nazaredad'. Ha Jezuz da respont : 'Lavaret em eus deoc'h: 'me eo'. Mar deo me an hini a glaskit, lezit ar re-mañ da vont kuit'. Neuze, oc'h ober e vad eus ar reuz, e tennas Pêr e gleze hag e skoas gant mevel ar Beleg-Meur ken e troc'has outañ e skouarn dehoù. 'Laka da gleze en e c'houin en-dro : daoust hag-eñ ne evin ket ar c'haliriad en deus an Tad roet din da evañ ? ' eme Jezuz." (Joa.18,7-11). "Hag o vezañ stoket ouzh

skouarn Malkoz e pareas anezhañ..."(Lu.22,51)

Meurdez Jezuz a ziskar e enebourion ; e vouezh a harz outo a eilstourm ouzh argad Pêr ; e c'halloudegezh yac'haus o strafuilh : ne gredont ket e c'hellint pakañ krog ennañ. Alies, hag en Templ zoken, "o devoa klasket kregiñ ennañ. Hogen nikun n'en devoa lakaet e zorn warnañ, rak ne oa ket deuet c'hoazh e eur..." (Joa.7,30). O lakaat a ra Jezuz da evezhiañ ouzh an dra-se, evit diskouez ervat en em laka e-unan etre o daouarn, dre maz eo deuet an eur, eur an deñvalijenn. "Deuet oc'h a-enep din gant klezeier ha bizhier,evel davet ul laer. P'edon bemdez en ho touez, en Templ, n'hoc'h eus ket astennet ho taouarn warnon. Met bremañ ez eo hoc'h eur ha mestroni an deñvalijenn..." (Lu.22,52-53).

Jezuz, "an Hini Santel hag an Hini Reizh" (Act.3,14), a zo graet anezhañ ur forbann ! Met a-youl eo e tilez e vuhez etre o daouarn, evel m'en devoa lavaret dezho n'eus ket pell c'hoazh : "Va buhez a roan evit va deñved ; den ebet n'he dilam diganin met he reiñ a ran eus va ferzh va-unan..." (Joa.10,15,18).

*** **

O welout ne enebe ket, "ar gohortenn, an ofiser ha mevelion ar Yuzevion a grogas e Jezuz hag en liammas..." (Joa.18,12). "Lasoù ar re zrouk o deus va faket!" (Ps.118,61).Hantnoz e oa.

Pa aotreas Doue da Satanaz sammañ Yob, e lakaas ur vevenn koulskoude : "Gra a gari gantañ hogen douj e vuhez..." (Job.2,6). Met

ne lakaas harz ebet da fallagriezh enebourion Jezuz. "D'an den difeiz en deus Doue va distaolet, hag etre daouarn ar re fallakr en deus va lakaet..." (Job.16,12).

Ha daoust d'o le a fealded,"e holl ziskibion o tilezel anezhañ, a dec'has kuit..." (Mat.26,56). "Tec'het kuit ez eo va c'heneiled ha va mignoned..." (Ps.37,12).

Ne oa mui d'ober nemet degas ar prizoniad da balez ar Beleg-Meur hep dedennañ ar selloù. Neuze e tiskennas ar strollad gant traonienn Gedron ha treuzet ar froud gantañ, e reas, sur a-walc'h, tro gêr dre an diavaez a-hed ar ramparzhioù, en ur vountañ dirazo hag en ur wallgas ar prizoniad.

.....

DIRAK AR PENNADUREZHIOU RELIJIEL

"E gas a rejont da gentañ da di Anna, a oa tad-kaer Gaifaz, Beleg-Meur er bloaz-se," (Joa.18,13).

Anna ne oa ken e karg, hogen bez' e oa atizer an heskinerezh a-enep da Jezuz. C'hoant a oa eta d'ober plijadur dezhañ o tegas dirazañ ar prizoniad chadennet. Neuze e voe er palez ur barrad levenez ha godiserezh. D'an ampoent-se moarvat e lakaas Judaz en e yalc'h gopr e daol-kaer.

"Ober a reas an ez-Beleg-Meur goulennoù ouzh Jezuz..." (Joa.18,19). O vezañ ma ne oa ken e karg n'en devoa Anna beli ebet evit goulennata an tamallad ; n'eo ket d'an tamallad en em gehuzañ e-unan kennebeut ; ha ret eo, ouzhpenn, kaout testoù. Tennañ a ra Jezuz evezh ouzh an holl zireizhderioù-se ha goulenn a ra ur prosez reol : "Dirak an holl em eus komzet d'ar bed ; bepred em eus kelennet er sinagogennoù hag en Templ, e-lec'h m'en em vod an holl Yuzevion, ha n'em eus lavaret netra e kuzh. Perak e rez goulennoù ouzhin ? Goulenn ouzh ar re o deus klevet va c'homzoù diwar-benn ar pezh am eus kelennet dezho : ar re-se a oar petra am eus lavaret..." (Joa.18,20-21).

Hag eñ feuket-bras ne voe ket Anna evit

veizañ ne gaso ket e daol da benn gant troioù -pleg, a ya rag-eeun d'ar pal : "Da c'hourfedifñ a ran en anv an Doue bev da lavarout dimp ha te eo ar Mesiaz, Mab Doue ? " (Mat. 26,63).

Ar wirionez eo ar wech-mañ : respont a raio Jezuz. Gouzout a ra e tegaso e respont e gondaonidigezh d'ar marv rak "klask a raent e lakaat da vervel drema rae e Dad eus Doue, oc'h en em lakaat evel-se par da Zoue..." (Joa.5,18) Koulskoude ne chom ket en arvar evit reiñ testeni d'ar wirionez : "Ya, te ' lavar mat ; hag a-vremañ e welot Mab an Den azezet en tudehoù d'an Hollc'halloudeg hag o tont war goabrennoù an neñv..." (Mat.26,64).

Setu en diwezh an anzav a c'hortoze an damallerion ! Gwirion eo an titloù-se : "Va Mab out-te ; me eo am eus da c'hanet," (Ps.2,7). Hag henn diskouezet en deus Jezuz dre e vurzhuoù stank : "An oberoù a ran en anv va Zad a ro testeni diwar va fenn ; hogen ne gredit ket ! " (Joa.10,25-26).

Evito avat ned eo nemet un den. Mar bize bet den e gwirionez, lavarout bezañ Doue a vije bet un dra diboell pe un dezo euzhus. Met d'o meno ez eo touiñ Doue ; henn lavaret o deus dezhañ dindan borched Salomon ur miz bennak a-raok. "Mar fell deomp teurel mein ouzhit ez eo dre maz out un touer-Doue, dre m'en em lakaez da Zoue, evidout da vezañ den..." (Joa.10,33). Evit gwir ez eus skrivet el lezenn : "An hini a dou anv Doue a vezo lakaet d'ar marv..." (Lev.24,16).

Ouzhpenn-se en deus Jezuz o feuket da vat rak lezet en deus da grediñ o barnje pa en deus damveneget an diouganoù a asur e vo-eñ ar Mesiaz-Barnour : "Setu ma teu evel Mab an Den war goabrennoù an neñv. Hag an holl

bobloù, broadoù ha yezhoù a servijo..." (Dan. 7,13-14), "Doue en deus lavaret d'am Aotrou : azez a-zehoù din ; da enebourion, ober a rin anezho ur skabell evit da dreid..." (Ps.109,1).

"Ar Beleg-Meur a rogas e zilhad neuze - da ziskouez e vrouez - en ur lavarout : 'Komzoù enep Doue en deus lavaret ! Hag ezhomm hon eus c'hoazh a destoù ? Emaoc'h o paouez kle-vout e gomzoù disakr. Petra a soñj deoc'h ? ' - 'Ar marv a zo dleet dezhañ' a respontjont." (Mat.26,6(-66)).

Ar beleg displeal a eilpenn urzh ar gwir : hag eñ barner, en em laka tamallad ; lemel a ra an testoù, hag ober barnerion eus ar glem-merion ! Hag evel touer-Doue e kondaoner "an hini a zo gantañ komzoù ar vuhez peurbadel!" (Joa.6,68).

Disreol e oa ar c'houlennadenn-se, n'eus forzh penaos, dre ma oa bet graet diouzh an noz. Hag evit chom hep en em gavout er-maez eus al Lezenn e rejont o mennoz gortoz gouloù-deiz evit dougen ar varn.

E-keit-se, savet dezho morc'hed pe debron-gouzout, e oa deuet e porzh ar Beleg-Meur daou eus an ebestel, Pêr ha Yann, da welout petra a c'hoarveze. "Ar borzhierz a lavaras neuze da Bêr - a anavezad dre e daol-mouezh galileat - : 'Ha n'out-te ket ivez unan eus diskibion an den-se ? - 'Nann, ned on ket,' emezañ... Eno edo ar servijerion hag ar warded o tommañ diwar o sav ouzh an tan o devoa enaouet rak yen e oa an amzer, ha ganto edo Pêr en e sav o tommañ. Hag int da lavarout dezhañ : 'Ha n'out-te ket ivez unan eus e ziskibion ? ' Nac'hañ a reas, ha lavarout : 'Ned on ket!' Unan eus mevelion ar Beleg-Meur - kar d'an hini en devoa Pêr troc'het e skou-

arn, a lavaras dezhañ : 'Ha n'em eus-me ket da welet el liorzh gantañ ? ' Ha Pêr da nac'hañ adarre, ha raktal e kanas ur c'hilhog..." (Joa.18, 17-18,25-27).

Bez' e c'hall Kaifaz aters Jezuz diwar-benn e ziskibion ! Goulenn a c'hallfe ivez diganto dont evit difenn o Mestr ! O rener, hag en deus respontet d'e vestr miz zo bennak : 'Te eo ar Mesiaz, Mab an Doue bev..." (Mat.16,16) a respont henozh, daoust d'e le a lealded e-kerzh ar pred : "Me n'anavezan ket an den-se ! " (Mat.26,72). Yann, "an hini a oa karet gant Jezuz" (Joa.13,23), a zo en trowardroioù, met tevel a ra... Ar re all ? "Holl o deus te-c'het kuit!" (Mat.26,56).

Jezuz, a oa o tont er-maez eus al lez-varn, "a droas e benn hag a baras e sell war Bêr. Ha neuze e teuas da soñj da Bêr eus ger an Aotrou : 'Kent d'ar c'hilhog kanañ hiziv ez pezo va nac'het teir gwech...' hag o vont er-maez e skuilhas daeroù c'hwerv." (Lu.22,61-62)

"Piv a droio va fenn en ur feunteun ha va daoulagad en un eienenn daeroù, din da ouelañ deiz ha noz... Kastizet out gant da zislealde-rioù... (Pêr) ; sell, ha kompren pegen fall ha c'hwerv eo bezañ dilezet da Zoue ! " (Jer.9,1; 2,19).

.....

BRIZHVARNEDIGEZH ER SANEDRIN

Da c'hortoz gouloù-deiz e voe fiziet ar pri-
zoniad er warded. O vezañ ma n'int ket laouen
-tre o tremen un nozvezh digousk, emaint o
vont d'en em zigoll diwar-goust ar beulke-se
hep difenn hag a zo bet gwallgaset ha kondao-
net d'ar marv gant e varnerion. Neuze e voe
un abadenn vezhus, un dirolladur a zismegañ-
soù dreistlavar : "Hiniennoù en em lakaas da
skopañ outañ, da vouchañ e zremm ha da zis-
tagañ fasadoù gantañ en ur lavarout : 'Gra
da brofed : piv en deus skoet ganit ? Hag ar
veleion e zegemeras gant palvadoù..." (Ma.14,
65). "Ha kalz a wallgomzoù all a zistagent a-
enep dezhañ..." (Lu.22,65). Ha div eur e padas
ar c'hoari-se !

"Ra ginnigo e jod d'an hini a sko gantañ,
dezhañ da gaout e walc'h a zismegañsoù..."
(lam.3,30). Henozh e kas Jezuz da wir an di-
ougan-se : e walc'h a zismegañsoù en deus,
sur-mat. E gwirionez, n'eus ket a zoare gwa-
shoc'h nag euzhusoc'h da wallgas un den eget
skopañ e-kreiz e zremm ; n'eus ket a gunujenn
disleberoc'h eget e javedata ; n'eus ket a
zismegañs displetoc'h eget ober al lu gant e
gomzoù hag e zellid. Ha peogwir ez int diaezet
gant meurded e selloù doueek e vouchont e za-
oulagad, evit gallout, a bep eil, hag hep
abafed ebet, teurel ouzh e zremm o skopaden-

noù hakr ha skuilhañ warnañ o c'hunujennoù
lous hag o farsadennoù kasonius. Hag ar pri-
zoniad-se, deuet da vezañ "an hini a skoper
outañ ha goapaet gant an holl..." (Job.17,6;
Ps.21,8) ez eo Jezuz, ar Mesiaz !

"Dous hag izel a galon..." (Mat.11,29) e te-
gemer Jezuz an holl zismegañsoù hep ur
c'hlemm : "Pa c'houzañve poanioù, ne c'hour-
drouze ket..." (I Pe.2,23), "gwallgaset e plege
ha ne zigore ket e c'henoù... Kinniget em eus
va divoc'h d'ar re a sache war va barv ;
n'em eus ket distroet va dremm diouzh an dis-
megañsoù hag ar skopadennoù..." (Is.53,7;50,6)

"Pa c'houlaouas an deiz en em vodas kuzul
henaourion ar bobl, ar veleion-vras hag ar
skribed. Degas a rejont Jezuz dirak o lez-varn
..." (Lu.22,66).

Se ne oa nemet ober hervez ar reolenn hag
al lezenn,kement ha gwiriañ ar gondaonedigezh
douget en noz. A-walc'h e voe dezho ober d'an
tamallad adlavarout e anzav dirak an holl :
"Neuze e lavarjont holl : 'Te eo Mab Doue eta
...? - 'C'hwi a lavar mat : me eo.' - 'Da be-
tra hon eus ezhomm c'hoazh testeni ? Ni hon-
unan hon eus henn klevet eus e c'henoù', a
lavarjont neuze." (Lu.22,70-71). Ha gwiriet e
voe ar varn : "Ar marv a zo dleet dezhañ!"
(Mat.26,66).

Direizh ha dizeeun eo ar varn-se: n'eus bet
enklask ebet diwar-benn ar gaoz. Kent dougen
ar varn e tlee ar varnerion spisaat gwirionez
pe falsentez an titloù a laka Jezuz warnañ.
Daoust hag ar Mesiaz eo Jezuz ? Daoust ha Mab
Doue e tle bezañ ar Mesiaz ? E nep doare n'en
deus klasket ar Sanedrin lakaat ar sklerijenn
da barañ war an traoù-se. Dre se en deus la-
kaet war e gont, n'eq ket hepken marv un den

digablu, met ivez marv ar Mesiaz, Mab Doue: "Dre ur varn direizh ez eo bet paket..." (Is. 53,8).

An holl varnerion ha tamallerion-se a-hend-all o devoa ur mennoz kamm eus ar Mesiaz ha na oa ket diouzh an diouganou, ha dinac'hañ a raent ar prouennoù anat a roe Jezuz dezho eus e gefridi doueel. Henn tamallet en devoa Jezuz dezho dija: "Henn lavaret em eus deoc'h: me a zo ar Mesiaz; ha ne gredit ket. An oberoù a ran en anv va Zad a ro testeni diwar va fenn; met ne gredit ket enno. C'hwila lavar: 'Touïñ Doue a rez', dre m'am eus lavaret: 'Mab Doue ez on.' Mar ne ran ket oberoù va Zad, chomit hep va c'hrediñ; mar gran avat, pa ne gredfec'h ket em c'homzoù zoken, kredit en oberoù-se evit maz anavezot ha ma kredot emañ an Tad ennon ha me en Tad..." (Joa.10,25-26,36-38).

Daou ezel hepken eus ar Sanedrin o devoa komprenet: "Jozef a Arimazea hag a oa diskibl da Jezuz, met e-kuzh, gant aon rak ar Yuzevion; ha Nikodem, an hini a oa deuet da gavout Jezuz en noz: 'Mestr, te a zo un doktor deuet a-berzh Doue, rak den ne c'hell ober ar burzhudoù a rez-te mar n'emañ ket Doue gantañ..." (Joa.19,38-39;3,2). Hogen n'emaint ket en emvod. N'int ket bet galvet en abeg d'o mennoziou pe... ned int ket deuet dre aon! Bezet pe vezet, "den ebet ned eo prederiet gant e gaouz!" (Is.53,8).

.....

KASET D'AR PRETORDI

Emañ Pennoù-bras Israel o pouez barn ar Mesiaz d'ar marv. Met ar Romaned o deus miret evito ar gwir da seveniñ seurt setañsoù. Ret eo eta reiñ dezho ar varn da wiriekaat.

Ma n'eo ket bet roet ar varnedigezh da c'houzout d'ar Gouarnour, da vihanañ ez eo kemennet dezhañ ez eo bet prizoniet Jezuz peogwir en deus rener al Lez-varn kemeret perzh en harzidigezh. Daoust ha plegañ a raio da wiriekaat ar setañs? Dister eo ar c'hudennoù relijiel evit ar pagan roman-se. Evit dont a-benn, kredapl eo e rankor treiñ ar prosez relijiel d'ur prosez politikel. Rak-se, ma tegouezhfe dezho c'hwitañ war o zaol "o deus ijinet un dro-widre: 'Prest omp: itriket mat eo an taol', emezo". (Ps.63,6).

Neuze, hep dale pelloc'h, "o vezañ e liammet, e tegasjont an tamallad da Bilatus, ar gouarnour, d'e lakaat etre e zaouarn..." (Mat. 27,2).

Evit mont eus palez ar Beleg-meur d'an Tour Antonia e oa ret treuziñ kêr penn-da-benn pe dost. An hir a bennad-hent-se, beure-mat, dre ar straedoù gourleun a birc'hirined en deizioù-gouel-se, a voe diaes ha dismegañsus d'ar prizoniad, chadennet e zaouarn ha bloñset e zremm.

Hep mar ebet e oa gant Jezuz kalz a zal-c'hidi e Jeruzalem. Hogen evit dizarbenn peb

enebadeg ha pep emell e oa bet akedet meskañ enebourion Jezuz en amheuliadeg a gase anezhañ d'ar Pretordi, ar re c'hintusañ hag ar re safarusañ, na petra, ha skignañ ar re-se ivez penn-da-benn d'an hent a skoe war-du palez ar Gouarnour."Enkelc'hiet on gant koleoù e-leizh ; tirvi am gwask a bep tu. Digeriñ a a reont o geolioù war va zu evel leoned o vont da zrailhañ |o freizh| hag o yudal ; bagadoù chas am enkelc'h hag ur vandennad hailhoned am arsailh !" (Ps.21,13-14,17).

A-hend-all,evel bepred en ur seurt degouezh e yud an enebourion hag e ...tav ar vignoned, pe e troont kein. "Tec'het kuit o deus va c'herent-nes ; va ankouaet o deus va c'heneiled. Ar re a garen a dro a-enep din!" (Job.19,14, 19).

E-pad m'en treuzkaser evel-henn e klev Jezuz c'hoarzhadegoù ha godisadegoù lous, kunujennoù digant ar warded hag an engroez a soñj ez eo kablus peogwir ez eo ambrouget ha gwallgaset zoken gant ar veleion-vras o-unan. An diouganer brudet-bras, hag a veze kement anv anezhañ e genoù an holl, a oa ur gaouiad eta, un den milliget; an hini a rae burzhudoù a oa eta un toueller, ul lakez d'an diaoul. Setu-eñ chadennet ; kollet en deus e c'halloud; ha pegen dister eo e neuz bremañ ! "N'on ken nemet ur preñv ha n'eo ket un den; dismegañs an dud ha lastez ar bobl. Kement hini am gwel a ra goap ouzhin." (Ps.21,7-8).

Eñ avat "ne zigor ket e c'henoù, evel un oan kaset d'ar gigerezh..." (Is.53,7).

'E-keit-se e c'hoarvezas en Templ un abadenndic'hortoz-krenn. "Judaz, o welout e oa kondaonet Jezuz, a grogas morc'hed ennañ, ha degas a reas en-dro an tregont pezh-arc'hant

d'ar veleion-vras ha d'an henaourion, en ur lavarout : 'Pec'het em eus, o werzhañ ar gwad didamall.' Met respont a rejont dezhañ: 'Petra a ra se deomp ? Dit-te da welout !' Ha stlapet gantañ ar pezhioù-arc'hant er santual, e te-c'has kuit." (Mat.27,3-5).

"Re vras eo va fec'hed evit m'am bo an distaol anezhañ!" (Gen.4,13). Fazi diveizus evit un test eus kement a vadoberoù a-berzh an hini a zo deuet da selvel ar bec'herion, ha fazi dizasprenus : "Mont a reas d'en em grougañ..." (Mat.27,5). "Hag ar fallakr, kouezhet war e benn, a zo tarzhet dre an hanter ha skuilhet e holl vouzelloù..." (Act.1,18).

"Ar veleion-vras a zastumas ar pezhioù-arc'hant hag a lavaras : 'Ne c'heller ket o lakaat en teñzor sakr rak priz ar gwad ez int.' (Setu-i deuet da vezañ pizh en un taol!) Ha goude bezañ graet kuzul e prenont ganto "park ar poder", evit beziañ an divroidi..." (Mat.27, 6-7).

Evel-se, hep gouzout dezho, e teue da wir an diougan : "Pouezañ a rejont va gopr, tregont pezh-arc'hant. Hag an Aotrou a lavaras din : 'Taol-eñ d'ar poder, ar priz dispar o deus lakaet din!' ha me da gemer an tregont pezh-arc'hant ha d'o zeurel e ti an Aotrou, evit ar poder..." (Za.11,12-13).

.....

DIRAK PENNADUREZHIOU AN ALOUBERION

War-dro seizh eur diouzh ar beure edo pennoù-bras ar Yuzevion e ti ar gouarnour roman gant o frizoniad. Met dont tre e ti ur pagan a lakae unan da vezañ dic'hlan, hervez al Lezenn. Rak-se "ned ejont ket er pretordi, evit an vijent ket saotret ha ma c'helljent debriñ ar Pask. Dont a reas Pilatus er-maez d'o c'havout hag e lavaras : 'Petra a damallit-hu d'an den-mañ ?' Respont a rejont dezhañ : 'Ma ne vije ket hemañ un torfetour, n'hor bije ket e lakaet etre da zaouarn.' Ha Pilatus da respont dezho : 'Kemerit-eñ, c'hwi hoc'h-unan ha barnit-eñ hervez ho lezenn.' - 'N'hon eus ket ar gwir da gas un den d'ar marv,' a lavaras ar Yuzevion." (Joa.18,28-31).

An damallerion, en entremar, a glask divarc'hañ ar gouarnour, dre vont dichek outañ. Perak goulenn petra en deus graet an den-se ? Mar en c'hasomp amañ, ni Doktored al Lezenn, ez eo sur ez eo kablus. Met feuket eo Pilatus, ha n'eo ket divarc'het. Gouzout a ra a-hend-all ne gouezh ket an tamallad dindan ar gwir roman o vezañ ma sell an danvez-tamall ouzh ur gudenn relijiel. Rak-se, dezho eo e varn hervez o Lezenn.

Graet eo an taol : barnet eo, ha kondaonet d'ar marv zoken. Hogen gwiriektaet e tle bezañ ar varn gant ar veli roman. Neuze, o welout ne

asantje ket Pilatus mont a-du gant o setañs hep bezañ studiet e-unan ar gaoz "en em laka-jont d'e damall : 'Hemañ hon eus kavet o lakaat reveulzi e-touez ar bobl hag o tifenn paeañ tailhoù da Gaezar, hag eñ o tiskleriañ ez eo-eñ ar C'hrist-Roue,' emezo." (Lu.23,2)

Falstamalloù anat eo an abegoù roet. Pell diouzh he lakaat d'en em sevel ez alie Jezuz ar bobl da bleustriñ an holl vertuzioù, ha dreist-holl ar sentidigezh : "War gador Voizez emañ azezet ar skribed hag ar farizianed : kement tra a lavaront deoc'h, henn grit eta gant evezh..." (Mat.23,2-3). A-du gant an truaj en deus en em ziskleriet ivez : "Rentit da Gaezar ar pezh a zo da Gaezar, ha da Zoue ar pezh a zo da Zoue... Pêr; kemer ar pezh - ar stater a gavi e genou ar pesk - hag henn ro dezho evidon-me hag evidout-te." (Mat.22,21) ; (17,27). Nac'het en deus ar roueelezh, dre ma n'eus heñvelded ebet etre e roueelezh a Vesiaz hag ar roueelezh-stad : goude kreskidigezh ar bara, "o c'houzout e oant war-nes dont d'e gemer d'e lakaat da roue, en em dennas Jezuz e-unan-penn war ar menez..." (Joa.6,15).

Amgrediñ a ra Pilatus ez eo faos an holl damalloù-se. An trede a sach e evezh koulskoude : en em lakaat da roue a zo en em sevel frank a-enep d'ar veli roman. "Neuze e tistroas Pilatus e diabarzh ar pretordi. Gervel a reas Jezuz hag e lavaras dezhañ : 'Ha te eo roue ar Yuzevion ?' Respont a reas Jezuz : 'Hag eus da berzh da-unan e lavarez se, pe reoù all o deus henn lavaret dit diwar va fenn ?' Pilatus - hag en em c'houlenne petra a intente ar Yuzevion gant an droienn 'Krist-Roue' - a respontas dezhañ : "Daoust ha Yuzev on-me ? Da bobl hag ar veleion-vras o deus da lakaet

etre va daouarn. petra ac'h eus graet ? Ha Jezuz da respont : 'Va rouantelezh n'eo ket eus ar bed-mañ. Mar bije va rouantelezh eus ar bed-mañ o devije stourmet va servijerion evit mirout na vijen lakaet etre daouarn ar Yuzevion ; met n'eo ket va rouantelezh ac'halemañ.' Neuze e lavaras Pilatus dezhañ : 'Roue out eta ? ' Ha Jezuz da respont : 'Evel ma lavarez, roue on. Evit kement-se ez on bet ganet, hag evit kement-se ez on deuet d'ar bed, evit reiñ testeni d'ar wirionez. Kement hini a zo mab d'ar wirionez a selaou va mouezh.' Pilatus a lavaras dezhañ : 'Petra eo ar wirionez ? ' Ha goude bezañ lavaret se - hep gortoz ar respont - ez eas er-maez adarre da gavout ar Yuzevion." (Joa.18,33-38).

"Roue eo Jezuz : "Me eo am eus da sakret da roue, eme Zoue, ha dit e roin ar broadoù evit da lod hag ar bed-holl evit da zomani." (Ps.2,6-8). Hogen e rouantelezh eo hini an eneoù. Kement-se eo a zispleg d'ar gouarnour, ha da c'houde ez anzav ez eo roue. Kompren a ra Pilatus ez eo ur seurt roueelezh, kentoc'h, ur brederouriezh, ha ne c'hell ket nozout ouzh ar Stadpeogwir n'he deus da bal nemet ren war an eneoù. Ne zalc'h ket eta an tamalladur.

"Ha Pilatus d'ar veleion-vras ha d'ar bobl 'Ne gavan netra a gement a c'hellfed tamall d'an den-se,' emezañ neuze." (Lu.23,4).

Un huadeg spontus a savas neuze. Gant aon na zeufent ket a-benn eus o zaol, "e tamalle ar veleion-vras forzh traoù dezhañ. Pilatus a reas adarre goulennoù outañ, met Jezuz ne respontez ket. 'Ne respontez netra ? Sell nag a draoù a damallont dit ! ' Jezuz avat ne respontas mui netra, ken e oa souezhet-bras Pilatus..." (Ma.15,3-5).

"Sav, Aotrou, difenn da gaoz.N'ankounac'ha ket yudadeg da enebourion, kriadeg ar re a sav a-enep dit hag a ya dalc'hmat war greskiñ..." (Ps.73,22-23).

Gallet en devije Jezuz respont ez-leal da Bilatus : "Testoù displeal a sav ouzhin ; tud drouk ha gaouiat a zigor a-enep din o genou tromplus ; va sammañ a reont gant komzoù a gasoni ; va zagañ a reont hep abeg..."(Ps.34, 11 ; 108,2-3). Ne ra ket avat : fae a zo gant Jezuz respont d'an tamalloù faos.

Dilavar an tamallad ha diseblanted ar gouarnour a blant malis en damallerion,aon dezho ez afe o freizh a-ziwar o c'hrog. "Hag i neuze da zerc'hel gant nerzh : 'Lakaat a ra ar bobl d'en em sevel en ur gelenn dre Yudea a-bezh, adalek Galilea e-lec'h m'en deus kroget, betek amañ,' emezo..." (Lu.23.5).

Gevier divezh, falstamalloù dismeg : "Tremenet en devoa dre C'halilea ha Yudea oc'h ober ar mad hag o parañ..." (Act.10,37-38). Ya, ! "rentañ a reont din an droug evit ar mad, hag ar gasoni evit ar garantez..."(Ps.108 6).

"O klevout anv eus Galilea e c'houlennas Pilatus ha Galilead e oa an den-se. Ha pa gomprenas e oa eus dalc'h Herodez, en c'hasas dezhañ : e Jeruzalem edo ivez Herodez en deizioù-se..." (Lu.23,6-7).

Broc'het e oa Pilatus hag Herodez abaoe lazhadeg ar birc'hirined en Templ : sed aze un dro-vat d'an daou ganfard d'en em adunvaniñ, un digarez mat dreist-holl ! En em zi-zober a raje Pilatus evel-se eus un afer kasa-us, hag Herodez an hini eo en devije da sammañ kiriegezh ur gondaonidigezh direizh pe un didamallidigezh ken risklus all.

Ha Jezuz, skuizh-divi ha brevet a daolioù,

bronduet penn-da-benn e gorf, sammet gant chadennoù, a zo stlejet betek palez Herodez, dindan selloù an holl birc'hirined a skrign o welout ar prizoniad : "Va argadiñ a reont en ur c'hoarzhin goap ; o dent a skrignont ouzhin ! Klevout a ran flemmadennoù an engroez : ur spont evidon a bep tu ! " (Ps.34,16;30,14).

"Laouen-bras e voe Herodez pa welas Jezuz rak abaoe pell en devoa c'hoant d'e welout, abalamour d'an traoù a gleve diwar e benn ; ha spi a-walc'h en devoa d'e welout oc'h ober ur burzhud bennak. Forzh goulennoù a reas outañ met Jezuz ne respontas netra dezhañ. Eno koulskoude edo ar veleion-vras hag ar skribed hag a oa ouzh e damall a-heligenta. Herodez hag e warded, goude bezañ diskouezet o dispriz ha graet goap anezhañ, a wiskas dezhañ ur sae splann-meurbet hag a gasas anezhañ en-dro da Bilatus..." (Lu.23,8-11).

"Ur minwask a virin war va genoù keit ha ma vo an den difeiz dirazon..." (Ps.38,2). O terc'hel e zellid hag e veurdez e-touez an holl dud-a-lez o c'hoarzhin goap outañ e sell Jezuz ouzh al louarn-se (Lu.13,32), muntrer Yann-Vadezour (Mat.14,10), hep teurvezout respont dezhañ. O welout e chom Jezuz diseblant ha dilavar a-grenn dirazañ ez eo feuket don Herodez ; hag eñ d'en em zigoll dre ober ur Foll, un den diskiant, eus 'Furnez Doue' (I Cor 1,24) : ned eo ar falsdiouganer-se a lavar bezañ Doue, nemet ur paour-kaezh diod, ur roue a c'hoariva, un diskiant tizhet gant alfo ar veurded. Neuze evit ober goap anezhañ hag eus e vennadoù e wisk dezhañ ur sae bompadus a veze douget gant ar pennoù-bras el lidamheuliadegoù : "C'hoarzhin a reer war eeunded an den reizh ! " (Job.12,4).

Ha Jezuz, stipet evel-se, a zo degaset d'ar pretordi en-dro, e-kreiz c'hoarzhadegoù ha goapadegoù e enebourion hag an engroez stankoc'h-stankañ e straedoù kêr : "Goapaet on gant holl dud va fobl..." (Lam.3,14).

"An deiz-se e teuas Pilatus hag Herodez da vezañ mignoned..." (Lu.23,11). "Rouaned ha priñsed an douar en em stroll a-unan hag en em glev a galon unvan a-enep d'an Aotrou hag e Grist..." (Ps.2,2;82,5).

.....

BARNET D'AR MARV

Setu a-nevez eta an tamallad er pretordi hag ar gouarnour er rouestl ! Ne gompren Pilatus mann ebet er gasoni ruz-se eus ar Yuzevion ouzh un den digablus, ha dreist-holl hini ar veleion-vras a zo kustum, er c'hontrol, da zifenn o c'henvroiz a-enep d'an dalc'her roman ... Hogen emañ o vont c'hoazh da glask terriñ warno.

"Neuze e c'halvas Pilatus ar veleion-vras, ar pennadurezhioù hag ar bobl. 'Degaset hoc'h eus din' emezañ, 'an den-mañ, evel unan o tougen ar bobl d'ar reveulzi ; ha setu m'am eus graet enklask warnañ dirazoc'h, ha n'em eus ket e gavet kablus eus torfed ebet a gement a damallit dezhañ. Nag Herodez kennebeut peogwir en deus e zegaset deomp en-dro. Gwelout a-walc'h a rit n'en deus graet hemañ netra a gement a dalvezfe ar marv, a lavaraz dezho..." (Lu.23,13-15).

Neuze e voe ur safar dreistfaltazi e-touez ar bobl. Pilatus a sante e rankje plegañ d'o youl pa savas war e spered ar soñj eus un itrik a c'hallje e dennañ er-maez eus an enkadenn. "Da geñver gouel Fask e oa boas ar gouarnour da reiñ e frankiz d'ur prizoniad, an hini a dalc'het en toull-bac'h d'ar c'houlz-se, Barabaz e anv. 'Pehini a fell deoc'h e laoskfen

darn eus o c'hoant. Ne ra avat nemet diskouez e wanded hag e laoskentez hep ober dezho plegañ e nep doare.

Hag asantiñ a ra Jezuz d'ar c'hastiz di-reizh ha kriz-se, miret d'an dorfetourion ha d'ar sklaved : "Me a zo prest da vezañ skourjezet ! " (Ps.37,17). "Neuze, soudarded ar gouarnour, o kemer Jezuz ganto e-barzh ar pretordi, a vodas en-dro dezhañ ar gohortenn a-bezh..." (Mat.27,27).

Ur c'hastiz garv e oa ar skourjezadur. Gant skourjezoù boutin e rae ar Yuzevion, ha merket e oa niver an taolioù gant al Lezenn : "Mar bez dleet d'an hini kablus kastiz an taolioù, e vezo roet dezhañ daou-ugent taol, met netra ouzhpenn..." (Deut.25,2-3). Gant aon rak mont en tu all d'an niver-se e paouezed d'an navet taol ha tregont : "Pemp gwech," eme sant Paol "em eus resevet digant ar Yuzevion daou-ugent taol-skourjez nemet unan..." (II Cor.11,24).

Ar Romaned avat a rae gant skourjezoù graet gant meur a lerenn, en o lost tammoù eskern, tammoù plom pe grogouigoù ; ha ne oa niver merket ebet d'an taolioù hervez al lezenn roman. Hag eñ bet kondaonet gant ar gouarnour ez eo ar skourjezadur roman eta a c'houzañvas Jezuz. Kastiz spontus a zegase alies ar marv war e lerc'h !

Diwisket eo ar c'hondaonad hag ereet ouzh ul lagadenn houarn sanket e fust ur golonenn. Gant holl nerzh o divrec'h e sko daou vourev war an diskoaz, ar c'hein, ar groazlez, an divc'har. Al lerennoù, gant o eskernigoù, o zammouigoù plom pe o c'hrogouigoù, a c'hronn ar c'horf hag an izili. Ha dalc'homp soñj ez eo bet gloazet korf Jezuz en e bezh gant ar c'holl-gwad e Liorzh an Olivez hag ar gwall-

gasadurioù e ti Gaifaz. Dindan an taolioù ken-tañ en em zaspugn ar gwad dindan ar c'hroc'hen, e-giz bourledoù a darzh dindan an taolioù da heul ; goude-se e vez dispennet ar c'hig a chom a-istribilh a-zailhennoù ; strinkañ a ra ar gwad ; tizhet eo an nervennoù hag ar c'higennoù, maz eo lakaet noazh an eskern ; en em weañ a ra ar gouzañvad en ur yudal... hogen kouezhañ a ra atav an taolioù !

Ha diglemm e chom Jezuz ; andiglemm-se avat a laka taerder ar vourevion da greskiñ... Santout a ra ur c'hwezenn yen o pizhenniñ war e dal ; krog eo da gridienniñ ; mezevellet eo hag horjellañ a ra war e zivesker. Gant aon na varvfe e paouez ar soudarded a skeiñ rak n'o deus ket bet urzh d'e lazhañ, ha distagañ a reont ar gouzañvad. Kouezhañ a ra Jezuz en ur poullad gwad ha, bec'h warnañ, en em stlej war al leur da gerc'hat e zilhadañ ha d'en em wiskañ.

Hogen n'eo ket torret da gounnar e vourevion. Evit diskuizhañ emaint o vont d'e wiskañ gant arouezioù e roueelezh ha da reiñ dezhañ an enorioù dleet d'e renk : diaz ur piler da dron ; war e zivskoaz, goude bezañ e ziwisket a-nevez, ur vantell-soudard ruz da dalvezout da vantell ruz-mouk ur roue ; en e zorn, ur gorzenn e-giz bazz-roue ; war e benn, ur seurt kurunenn plezhet diwar skourroù ar gwezigoù-se ez eo o spern kalz hiroc'h ha kaletoc'h eget re ar gwez-robin ; sankañ a reer ar gurunenn-se a daolioù bizhier ken ez eo toullet gant ar spern kroc'hen ar penn, an tal, an daouividig, ar c'hilpenn... Neuze e rent ar soudarded enor d'ar roue nevez ; an eil war-lerc'h egile e tibun dirazañ soudarded ar gohortenn ; e gunujenniñ a reont, skopañ outañ, kregiñ er gorzenn a zo en e zorn ha skeiñ

darn eus o c'hoant. Ne ra avat nemet diskouez e wanded hag e laoskentez hep ober dezho plegañ e nep doare.

Hag asantiñ a ra Jezuz d'ar c'hastiz direizh ha kriz-se, miret d'an dorfetourion ha d'ar sklaved : "Me a zo prest da vezañ skourjezet ! " (Ps.37,17). "Neuze, soudarded ar gouarnour, o kemer Jezuz ganto e-barzh ar pretordi, a vodas en-dro dezhañ ar gohortenn a-bezh..." (Mat.27,27).

Ur c'hastiz garv e oa ar skourjezadur. Gant skourjezoù boutin e rae ar Yuzevion, ha merket e oa niver an taolioù gant al Lezenn : "Mar bez dleet d'an hini kablus kastiz an taolioù, e vezo roet dezhañ daou-ugent taol, met netra ouzhpenn..." (Deut.25,2-3). Gant aon rak mont en tu all d'an niver-se e paouezed d'an navet taol ha tregont : "Pemp gwech," eme sant Paol "em eus resevet digant ar Yuzevion daou-ugent taol-skourjez nemet unan..." (II Cor.11,24).

Ar Romaned avat a rae gant skourjezoù graet gant meur a lerenn, en o lost tammoù eskern, tammoù plom pe grogouigoù ; ha ne oa niver merket ebet d'an taolioù hervez al lezenn roman. Hag eñ bet kondaonet gant ar gouarnour ez eo ar skourjezadur roman eta a c'houzañvas Jezuz. Kastiz spontus a zegase alies ar marv war e lerc'h !

Diwisket eo ar c'hondaonad hag ereet ouzh ul lagadenn houarn sanket e fust ur golonenn. Gant holl nerzh o divrec'h e sko daou vourev war an diskoaz, ar c'hein, ar groazlez, an divc'har. Al lerennoù, gant o eskernigoù, o zammouigoù plom pe o c'hrogouigoù, a c'hronn ar c'horf hag an izili. Ha dalc'homp soñj ez eo bet gloazet korf Jezuz en e bezh gant ar c'holl-gwad e Liorzh an Olivez hag ar gwall-

gasadurioù e ti Gaifaz. Dindan an taolioù kentañ en em zaspugn ar gwad dindan ar c'hroc'hen, e-giz bourledoù a darzh dindan an taolioù da heul ; goude-se e vez dispennet ar c'hig a chom a-istribilh a-zailhennoù ; strinkañ a ra ar gwad ; tizhet eo an nervennoù hag ar c'higennoù, maz eo lakaet noazh an eskern ; en em weañ a ra ar gouzañvad en ur yudal... hogen kouezhañ a ra atav an taolioù !

Ha diglemm e chom Jezuz ; andiglemm-se avat a laka taerder ar vourevion da greskiñ... Santout a ra ur c'hwezenn yen o pizhenniñ war e dal ; krog eo da gridienniñ ; mezevellet eo hag horjellañ a ra war e zivesker. Gant aon na varvfe e paouez ar soudarded a skeiñ rak n'o deus ket bet urzh d'e lazhañ, ha distagañ a reont ar gouzañvad. Kouezhañ a ra Jezuz en ur poullad gwad ha, bec'h warnañ, en em stlej war al leur da gerc'hat e zilhad ha d'en em wiskañ.

Hogen n'eo ket torret da gounnar e vourevion. Evit diskuizhañ emaint o vont d'e wiskañ gant arouezioù e roueelezh ha da reiñ dezhañ an enorioù dleet d'e renk : diaz ur piler da dron ; war e zivskoaz, goude bezañ e ziwisket a-nevez, ur vantell-soudard ruz da dalvezout da vantell ruz-mouk ur roue ; en e zorn, ur gorzenn e-giz bazh-roue ; war e benn, ur seurt kurunenn plezhet diwar skourroù ar gwezigoù-se ez eo o spern kalz hiroc'h ha kaletoc'h eget re ar gwez-robin ; sankañ a reer ar gurunenn-se a daolioù bizhier ken ez eo toullet gant ar spern kroc'hen ar penn, an tal, an daouvidig, ar c'hilpenn... Neuze e rent ar soudarded enor d'ar roue nevez ; an eil war-lerc'h egile e tibun dirazañ soudarded ar gohortenn ; e gunujenniñ a reont, skopañ outañ, kregiñ er gorzenn a zo en e zorn ha skeiñ

ganti taolioù war e benn, ha sankañ donoc'h ar spern evel-se ; pe neuze, diwar goap, e ple-gont o glin dirak Jezuz en ur lavarout gant jestroù dizoare : "Salud, roue ar Yuzevion ! " Ha war-dro un eurvezh e padas ar c'hoari-se ... (hervez Mat.27,28-31 & Ma.15,17-20).

Perak eta kement a grizderioù ouzh ar paour-kaezh gouzañvad-se drailhet a daolioù skourjez hag e par ar marv ? Ne c'heller ket meizañ ken euzhus kasoni, zoken a-berzh soudarded roman hag estren, a-enep d'ur paour-kaezh Yuzev dinoaz kondaonet gant o mistri ; ha penaos kompren ar seurt enorioù diwar goap rentet d'e roueelezh ?

Jezuz avat a c'houzañv an holl voureviadurioù-se, hep rannañ ger, ha diglemm : "N'em eus ket stourmet ; n'em eus ket troet kein : kinniget em eus va divskoaz d'ar re a skoe ganin, ha va divjod d'ar re a sache war va barv ; n'em eus ket distroet va dremm diouzh an dismegañsoù hag ar skopadennoù... Gwall-gaset e oa ha plegañ a rae ; ne zigore ket e c'henoù, evel an oan kaset d'ar gigerezh..." (Is.50,5-6;53,7).

Goude bezañ lezet ur pennad amzer da dremen gant ar soñj e vije torret da gounnar ar Yuzevion ez eas Pilatus da gerc'hat Jezuz. Ken mantrus e oa stad ar gouzañvad ma krede e mantrus e oa stad ar gouzañvad ma krede e vije dic'hoantet e enebourion. "Mont a reas er-maez eta hag e lavaras dezho : 'Setu, henn degas a ran deoc'h er-maez evit ma ouezot ne gavan abeg ebet ennañ.' Neuze e teuas Jezuz er-maez gant ar gurunenn spern war e benn, hag ar vantell ruz. 'Setu an den!' eme Bilatus ..." (Joa.19,4-5).

"Setu an den ! " Ar gerioù-se a ziskouez war un dro truez evit ar gouzañvad ha dispriz

ouzh e damallerion. Ar c'horf-se diroget gant an taolioù, drailhennoù kig a-istribilh outañ, ar gwad-se o redek, ar penn-se kurunennet a spern, an dremm-se koeñvet euzhus ha disneuz, ar furlukin-se losket gant an derzhienn hag o trabidellañ, ez eo an tres roet gant an diouganerion, - un arvest da rannañ ar galon galetañ.

"Deuet on da vezañ an hini a skoper ouzh e zremm..." (Job.17,6). "Arerion o deus aret va c'hein ; treset o deus irvi warnañ ; skeiñ a reont ganin, n'ouzon perak ; va drailhañ a reont dibaouez..." (Ps.128,3;34,15). "N'on nemet ur preñv ha n'eo ket un den : dismegañs an dud ha stlabez ar bobl. Kement hini am gwel a ra goap ouzhin. Setu-me evel an dour o teverañ ha disjuntet eo va holl eskern. Deuet eo va c'halon da vezañ evel koar ; emañ o teuziñ e-kreiz va c'horf... Disec'het eo va c'horzailhenn evel un darbod-pri, ha peget eo va zeod ouzh va staoñ. Va gourvezet o deus e poultr ar marv ; an dismegañs he deus frailhet va c'halon..." (Ps.21,7-8/15-16;68,21). "Ar penn en e bezh a zo klañv hag ar galon en he fezh a zo lañgisus. Adalek sol an treid betek ar penn n'eus netra a yac'h ennañ ; gloazioù, goulzioù bev... Ken kollet en devoa e neuz hag e stumm den, ma savas spouron e kalz tud ouzh e welout..." (Is.1,5-6;52,14)

Ar veleion-vras hag ar skribed avat - n'eo ket spouron a savas enno ouzh e welout, kounnar, ne lavaran ket. Ha Pilatus a bakas ur souezhenn hag ur gerseenn vras rak "youc'hal a rejont a-bouez o fenn : 'Ouzh ar Groaz ! Ouzh ar groaz ! ' ma lavaras Pilatus dezho : 'Kemerit-eñ hoc'h-unan, ha stagit-eñ ouzh ar groaz, rak evidon ne gavan abeg ebet ennañ.'

Hag i da respont : 'Ul Lezenn hon eus-ni, hag hervez al lezenn-se e tle mervel dre maz eo en em dremenet da Vab Doue'. Pa glevas ar c'homzoù-se e voe Pilatus spontet muioc'h." (Joa.19,6-8).

Mab Doue ! Evit ar Yuzevion, setu an abeg gwirion. C'hwitet ganto an abeg politikel e tistroont d'an hini relijiel, an hini gwirion. Evit Pilatus avat, setu ur c'hevrin trubuilhus: an diouganer hag ar burzhudour-se, tamallet dre gasoni, digablus avat, habask ha kalonek en un doare dreistdenel, dellidleun ha meurdezus en un doare doueel e-kreiz ar boureviadurioù krisañ, daoust hag-eñ en devije un orin doueel ? Ar Roman brizh-kredennus, strafuilhet gant ar c'hevrin-se, a voe spontet gant ar giriegezh edo o paouez sammañ hag an hini edod o c'houlenn digantañ.

Raktal neuze "ez eas e-barzh ar pretordi hag e c'houlennas ouzh Jezuz : 'A belec'h out-te ? (Peseurt orin eo da hini?)' Met Jezuz ne respontas netra dezhañ. 'Ne respontez ket din ...? Ha ne ouzout ket em eus galloud d'az lezel da vont ha galloud d'az stagañ ouzh ar groaz ? ' eme Bilatus." (Joa.19,9-10).

"Aotrou, na chom ket mut rak da enebourion a c'hourdrouz, ar re o deus kasoni ouzhit a sav o fenn ! " (Ps.82,2-3). Gallet en devije Jezuz respont da Bilatus : m'ac'h eus ar galoud-se, na zispriiz ket ar gwir hag ar reizh, na voug ket mouezh da askre, ha "n'am ro ket da gasoni va enebourion rak testoù gaouiat a sav a-enep din, ha ne c'hwezhont nemet an droug..." (Ps.26,12). Hogen ne fell ket da Jezuz breutaat evitañ e-unan ; a-walc'h eo dezhañ degas soñj da Bilatus e teu pep galloud digant Doue ha n'en deus ket gwir eta d'henn drougimplijout : "N'az pije warnon galloud

ebet ma ne vije ket bet roet dit eus an nec'h" (Joa.19,11).

"Diwar neuze e klaske Pilatus an tu d'e zibeubifñ ; met ar Yuzevion - o tistreiñ war an dachenn bolitikel - a youc'he : 'Mar e laoskez da vont, n'out ket mignon da Gaezar ; rak kement hini en em dremen da roue en em sav a-enep da Gaezar ! ' Pilatus, p'en devoe klevet ar c'homzoù-se a zegasas Jezuz er-maez hag a azezas war e gador-varn. Neuze e lavaras : 'Setu ho roue.' Met int a youc'has : 'Kas-eñ kuit alese ! Kas-eñ kuit alese ! Ouzh ar groaz ! ' Lavarout a reas Pilatus dezho : 'Ho roue a groazstagin ? ' - 'N'hon eus roue ebet nemet Kaezar,' a respontas ar veleion-vas." (Joa.19,12-15).

Kement a gasoni o deus ar veleion-vas-se ouzh Jezuz ma teuont da vezañ treitourion d'o bro : dinac'h a reont frankiz o bro hag anzava reont beli ar Romaned. Sebezet eo Pilatus. Hogen ar poelladerezh diboell-se a roio lamm da zifenner an den didamall. Kaezar ! Gouest a-walc'h e vefe ar Yuzevion-se aet en egar da sevel klemm e Roma ha da gas keloù da Gaezar diwar-benn an danvez-roue a Israel didamallet gantañ ! Se a vefe evitañ koll e vrud vat a gargiad roman, ha da heul an harlu hag ar marv, marteze... N'emañ ket ket o vont d'en em aberzhiñ evit un huñvreer mestra !

Hag eñ spontet da gentañ gant ar soñj eus hevelep drouziwezh "e kemas Pilatus dour ha gwelc'hiñ a reas e zaouarn dirak ar bobl en ur lavarout : "Digablu on eus gwad an den reizh-se ; deoc'h-c'hwi da welout!" - 'Ra vo e wad warnomp ha war hor bugale!' a lavaras ar bobl a-bezh." (Mat.27,24-25).

Kompren mat a reas ar bobl jestr ar gouar-

nour dre ma oa un arlid anavezet mat : "Gwelc'hiñ a raint o daouarn en ur lavarout : Hon daouarn n'o deus ket skuilhet ar gwad-se, hag hon daoulagad n'o deus gwelet netra..." (Deut. 21,6-7). Evit pezh a zo eus estlammadenn an engroez, diskouez a ra e samm ar bobl kiriegezh an ober-se : "Ra vo e wad warnomp ! Ni en c'hemer war hor choug!" Gant ma varvo Jezuz, ne vern ket dezho o buhez nag hini o bugale.

"Ne viket test a-enep gwad da nesañ..." (Lev.19,16), "ne gasi ket d'ar marv an den digablu hag an den reizh." (Ex.23,7). Fae a reont da vat war ar gourc'hemennou-se!" "Tagañ a reont buhez an den reizh, ha kondaoniñ gwad an den didamall!" (Ps.93,21).

Neuze, "ar soudarded a dennas diwarnañ ar vantell limestra - a oa peget ouzh e c'houliou - hag a roas e zilhad dezhañ" (Ma.15,20) a voe intret raktal gant ar gwad. "Ha Pilatus a lakaas anezhañ etre o daouarn da vezañ staget ouzh ar groaz. Kregiñ a reas ar Yuzevion e Jezuz hag en c'hasjont ganto. War-dro kreisteiz e oa..." (Joa.19,14,16). Hag holl enebourion ar Mesiaz d'ober joa an eil d'egile evit o berzh-mat, da youc'hal gant al levenez, da c'hoarzhin yud ouzh ar prizoniad, da sachañ war o lerc'h ar paour-kaezh furlukin denel-se emaint o vont da beurlazhañ : "Emañ va enebourion varvel ouzh va enkelc'hiañ en ur fuc'hañ..." (Ps.1610-11). "Setu maz on danvez a zismegañs evit va holl enebourion..." (Ps.30, 12).

"D'an dud difeiz en deus Doue va zaolet, hag etre daouarn ar re fall en deus va lakaet!" (Job.16,11).

'Denlazher' ez eo deuet Pilatus da vezañ

dre laoskentez : hag eñ pagan ne oa ket evit anavezout doueelezh Jezuz ; hogen pervezh en deus renet ar prosez ha kondaonet en deus un aberzhad didamall, sammet gant kasoni e enebourion, a-youl hag o c'houzout ervat e varne d'ar marv un den reizh.

Da lazherion Doue ez eo aet Kaifaz hag holl damallerion Jezuz dre ziouiziegezh kablus ha dre gasoni : hag int o virout ar gwirioneziou diskuliet hag o vezañ testoù lavarou hag oberou Jezuz o devije anavezet ennañ ar Mesiaz m'o devije studiet an degouezh anezhañ e-giz ma oa dleet.

"An hini a laka da vevañ hag a laka da vervel..." (I Sam.2,6) "a zo kondaonet d'ar marv gant e grouadurion !"

"Doue n'en deus ket graet ar marv; Doue en deus krouet an den evit an divarvelezh ; e c'hraet en deus evit bezañ ur skeudenn' eus e natur-eñ (a zo divarvel). Met dre warizi an diaoul ez eo deuet ar marv er bed..." (Sap.1,13-24). E gwirionez, rak "gopr ar pec'hed eo ar marv..." (Rm.6,23). "Peogwir ac'h euspec'het e tistroi e poultrenn..." (Gen.3,17-19).

Evit dic'haouiñ ar pec'hed hag e efedoù e ranke Jezuz kemer warnañ ar pec'hed hag e efedoù, betek ar marv.

Ar marv ! Ar c'hastiz-se m'en deus an den ar brasañ euzh outañ a zo degemeret gant Jezuz evit selvel an dud : "Evit hor pec'hedoù ez eo bet lakaet d'ar marv..." (Is.53,8). "Evel maz eo aet an holl dud da bec'herion dre zisendidigezh unan hepken, evel-se e teuo an holl dud da vezañ reizh dre sentidigezh unan hepken..." (Rm.5,19). "En em izelaet en deus an Aotrou Krist dre sentiñ betek ar marv, ha

betek ar marv war ar groaz ! " (Phi.2,8).

Ar groaz! Ardamez ar boan hag an dizenor: "An Aotrou Krist, bet staget ouzh ar groaz, anezhañ ur maen-skoilh evit ar Yuzevion ha follentez evit ar baganed!" (I Cor.1,22).

M'o devije bet c'hoazh ar Yuzevion ar gwir da lakaat d'ar marv, o devije labezet Jezuz kercent ha douget ar varn. Ha gant pebezh angerzh o devije ar Yuzevion kasonius ha kintus-se stlapet ar vein! Hogen miret o devoa ar Romaned evito o-unan gwir an dezvlazhañ, ha kroazstagañ a raent ar sklaved, an dorfe-tourion vras hag an dispac'herion estren.

Diouganet en devoa Jezuz dre beseurt marv e tlee mervel : "Pa vin bet uhelsavet diouzh an douar e tedennin an holl dud davedon. Lavarout a rae an dra-se evit merkañ dre beseurt marv e tlee mervel..." (Joa.12,32-33).

.....

WAR HENT AR C'HALVAR

Diouzhtu goude ma veze kondaonet an tamalad e tlee bezañ lakaet d'ar marv. E-pad ma prienter an dafar ha maz aozer an disparti, emañ Jezuz eno, er porzh, e-tal diri ar pretordi, etre daouarn e enebourion trec'h ha rok e-kreiz ar cholori, urzhioù ar soudarded, stirlink an armoù ha youc'hadennoù ar Yuzevion o tridal gant al levenez : "Kunujenniñ a reont, fougeal gant komzoù divergont. Emañ ar re fallakr o trec'hiñ ; va gedal a reont. Emañ oberourion an droug ouzh va enkelc'hiañ ha va enebourion bodet en-dro din d'am lazhañ, o selloù war api evit va diskar d'an douar!" (Ps.16,9-11;93,3-4).

Badaouet e benn, e gorf o wadañ penn-dabenn, spontet gant ar marv kriz-se o tostaat, e sellar c'hondaonad ouzh ar binvioù-boureviañ emeur o prientiñ ; klevout a ra bepred kunujennoù ha goapadennoù ar veleion-vras hag an henaourion aet an trec'h ganto ; santout a ra anezho o pegañ warnañ o selloù garv : "Va enebourion a gomz a-enep din ; ar re a glask va diskar en em guzul en ur lavarout : Doue en deus e zilezet : redomp war e lerc'h, pakomp krog ennañ, n'eus den ebet d'e zifenn!" (Ps.70,10-11)

D'ar c'hondaonad e-unan e veze dougen benveg e gastiz. Jezuz a zegemer eta war e

skoaz drailhet gant ar skourjezoù treustenn ar groaz, ur pevar-ugent livr bennak enni. Dege-mer a ra ar benveg-se a varv gant muioc'h a levenez eget na raio diwezhatoc'h e abostol Andrev : "Salud dit, o kroaz prizius, am eus c'hoantaet abaoe pell, am eus karet gant mall, am eus klasket dizehan, a gavan en diwezh prest da zegemer an hini az c'hoantae!" Hag an amheuliadeg kañvaouüs da loc'hañ.

Ur c'hantener, gant soudarded evit derc'hel an urzh, a zigor an hent. Pevar bourev, pevar soudard dibabet evit an aner-se, a c'hronn ar gondaonidi : Jezuz ha "daou dorfetour a gased c'hoazh gantañ evit bezañ lakaet d'ar marv war un dro gantañ..." (Lu.23,32). Trec'hus ha safarus bepred e teu war-lerc'h ar veleion-vras, ar sanedridi, ar farizianed, ar skribed. "Hag o tougen e-unan e groaz ez eas Jezuz ermaez - eus ar porzh - etrezek al lec'h a oa anvet ar C'hlopenn, pezh a vez lavaret en hebreeg. 'Golgota'..." (Joa.19,17).

An amheuliadeg a ya gant unan eus ar straedoù a ziskenn war-du ar wazh Tiropeon, straedoù war ziribin, pavezet fall ha risklus, o virviñ gant an dud da zerc'hent deiz ar sabad-meur.

Skuizh-divi eo Jezuz. Abaoe an disparti eus Betania en deiz kent, gant an holl vonedone eus ul lec'h d'egile, en deus kerzhet a-hed meur a lev. Netra eo se. Met mann ebet n'en deus debret abaoe an neizheur. Gouzañvet en deus an tremenvan e Getsemani, ar c'hwezenn-wad, daouzek eurvezhiad goulennatadurioù divius ha gwallgasadurioù didruez, ha n'o deus ket e beurlazhet dre ma fell da Zoue ma varvo war ar groaz : skourjezadur, kurunennidigezh spern, taolioù, flac'hadoù, hep kontañ poanioù

an ene. Koll a ra e wad abaoe eurvezhioù; krenañ a ra gant an derzhienn. Badañ a ra e benn... Ar paour-kaezh natur-den, hanter marv, a zo divi : "Devet eo va lounezi gant an derzhienn ; dinerzhet on, brevet ha divi rak da gounnar a zo disac'het warnon ha da spouronoù o deus va c'haset da netra ! Strafulhet on gant kriadennoù ha kunujennoù va enebourion ; spont ha krenijenn a zo diskennet ennon, hag enkreiz ar marv a zo warnon..." (Ps.37,8-9;54,3-6).

Daspren ar pec'hed eo kement-se, ha ne gaso ket an Tad "e aelez d'e zougen en o daouarn gant aon na stokfe e droad ouzh ur maen..." (Ps.90,12). Rak-se, a-boan en deus graet Jezuz ur c'hammed bennak, ma horell war e dreid, ma riskl ha ma kouezh a-stok e gorf ouzh an daroù. Dre anien ez astenn neuze e zaouarn en a-raok evit distroñsañ e lamm ha diskregiñ a ra ivez diouzh an dreustenn ; houmañ a gouezh d'an douar en ur vrañsellat hag a zeu en-dro da ruilhal war e gein (ar c'hein-se aret gant ar skourjezoù), ha da skeiñ war ar gurunenn-spern en ur sankañ donoc'h a an drein anezhi en e benn. Bec'h bras warnañ e sav Jezuz en e sav en-dro, roget e zaoulin hag e zaoulin, hag adkemer a ra e samm. Hag e enebourion da c'hogeañ : "Hennezh a lavar bezañ Doue ha n'en deus ket nerzh ur bugell!" Biskoazh avat n'en deus graet ur burzhud evit e vad, ha n'eo ket hiziv e raio unan.

Daoubleget dindan bouez an dreustenn a droc'h e skoaz vloñset en ur lezel war e lerc'h ul ledennad wad, ez a war-raok goustad, hanter semplet, en e zivskouarn kunujennoù ar soudarded, flemmadennoù e enebourion, goapadennoù an dremenidi a chom a-sav da sellout ouzh ar fals-profede-se, an toueller-se kastizet

gant Doue evel ma tle bezañ : "Sellet e oa outañ evel ouzh un den kastizet gant Doue..." (Is.54,4).

Mari hag ur mignon bennak, gouezet ganto peseurt disoc'h a zo bet da zarvoud an derc'hent, a gej gant an amheuliadeg. Pebezh ranngalon evit ar vamm-se gwelout he Mab Doue en un hevelep stad o vont d'ar groug ! "Te a vo treuzet da ene gant ur c'hleze..." (Lu.2,35). Pebezh glac'har ivez evit Jezuz gwelout e vamm ken ankeniet ! Klemm ebet koulskoude : asantiñ a reont o-daou d'an aberzh !

Hag an holl vignoned all, mantret dirak ur gondaonedigezh ken direizh, petra emaint oc'h ober ? Mann ebet ! Emell un den nemetken a c'hellfe saveteiñ Jezuz, evel m'en devoa Daniel saveteet Suzana gwechall : "Adkrogit gant ar varn rak falstestenoù o deus douget a-enep dezhi..." (Dan.13,49). Met "den ebet n'eo chalet gant e gaoz..." (Is.43,8). Truez o deus ouzh ar gouzañvad met ne glaskont ket e saveteiñ. "Ar re am gwel er-maez war ar straed a dec'h pell diouzhin. Pellaet ac'h eus diouzhin ar re nesañ d'am c'halon ; un euzhadenn ec'h eus va lakaet da vezañ evito ; ha me 'zo dalc'het ha ne c'hellan ket mont kuit !" (Ps.30,12;87,9).

Skuizh-marv eo Jezuz. "Brevet eo va nerzh e-kreiz an hent!" (Ps.101,24). Sachet-disachet, gwallgaset gant ar soudarded, e kouezh war an hent evit an eil gwech. Un nebeudig tud o deus truez outañ ; unan bennak a c'hoarzh ; gant hiniennoù e teu ur gunujenn bennak ; darn a ra vil dezhañ. "Na laouenaent ket diwar va c'houst ha na savent ket a-enep din pa vank din va zroad rak tonket eo din kouezhañ..." (Ps.37, 17-18)

Ar c'hantener avat, aon dezhañ na zeufe Jezuz da vervel war an hent, a hast buan mont war-raok. Anat eo n'eo ket gouest ar c'hondaonad da zougen e groaz betek ar Golgota. Rak-se "e voe rediet un den eus Kurena a oa o tistreiñ eus e barkeier, Simon, tad Aleksander ha Rufuz, da zougen kroaz Jezuz gant ar soudarded..." (Ma.15,21) ; ar re-mañ a zeuas diwezhatoc'h da vezañ kristenion (Rm.15,13).

Hep neuz-vat ebet, hep kaerder da zedennañ ar selloù, hep braventez da zedennañ hor c'harantez, e oa disprizet ha dilezet gant an dud, den a c'hlac'har ha boas ouzh ar boan, an hini a ra d'an dud mouchañ o daoulagad dirazañ, ha ne rae den van ebet outañ..."(Is.53,2-3).

Koulskoude e kred ur vaouez karantezus ha kalonek, fromet o welout an dremm-se goloet a wad, a c'hwez hag a skopadennoù, duet gant bloñsadorioù an taolioù ha poultrenn an hent, tostaat ouzh ar c'hondaonad, o tennañ he mad eus ar veskadeg lakaet en engroez gant done-digezh Simon, evit sec'hiñ dremm Jezuz gant ul lienenn, hag hi oc'h ober fae war al lezenn a zifenne pep jestr a druez ouzh ar gondaonidi. Ur gredenn gozh a lavar ivez en devefe Jezuz merket e zremm war al lienenn da c'hoprañ ar vaouez karantezus...

"Ur bobl vras a dud a heulie, ha merc'hed a skoe war boull o c'halon hag a hirvoude warnañ. Jezuz a droas outo : 'Merc'hed Jeruzalem, na ouelit ket warnon ; gouelit kentoc'h warnoc'h ha war ho pugale. Rak setu o tont an deizioù ma vo lavaret : Evurus ar gwragez divugel hag an divronnoù d'o deus ket maget ... Neuze en em lakaor da lavarout d'ar

menezioù : kouezhit warnomp ! Ha d'an torgennoù : kuzhit ac'hanomp ! Rak ma reer evel-se d'ar c'hoad glas, petra a vo graet d'ar c'hoad sec'h?' a lavaras dezho." (Lu.23,27-31).

E-kreiz e boanioù e kav Jezuz nerzh ha kalon c'hoazh evit trueziñ ouzh ar re a ouel warnañ ! Gouzout a oar, evit gwir, pegement ez eus da druezioù ouzh an engroez denlazher-mañ hag en deus goulennet e-unan ma kouezhje e wad warnañ, ha dreist-holl ouzh tud Jeruzalem a ouele-eñ warno un nebeut deizioù zo. "Da flastrañ a raio da enebourion ouzh an douar, te ha da vibion ennout-te, ha ne lezint ket ac'hanout-te maen war vaen..." (Lu.19,44). Gouzout a oar e teuo adarre, e-pad ar seziz, an traoù euzhus c'hoarvezet endeo gwechall : "Gwragez a zebr frouezh o c'horf, ar vugale vihan a voumounent..." (Lam.2,20). Hag ar paour-kaezh mammoù a lavaro d'ar menezioù : kouezhit warnomp ! ha d'an torgennoù : kuzhit ac'hanomp ! (Os.10,8) evit na welimp ket seurt traoù euzhus. Evurus eta ar gwragez na rankint ket plaouiañ o bugale o-unan evel loened gouez !

Gwa ar rummad drouklazher-mañ : kastizet kriz e vo. Mar bez graet evel-se dezhañ-eñ, ar c'hoad glas, "ar winienn wirion, ar vuhez, hag a ro buhez d'ar bed..." (Joa.15,1;14,6;6,33), petra a vo graet d'ar c'hoad sec'h ha marv neuze, d'ar bec'herion varv hag a laz ar Mesiaz ? "Ar skourr sec'h a vez dastumet ha stlapet en tan" (Joa.15,6). Evel-se e vo troet Jeruzalem e ludu !

Aet eo an amheuliadeg er-maez eus kêr dre Zor Efraim. N'eus ken nemet ur c'hammed ben-nak d'ober. Met pouez-krec'h a zo gant ar wenodenn serzh ha roc'hellek. N'eo ket Jezuz a

zoug e groaz ken. Dougen a ra avat war e zivskoaz ur samm kalz pounneroc'h : pennabeg e gastiz, da lavarout eo ar miliardoù a be-c'hedoù eus pec'herion an holl amzerioù hag ar poanioù a zeu da heul : "Lakaeten deus Doue da gouezhañ warnañ kiriegezh pep hini ac'hanomp. E gwirionez, hor poanioù eo a oa douget gantañ; hor glac'harioù eo a oa sammet gantañ; ha pouezet en deus war e choug ar c'hastiz en deus degaset deomp-ni an eurvad." (Is.53,6,4-5).

Gant ar pouez-se eo ez eo flastret Jezuz ken na c'hell mui mont war-raok. "Darlammat a ra va c'halon, ha va nerzh a ya diganin..." (Ps.37,11). Un trede gwech e rank c'hoazh "lakaat e c'henoù er bouldrenn..." (Lam.3,29), ha ret eo skoazellañ da sevel, rogetoc'h-rogetañ kroc'hen e zaoulin hag e zaouarn, evit brasañ levenez e enebourion divezh-ki : "Pa vezan o kouezhañ e vezont laouen..."(Ps.34,15)

.....

AR C'HASTIZ EUZHUS

Da greisteiz emeur en diwezh war lein ar C'halvar. Peurziviet eo Jezuz. Ar soudarded a denn gant gouezoni dilhad ar c'hondaonad an dilhad maz eo manet peg an neudenoù anezho ouzh gwad kaouledet ar c'horf hag an izili. Krisat poan adarre ! Ha deveraña ra ar gwad adarre. "Adalek sol an treid betek ar penn, n'eus netra a yac'h ennañ : gloazioù, bloñsadorioù, goulioù bev ha n'eus bet lakaet warno na lienadur nag eoul distanus..." (Is.1.,6).

Ouzh e welout noaz evel-se, lamet e zilhad diwarnañ, ha kignet holl, e risign e enebourion: "Kement hini am gwel a ra goap ouzhin." (Ps.21,8). Jezuz a zegemer an dismegañsoù-se hag an dibourc'hadur-se "evit ma teuimp da vezañ pinvidik dre e c'hrasoù a baourentez." (II Cor.8,9).

"Neuze e rojont dezhañ da evañ gwin mesket gant mir (c'hwerv evel bestl) ; goude bezañ henn tañvaet, ne fellas ket dezhañ evañ."(Mat. 27,34).

A-raok lakaat ar gondaonidi d'ar marv e veze roet dezho, da zisteraat o foanioù, ul louzoù moredu aozet gant merc'hed karantezus eus Jeruzalem : "Roit evajoù mezvus d'an hini a zo o vont da vervel ; ra evo ha ra ankounac'haio e reuzeudigezh ; ra chomo hep kaout soñj eus e drubuilhoù..." (Prov.31,6-7).Doujañ

a ra ar Romaned d'ar c'hustum yuzev-se.

Kemer a ra Jezuz ar c'hop hag henn sevel a ra betek e ziwuez evit chom hep anoazañ ar re a ra ar jestr-se a drugarez ; ne ev ket avat rak mirout a fell dezhañ e emskiant hag e santerezh ouzh ar boan betek ar penn.

"Ha neuze e stagjont Jezuz ouzh ar groaz." (Ma.15,24). "Ar c'hrisañ hag an euzhusañ eus ar merzherintioù" a lavare ar skrivagner ha politiker latin, Kikero, en doa bet tro da dagañ en ur prosez ur prokolor latin en doa lakaet kroazstagañ ur c'heodedour roman a-enep d'ar gwir roman end-eeun.

Astennet eo Jezuz war an douar, e zivskoaz war an dreustenn en deus dezouget, e benn en a-dreñv gant ar gurunenn-spern da c'houbenner. E gein hag e zivc'har, ha n'int nemet ur gouli, a c'hourvez war ar grouan. Daou soudard a zalc'h an divrec'h astennet war an dreustenn evit stagañ an daouarn outi. Un trede a zalc'h an divc'har evit herzel ouzh ar gouzañvad a zifretañ. Ur pevare a ra al labour kriz: un taol morzhol, hag an tachoù bras a galvez a sank er c'hig bev, a-dreuz d'an nervennoù ha d'an eskern. Flistrañ a ra ar gwad; krizañ a ra ar vrec'h ; kammañ euzhus a ra an dremm ; dispourbellañ a ra an daoulagad gant ar spouron ; gwasket eo ar gorzailhenn rak braouac'hus eo ar boan... Da c'houde, emañ tro an eil brec'h...

Prest eo dija troad ar groaz, sanket maz eo bet en a-raok en douar, hag a-dreuz warnañ e vo klenket an dreustenn(1). Neuze e krog ar vourevion e daou benn houmañ evit he dibradañ ; he sevel a reont a-nerzh o divrec'h, ha d'hec'h heul e stlejont, diwar-bouez ar goulioù o regiñ, ar paour kaezh korf-se war ar roc'hell noazh, evit e wintañ er vann hag e

istribilhañ ouzh ar peul... Mantrusat arvest ! Staget ez eus bet marteze ouzh kreiz ar peul-se ur seurt klud evit harpañ un nebeudig ar c'hondaonad a-c'haoliad, da virout ouzh ar goulioù a beurregiñ dindan bouez ar c'horf ? Pleget eo an daoulin, astennet an treid a-led ouzh ar penn, ha tached d'o zro... "Toullañ a reont va daouarn ha va zreid!" (Ps.21,17).

E-pad ar boureviadur kriz-se en em ro Jezuz d'e vourevion "evel un oan, hep digeriñ e c'henoù..." (Is.53,7), nag evit klemm nag evit enebañ. Ur gêr hepken, da bediñ evit e c'harwaskerion : "Tad, pardon dezho, rak ne ouzont ket petra a reont..." (Lu.23,34). Jezuz a seven e c'hourc'hemenn a garantez : "Karit hoc'h enebourion ; pedit evit ar re ho kwallgas..." (Lu.6,27-28).

"A-gevret gantañ e kroazstagjont anvet an dorfetourion, unan en tu dehoù hag egile en tu kleiz dezhañ" (Lu.23,33). Evel-se "ez eo bet lakaet e-touez an dorfetourion..." (Is.53,12), ha lakaet e-kreiz, evel ar gwashañ !

Staget e voe ouzh ar groaz ar skritell en devoa Pilatus lakaet skridaozañ. Dougen a rae ar gerioù-mañ : "Jezuz, an Nazaredad, roue ar Yuzevion". Kaer o devoa ar veleion-vras lavarout da Bilatus : "Arabat dit skrivañ Roue ar Yuzevion", hogen : Lavaret en deus hemañ : me eo roue ar Yuzevion". "Ar pezh am eus skrivet am eus skrivet!" a respontas Pilatus. (Joa.19, 19,21-22). Evel-se, daoust dezho e voe embannet ar wirionez : "Lavarit e-touez ar broadoù : Doue eo an Aotrou..." (Ps.95,10).

"Ar soudarded neuze, goude bezañ savet Jezuz ouzh ar groaz, a gemeras e zilhad hag a reas peder lodenn ganto, ul lodenn evit pep unan ; hag ar sae ivez. Hep gwri ebet e oa

houmañ, an hevelep gwiadenn eus an nec'h d'an traoñ (oberenn ar Werc'hez, hep mar ebet). Lavarout a rejont an eil d'egile : 'Na rogomp ket anezhi ; tennomp plouz berr warni, kentoc'h, da welout da biv e vo.' Evel-se evit ma vije sevenet ar Skritur(hep gouzout dezho): 'Lodennet o deus va dilhad kenetrezo, ha tennet va sae d'ar plouz berr.' Setu ar pezh a reas ar soudarded..." (Joa.19,23-24). Dirak an hini kroazstaget, e-giz pa ne vije ket bet anezhañ! "Ouzh nep hini a lam da vantell diganit, na nac'h ket da doneg kennebeut-all..." en devoa lavaret Jezuz avat.

Echu eo o labour gant ar soudarded hogen evit Jezuz e kendalc'h ar verzherinti (2). Hini ebet eus e organoù ret d'ar bevañ n'eo tizhet ha stanket eoar c'holl-gwad dija. Da neuze avat ez aloub ar glizi an izili. Ret e vefe treiñ tu met ne c'hell ket peogwir ez eo tachtet e holl izili. Diraez a ra ar glizi tamm-ha-tamm holl gigennoù ar c'horf, ar bruched, ar gouzoug : an detaniezh en em led e pep lec'h. Sac'hañ a ra ar gwad er skevent, er penn, er galon rak an nebeud anezhañ a chom ne c'hell ket mont en-dro. Kigennoù ar bruched, tennet gant diempradur an divrec'h sachet war-dreñv dindan bouez ar c'horf bountet war-raok gant fust ar groaz, hag ouzhpenn-se, gweet gant ar glizi, ne labouront ket mui : mouget e vez an hinikroazstaget(3). Evit distennañ e vruched a-benn analañ un tammig e vez ret d'ar gouzañvad, e-keit ha maz eus un tammig nerzh ennañ, kemer harp war e dreid, diwar-bouez rogadurioù spontus, rak dihonet e vez an holl boanioù gant an disterañ fiñvadenn ; an tachoù a rog ar goulioù hag a vroud an nervennoù hanter droc'het chomet a-stok outo ; ar c'hein a rakl

ar groaz hag ar gurunenn a stok ouzh he fust, hag ar stokadenn-se a sank ar spern er c'hlo-penn hag en daouvidig : "En em dreiñ a raen em poan, hag an drein a sanke donoc'h!" (Ps. 31,4,Vul.) Ha war-c'horre an holl voureviadurioù-se e teu ouzhpenn an derzhienn hag ar balberezh : "Devet on gant an derzhienn, ha disec'het eo va c'horzailhenn evel un darbod-pri..." (Ps.37,8;21,16).

Ha frealz ebet a-berzh den ; divec'h ebet. "Tad, perak ec'h eus pellaet diouzhin va mignoned ha va c'hompagnuned ? " (Ps.87,19). "Ar re nesañ d'am c'halon ha va c'heneiled a chom pell diouzh va foan, ha va zud kar ne dostaont ket..." (Ps.37,12). E gwirionez, di-c'halloud dirak kasoni o c'henvroidi "en em zalc'he a-ziabell holl dud e anaoudegezh hag ar gwragez o devoa e heuliet adalek Galilea." (Lu.23,43). "Klasket em eus unan bennak d'am frealzifñ, hag hini ebet n'em eus kavet..." (Ps. 68,21).

Ar fentigelloù, ar goapadennoù, ar c'hunujennoù avat ne reont ket diouer. Emañ ar C'halvar tostik d'an hent a gas etrezek ar mor war-du Jafa, hent darempredet-tre, dreist-holl da vare ar Pask. Neuze "e chome ar bobl da c'henaouegifñ" (Lu.23,35). "Ouzh da welout, e stlakont an daouarn, an holl dremenidi-se ; c'hwibanañ a reont hag hejañ o fenn..." (Lam. 2,15). E gwirionez "an holl dremenidi-se - an holl c'henaoueion-se - a gunujenne anezhañ en ur hejañ o fenn : 'Te hag a zistruj an Templ hag en adsav en ur ober tri devezh, en em salv da-unan ! Mard out Mab Doue, diskenn diwar ar groaz ! ' a c'harment." (Mat.27,39-40) "Ar re lorc'hus a ra goap ouzhin leizh o genoù ..." (Ps.118,51).

"En hevelep doare e c'hoarzhe priñsed ar

veleion goap outañ, war un dro gant ar skribed hag an henaourion : 'Salvet en deus reoù all, ha n'eo ket barrek d'en em selvel ! Mard eo roue Israel, ra ziskenno bremañ diwarar groaz hag e kredimp ennañ. En em fiziet eo e Doue : mar kar Doue anezhañ, dezhañ d'e zieubiñ bremañ ! Rak lavaret en deus : Me eo Mab Doue ! ' a lavarent.'" (Mat.27, 41-43)."Va c'hastizañ a reont, o leuskel goapadennoù an eil war-lerc'h eben hag en ur skrignal o dent ouzhin..." (Ps.34,16).

O divarc'hañ a c'hellfe Jezuz dre ziskenn diwar ar groaz. Ne ra ket avat ; gouzañv a ra o c'hunujennoù hag o goapadennoù gant pasianted hag hep respont. Gloazet-kenañ eo koulskoude gant o flemmadennoù. "Ur c'hleze lemm eo o zeod, hag o dent a zo goafioù ha biroù..." (Ps.56,5).

"Ar soudarded ivez a c'hoarzh e goap war-nañ : "Mard out roue Israel, en em salv da-unan ! a lavarent," (Lu.23,16-17). "Holl a-gevret en em isont ouzhin, hag o dismegañsoù a zo ouzhin evel flac'hadoù..." (Job.16,10).

"Unan eus an dorfetourion e pign ouzh ar groaz a huerne outañ ivez. "Ha n'eo ket te an Aotrou Krist?En em salv da-unan ha ni ganit! Met egile,o krozal dezhañ : N'ac'h eus tamm doujañs ebet evit Doue, te hag a zo barnet d'an hevelep kastiz ? Evidomp-ni eo reizh ; paeet omp diouzh hon torfedoù ; met hemañ n'en deus graet droug ebet. Jezuz, az pezet soñj ac'hanon pa zeui e gloar da rouantelezh,' emezañ." (Lu.23,39-42). "Pedenn ar re izel ha kuñv a blij atav dit." (Jud.9,11). Gwir eo, "kement hini en devo va anzavet dirak an dud, ez anzavin-me ivez anezhañ dirak va Zad a zo en Neñvoù..." (Mat.10,31). Rak-se "e gwirionez en lavaran dit, hiziv e vi ganin er Ba-

radoz." (Lu.23,43).

Bet skignet an engroez un tammig a bep tu e c'hell ar vignoned erfin tostaat ouzh Jezuz. Ha neuze, "e-kichen Jezuz edo en o sav e vamm ha c'hoar e vamm, Mari, gwreg Klopaz, ha Mari-Vadalen. Ha Jezuz, o welout e vamm hag en he c'hichen, an diskibl a gare, a lavaras d'e vamm : 'Maouez, setu aze da vab.' Ha da c'houde : 'Setu da vamm,' a lavaras d'an diskibl." (Joa.19,25-27). Pebezh enkrez evit ar vamm dener-se gwelout he Mab karet war e dremenvan e-kreiz seurt anken hep gellout e ziboaniañ !

En e ene e c'houzañv Jezuz eta. Gouzañv a ra o welout e vamm glac'haret gant e verzherinti hag e varv kriz. Gouzañv a ra eus dilezidigezh e ebestel hag eus emlzh Judaz. Gouzañv a ra o soñjal e kunujennoù al laer fall, e goapadennoù e enebourion, e skrignadegoù an engroez, e flemmadennoù an digredenneion ivez a-hed ar c'hantvedoù hag en disakridigezhioù a vezo sevenet a-enep d'e sakramantoù hag a-enep d'e gorf e-unan zoken en deus roet da vagadurezh d'an dud, hag a-enep d'e wad emañ o peurskuilhañ evit o silvidigezh. Ha teir eur-pad ez eo boureviet gant ar soñjoù-se !

Ha daoust d'ar poanioù korf hag ene,daoust d'ar goulioù diniver, un euzh o gwelout, al lin-gwad krog da ziwanañ enno diwar ar wrez hag ar boultrenn, plavet warno barroù kelien ha na c'hell ober an disterañ fiñvadenn evit o c'has kuit;daoust d'ar spern sanket donoc'h-donañ er c'hlopenn hag en daouvidig koeñvet; daoust d'an derzhienn loskus ha d'ar sec'hed, d'ar glizi, d'an detaniezh, d'ar mougadur ; daoust da zaskrenadennoù an nervennoù a-stok ouzh an tachoù ha stegnet gant holl bouez ar

c'horf abaoe teir eurvezh e vev Jezuz ; mirout a ra e emskiant ; komz a ra betek par ar marv, o reiñ dre se da anaout e varv pa fell dezhañ : "Den ebet ne zilam diganin ar vuhez : he reiñ a ran eus va ferzh va-unan..." (Joa. 10,18).

War-dro an navet eur - teir eur d'enderv - e c'harmas Jezuz gant ur vouezh kreñv : 'Eli, Eli, lema sabac'htani ? ' Da lavarout eo : 'Va Doue, perak ec'h eus va dilezet ? - 'O c'hervel Eliaz emañ hennezh ! ' eme darn eus ar re a oa eno..." (Mat.27,46-47).

En arameeg, e yezh pemdeziek, en devoa Jezuz distaget ar gerioù-se. Daoust hag an estrenion - n'o devoa ket komprenet ha krediñ a raent e c'halve Eliaz - a rae goap eus e wanded o vezañ ma oa Eliaz an diouganer a veze pedet pa vezed en arvar ? Daoust hag ar Yuzevion a blijas dezho diskouez o spered lemm o c'hodisat e vennadoù mesiazek, o vezañ ma c'hortozed Eliaz evel rakkannad ar Mesiaz ? E pep doare avat ez intent mat e enebourion, ha c'hoarzhin a reont warnañ ouzh e welout o c'hervel Doue war e sikour : "Ne ra mui e Dad eus Doue ; anzav a ra zoken en deus Doue e zilezet ! pegen iskis eo hennezh ! " ... "Goapaet e vezan pa grian etrezek Doue da gaout ur respont..." (Job.12,14).

"Va Doue, va Doue, perak ec'h eus va dilezet ? " Ar c'halvadenn-se a-berzh Jezuz a zo ur c'hlemm eus e natur-den ; n'eo ket ur gridenn a zic'hoanag avat : pedenn an den reizh heskinet an hini eo :

"Va Doue, va Doue, perak ec'h eus va dilezet ? Me ' zo ur preñv ; n'on ken un den : dismegañs an dud ha distaoladenn ar bobl. Ke-

ment hini am gwel a ra goap ouzhin ; risignal a ra genoù va enebourion ; hejañ a reont o fenn : 'Lakaet en deus e fiziañs e Doue;dezhañ d'e salviñ ! Ra zeuio d'e zieubiñ paz eo e vignon!' Enkelc'hiet on gant e-leizh a goleoù. Digeriñ a reont o geol a-enep din, evel leoned o regiñ hag o yudal. Setu me evel an dour o teverañ, ha disjuntet eo va holl eskern. Evel koar emañ va c'halon : teuziñ a ra e-kreiz va c'horf. Disec'het eo va c'horzailhenn evel un darbod-pri ha peget eo va zeod ouzh va staoñ. Bagadoù chas en em vod en-dro din, hag ur vandenn tud fall am arsailh. Toullet o deus va daouarn ha va zreid, ha va gourvezet o deus e poultrenn ar marv. Emaint o kontañ va holl eskern. Gant fae e sell an dud ouzhin, hag e taolont evezh ouzhin. Lodennañ a reont va dilhad kenetrezo ha war va zoneg e tennont plouz berr. Te avat, Doue, na chom ket pell diouzh va fedenn, diouzh mouezh va yudadenn. Te eo va sikour : hast va skoazellañ ! "(Ps.21 2,7-20).

Evit gwir ned eo ket torret an unvaniezh gant an Tad ; ne c'hell ket bezañ torret. Be-pred ez eo dudiet Jezuz gant ar gwel-gwenvidik ha gant karantez diziwezh ha divent an Tad. Met dasprenour eo Jezuz ; dre se en deus sammet hor pec'hedoù deomp-ni holl warnañ..." (Is.53,11) hag "ez eo deuet da vezañ mallozh evidomp..." (Gal.3,13). Ha ma ne c'houzañv ket pellidigezh an Tadevel ar bec'herion en deiz diwezhañ : "Kit pell diouzhin, tud villiget ! " (Mat.25,41), e lez an Tad, koulz lavarout, da bouezañ war e vab "graet pec'hed evidomp" (II Cor.5,21) holl strizhderioù an anaoueoù-se, oc'h aotren e enebourion d'ober o reuz war e natur-den. Ha lavarout a c'hell Jezuz : "C'hwil holl hag a dremen war an hent, sellit ha

gwelit ha bez' ez eus ur glac'har par d'am hini ! Va leuniet en deus a c'hwervoni ha va mezevet a huelenn-c'hwerv..." (Lam. 1,12;3,15); "Va brevet en deus en abeg d'ar pec'hedoù" (Is.53,5); hogen "ha p'am lazhe e lakafen va fiziañs ennañ!" (Job.13,15), rak d'an ampoent muioc'h eget biskoazh "an Tad a gar ac'hanon en abeg ma roan va buhez, hervez ar gourc'hemenn am eus resevet digantañ." (Joa.10,17-18).

"Da c'houde, evit ma vije sevenet ar Skritur "Sec'hed am eus...", a lavaras Jezuz." (Joa.19 28). Hep mar ebet, hag abaoe pell ! Gouzout a reer pebezh balberezha a zegas ur c'holl-gwad grevus. Hogen kollet en deus Jezuz un darn vras eus e wad da goulz ar skourjezadur hag ar peurrest war ar groaz. Ouzhpenn-se ez eo devet gant an derzhienn ha netra n'en deus evet abaoe an neizheur. Koulskoude n'eo al lavar-se nag ur glemmadenn nag ur goulenn eus ur banne da derriñ e sec'hed ; bez' ez eo ar youl da seveniñ an diouganou betek an hini diwezhañ.

"Ha kerkent, unan eus ar soudarded a redas da gerc'hat ur spoueenn, he c'hargas a winegr hag o vezañ lakaet anezhi e beg ur raosklenn e roas dezhañ da evañ. 'Lez 'ta ; gwelomp ha dont a raio Eliaz d'e saveteiñ,' a lavaras ar re all..." (Mat.27, 48-49).

Em sec'hed o deus roet din gwinegr da evañ ! " (Ps.68,22). An diwezhañ diougan da seveniñ eo: "Tad, peurc'hraet em eus ar pezh az poa roet din da ober. Neuze e roan dit va buhez va-unan rak evel-se eo da c'hourc'hemenn ivez..." (Joa.17,4;10,18).

"Ha goude bezañ kemeret ar gwinegr : 'Peur-echu eo,' eme Jezuz." (Joa,19,30). "Hag en ur leuskel ur griadenn vras : 'Tad, etre da

zaouarn e lakaan va spered'. Hag o lavarout kement-se e tennas e huanad diwezhañ!" (Lu. 23,46). D'ar seizhvet a viz Ebrel 30 e oa, war a seblant.

.....

(1) Troad ar groaz a oa graet gant ur c'hef - ur peul sanket en douar en a-raok war lec'h an dezvlazhidigezh. An tamm all, an dreustenn degaset gant ar brizonidi, an hini eo a oa anvet 'kroaz'. Diouzh ma veze lakaet war ar peul, pe istribilhet ouzh an nec'h pe staget war-c'horre, e c'helled kaout daou stumm : ar groaz a skeudenner peurvuiñ (†), pe unan e doare un T. Ar furm-mañ a vije bet an hini boas, hervez an darn-vuiñ eus an hendrae-zourion a-vremañ. Ar skritell lakaet a-us d'ar gondaonidi avat a c'hellfe bezañ roet d'ar groaz ar stumm a anavezomp. Evit an tamm koad da skorañ an treid, ez eo bet ijinet gant arzourion ar grennamzer, met n'eus bet biskoaz anezhañ.

Ur wech tachet un dorn (pe un arzorn, a-hervez), a-raok tachañ an hini all e veze sachet mat warnañ evit stegnañ an divrec'h. Neuze e veze lakaet an den en e sav. Daou zen, unan a bep tu d'an dreustenn, a oa a-walc'h evit e ispilhañ war-c'horre ar post. An divrec'h hag a oa da gentañ a-blaen, a zeue, gant pouez ar c'horf, da astenn ha da ober ur c'hogn a 65°. Neuze e veze tachet an treid, pleget an daoulin evit plantennoù a-rez war ar peul, un tach evit pep troad, pe an daou droad gant ar memes tach. (In : BARR-HEOL, 46, Kerzu 1965)

(2) Diwar vougañ e varve ar brizonidi: un den skourret war-bouez e zaouarn (dreist-holl mar bez e gorf bountet war-raok), gant kavenn e vrusk difiñv, ne c'hell ket ennañ e anal. Tachou an treid, e kroazstagadur ar Romaned, a veze lakaet diouzh ma padje ar verzherinti pelloc'h : evit kaout e anal e c'helle an den, bep an amzer, pa zeue bec'h warnañ, kemerout harp war dach (pe war dachou) an treid (gant pebezh poan spontus avat!), ha sevel e doare da lezel ar bruska da labourat. Ar marv a c'hoarveze prim avat, goude ma veze torret an divc'har, dre ma teue an analadur da vezañ dic'hallus.

(In : BARR-HEOL, 46, Kerzu 1965).

(3) Hervez an Doktor Barbet.

.....

KANVOU AR BED KROUET

Sevenet eo bet an aberzh nemetañ gouest d'hon unvaniñ gant Doue : "Hon dasprenet en deus Jezuz dre e wad. Hor c'haret en deus hag en em roet e-unan da Zoue, evel ur prof hag un aberzh a c'hwezh-vat..." (Eph.1,7;5,2).

An darvoud brasañ eus an holl gantvedoù, marv an Doue en em c'hraet den evit selvel ar bed, a dremen hep gouzout da zen !

An natur avat ne chom ket diseblant ouzh marv he C'hrouer. "Ha ned eo ket en abeg da gement-se e kren an douar ? Lakaat a rin an heol da guzhat da greisteiz hag an deñvalijenn da c'holeiñ an douar e-kreiz an deiz..." (Am.8 8-9).., en devoa lavaret an diouganer. End-eeun "adalek ar c'hwec'hvet eur betek an navet (adalek kreisteiz betek teir eur)e voe an douar a-bezh goloet a deñvalijenn. Ha setu ma fregas e daou gouel an Templ, eus al lein d'an traoñ, an douar a grenas, ar reier a frailhas, ar beziou a zigoras..." (Mat.27,45,51-52).

"Ma tav va diskibiñ ez eo ar vein a youc'ho..." (Lu.19,40), en devoa lavaret Jezuz. E-barzh roc'hell ar C'halvar hec'h-unan e c'hoarvezas ur frailh a-sonn e-keñver gweledoù ar roc'h, ar pezh na vez bet gwelet nepred. "Ma fell d'un den nac'h ez eus un Doue marvet el lec'h-se, ra sello hepken ouzh

rec'hell frailhet ar C'halvar..." (Kiril Jeruzalem).

Kement-all, - ne c'heller ket diskleriañ an deñvalijenn dre ur waskadenn war an heol : kann al loar e oa. Evit gwir, edo ar pask, ur gouel a veze lidet gant ar Yuzevion bepred d'ar pevarzekvet deiz goude al loar-nevez a zeu war-lerc'h ar gedez veur.

Denez, ur pagan koulskoude, un diskibl da zont da sant Paol, un aeropagad, hag a oa en Ejipt ar gwener-se, en devije garmet oc'h arvestiñ ouzh an darvoud mantrus-se : "Pe eo Doue an natur a c'houzafiv, pe eo gwikefre an hollved en em zistruj..."

Neuze, beleion-vras, henaourion, skribed, farizianed,... c'hwi ' zo laouen: "Pennoberour ar vuhez hoc'h eus lazhet..." (Act.3,15).

N'oc'h ket dispontet-tre, marteze, rak ar gwallzarvoud-se a sebez ar bouferion vrasañ zoken, ha tec'hout a reont kuit : "An holl engroezioù tud hag a oa en em zastumet evit gwelout an arvest-se, pa weljont ar pezh a oa en em gavet, a yae war o c'hiz o skeiñ war boull o c'halon..." (Lu.23,46). Hag en ur vont gant o hent e klevont ez eo roget gouel an Templ, evel evit diskouez ez eo echu al Lezenn gozh a fell d'ar veleion-vras bezañ an diwallourion anezhi ; bez' e klevont ivez "ez eus bet beziou o tigeriñ ha meur a sant bet o c'horf o kousket enno o tihuniñ d'ar vuhez endro..." (Mat.27,52). E-kreiz an deñvalijenn hag ar gōrventenn, dindan al luc'hed ha war un douar o krenañ, n'int ket dispontet-tre gant an aon da gejañ gant tud savet a varv da vev...

Ar re a zlee chom war ar C'halvar, "ar c'hantener hag ar re a oa gantañ o tiwall

Jezuz, pa weljont ar c'hren-douar hag ar pezh a c'hoarveze, hag e pe zoare e oa marvet Jezuz, a voe strafuilhet-holl gant ar spont : "E gwirionez, an den-mañ a oa Mab Doue," a lavarent. (Mat.27,54;Ma.15,39).

oooooooooooooooooooooooooooo

AN TREC'H MEUR

Marv eo Jezuz hogen Mab Doue eo bepred. Goude kuitaat e gorf ez eo e ene, unanet ha da viken ouzh an doueelezh, diskennet d'al Limboù. "An Aotrou Krist, marvet evit hor pec'hedoù, a yeas gant ar spered da embann ar silvidigezh d'ar speredoù a oa prizonidi ar marv..." (I PE.3,18-19). Met ar c'horf-marv ivez a zo dalc'hmat korf Mab Doue, hag unanet atav ha da viken ouzh an doueelezh.

Al lezenn roman a leze korfoù ar re grouget gant an evned-preizh hag al loened gouez. A-wechoù, koulskoude ez asante o reiñ d'ar gerent nes. Gourc'hemenn a rae al Lezennyuzev avat ma vije sebeliet ar c'horfoù da zeiz ar marv end-eeun, evit na vije ket saotret an douar gant o bezañs. "Ne dremeno ket ar c'horf-mañ an nozvezh war ar c'hoad ; met ne vanki ket d'e sebeliañ en deiz-se dres, rak mallozh Doue eo an hini krouget..."(Deut.21,23)

O vezañ m'edo repoz ar sabad meur o vont da zigeriñ gant ar c'huzh-heol e oa ret ober dillo. Neuze, evit buanaat marv ar gondaonidi dre barrat outo a sevel war o divc'har ha dre se da zistennañ o bruched evit analañ "e c'houlennas ar Yuzevion digant Pilatus ma vije torret dezho o divc'har ha ma vijent lamet kuit a-ziwar ar groaz. Dont a reas eta ar soudarded ha terriñ a rejont e zivc'har d'an

hini kentañ, ha neuze d'an den all a oa bet kroazstaget a-gevret gant Jezuz. Met o tont betek Jezuz, e verzjont e oa marvet dija ha ne dorrjont ket e zivc'har dezhañ. Hogen, unan eus ar soudarded a zigoras e gostez gant un taol goaf ha raktal e teuas dioutañ dour ha gwad..." (Joa.19,31-34).

Gouzout a ouïe ar soudard e vicher : skeiñ a reas en tu-dehoù, er pempvet tachad etrekostoù. Marvus eo an taol-se rak war-eeun e tizh kentez ('atrium') dehou ar galon. Ha ned eo kevrinus na dreist-kred e teuas dour ha gwad : an dour a zo deuet eus an amgalonnenn ('pericardium'), e-lec'h ma oa dastumet da heul an taolioù ; hag ar gwad a zo deuet eus ar c'hentez, e-lec'h ma oa chomet berus(1)

Ar jestr divennad-se eus ar soudard a zo c'hoarvezet "evit ma vije sevenet ar Skritur : ne vo torret askorn ebet dezhañ..." Hag en ul lec'h all : "Gwelout a raint an hini treuztoullet..." (Joa.19,36-37).

"Jozef eus Arimazea, ur c'huzulier enorus, hag a c'hortoze ivez rouantelezh Doue, a yeas gant hardishegezh da gavout Pilatus ha da c'houlenn digantañ korf Jezuz. Souezhet e voe Pilatus o klevout e oa marvet Jezuz ken buan all. Gervel a reas ar c'hantener ha goulenn a reas outañ ha pellzo e oa marvet. Klevet gantañ displeg ar c'hantener e roas ar c'horf da Jozef. Hag hemañ o vezañ prenet ul liñsel, a ziskennas Jezuz diwar ar groaz hag a sebelias anezhañ el liñsel..." (Ma.15,43-46). Ha Mari a zegemeras war he barlenn ar c'horf-marv goloet a wad.

"Neuze e teuas ivez Nikodem. Degas a rae c'hemmesk a vir hag a aloez, ur c'hant lur pouez bennak ennañ. Kemer a rejont eta korf

Jezuz hag e liammjont anezhañ gant bandennoù goude bezañ skuilhet warnañ louzoù-frond, evel m'emañ ar c'hiz sebeliañ gant ar Yuzevion. El lec'h ma oa bet kroazstaget Jezuz e oa ul liorz, hag el liorz-se ur bez nevez ha na oa ket bet implijet biskoazh..." (Joa.19,39-41). Da Jozef a Arimazea e oa ar bez-se. Gant skoazell Nikodem e lakaas Jozef ar c'horf-marv er bez nevez-se bet toullet er roc'h evitañ e-unan. Ha goude bezañ ruilhet ur maen bras ouzh toull ar bez, ez eas kuit..." (Mat.27,60).

Beziet e ranke bezañ ar gondaonidi war lec'h ha gant benveg o c'hastiz ; peurliesañ e vezent stlapet en ur poull-bez boutin. E-giz-all e tlee bezañ evit Jezuz : "Skrivet e oa e vije marvet gant ar re fall, hogen gant an den pinvidik edo paz eo marvet..." (Is.53,9).

"Antronoz, da lavarout eo, an deiz goude an Aozadur ('ar sabad'), e teuas a-gevret ar veleion-vras hag ar farizianed da gavout Pilatus, hag e lavarjont dezhañ : 'Aotrou, soñj hon eus en deus lavaret an toueller-se, pa oa bev c'hoazh : goude tri devezh e tihunin da vev. Ro urzh eta da ziwall ar bez betek an trede deiz, gant aon na zeufe e ziskibion da laerezh e gorf ha na lavarfont d'ar bobl : di-hunet eo a-douez ar re varv ! Gwashoc'h eget an hini gentañ e vefe an douelladenn-se.' Respont a reas Pilatus : 'Gwarded hoc'h eus : kit hag en diwallit hervez ho soñj.' Mont a rejont eta hag e tiwalljont ar bez gant surentez, dre lakaat sielloù war ar maen ha soudarded war e dro..." (Mat.27,62-66).

Anat eo ne gred ar Yuzevion-se tamm ebet e diougan an dasorc'hidigezh. Hogen aon o deus rak diboellgredenn dalc'hidi Jezuz hag hegre-doni ar bobl birvilhet c'hoazh gant ar soñj

eus azbevidigezh Lazar bev bepred a oa nevez c'hoarvezet d'ar mare-se. Neuze, ma teufe e ziskibion ? E ziskibion ! Spouronet int ha chomet dindan guzh... Perak an aon-se a-berzh ar veleion-vras ? "Krenañ a reont pa n'eus lec'h ebet da spontañ..." (Ps.13,5).

"Peurechu eo pep tra" en deus lavaret Jezuz en ur denañ e huanad diwezhañ. Evit pezh a zo eus e vuhez varvel. Hogen padout a ra an dismegañsoù war-lerc'h e varv zoken : Satanraz hag e genwallerion o deus e zegaset d'ar marv ha peurglok eo o gourzrec'h ; evit Jezuz avat ez eo ar faezhidigezh krenn :

- e ene a zo diskennet d'al Limboù ; n'en deus ken ur vuhez reizh : graet eo evit bezañ unanet gant ur c'horf ha disrannet eo dioutañ ...

- Emañ e gorf diwadet ha divuhez en douar : trec'het eo bet an diouganer brudet a lakae birvilh en engroez, ar burzhudour galloudek a zegase ar re varv da vev ! Emañ e poultrenn an ankouazh, faezhet e-unan gant ar marv !

"E holl re a zo o tougen kañv hag o ouelañ ! " (Ma.16,10). Ar Werc'hez, diviet, a zalc'h fiziañs c'hoazh ; met an ebestel hag an diskibion a zo spontet ha dic'hoanaget. Aet eo da netra o holl fiziañs ; douaret eo bet o Mestr hag e holl bromesaoù gantañ : "E zrouk-werzhed o deus e enebourion da vezañ barnet, hag e staget o deus ouzh ar groaz ; ha ni a espere e oa hennezh an hini a zasprenje Israel!" (Lu.24,20-21).

Goude an darvoudoù marzhus c'hoarvezet da goulz marv Jezuz, maz eo bet strafuilhet ganto e enebourion end-eeun, o deus prederiet ar remañ ha kemeret o deus an holl ziarbennoù ret evit startaat an trec'h gounezet endeo war an

'toueller'-se, un trec'h pompadus ha divezh : aet int betek lakaat war vez Jezuz siell Gai-faz, e enebour gwashañ ! C'hoarzhin a reont goap war ar burzhudour hag e ziouganou. "Te hag a zistruj an Templ hag en adsav en ur ober tri devezh, en em salv da-unan eta..." (Mat.27,40). Deus er-maez eus ar bez ! Nann, arabat kaout aon : warc'hoazh e vo ar gourzrec'h !

Ya, warc'hoazh e vo ar gourzrec'h... Evit piv avat ? "Na lavaret ket e enebourion en o c'halon : Mat eo ! Bet hon eus hor c'hoant ! E lonket hon eus!" (Ps.34,35) rak a-benn un eur bennak e vint holl abafet gant o drouk-verzh" (Jer.20,11), hag "ar re a danflamme a-enep dezhañ a vo divarc'het ha mezhekaet; ha pinous ez aint kuit!" (Is.45,16).

* * * * *

"Evel ma voe Yona tri devezh ha teir nozvezh e korf ar morvil, evel-se e vo Mab an Den tri devezh ha teir nozvezh e-kreiz an douar..." (Mat.12,40). Hogen, "va c'horf a ziskuizho er peoc'h rak ne lezi ket va ene en ifernioù na da Sant da vreinañ er bez : an trec'h a roi d'az Mesiaz." (Ps.15,9-10;19,7).

End-eeun, "kerkent ha gouloù-deiz, deiz kentañ ar sizhun e teuas Mari-Vadalen hag ar Mari all da welout ar bez. Ha setu ma voe ur c'hren-douar bras : Ael an Aotrou a ziskennas eus an neñv, hag a zeuas da ruilhal ar maen kuit, ha da azezañ warnañ. Heñvel e oa e neuze ouzh ul luc'hedenn hag e zilhad a oa gwenn evel an erc'h. Ouzh e welout e voe spontet-holl ar warded hag e teujont da vezañ evel tud varv..." (Mat.28,1-4).

"Dinerzhet eo bet divrec'h an holl vrezelourion-se, paz en deus krenet ha tavet an douar - paz eo savet Doue evit rentañ justis ha salviñ holl dud ar bed..." (Ps.75,6,9-10). "Kit e toullou ar reier, da dec'hout diouzh ar spouron ha sked e veurdez, pa savo evit lakaat an douar da grenañ..." (Is.2,19).

"An Ael avat o komz ouzh ar merc'hed : 'C'hwi, n'ho pezet ket aon. Gouzout a ran e klaskit Jezuz, an hini bet staget ouzh ar groaz. N'emañ ken amañ. Dihunet eo a-douez ar re varv?' a lavaras dezho." (Mat.28,5-6).

"Diwezhat en deiz-se, evel ma oa serret an dorioù war al lec'h ma oa bodet an diskibion gant aon rak ar Yuzevion, e teuas Jezuz, hag o chom en e sav en o c'hreiz, e lavaras dezho : 'Ar peoc'h ra vo ganeoc'h!' ha goude bezañ lavaret an dra-se e tiskouezas dezho e zaouarn hag e gostez. Karget e voe an ebestel a levez, o welout an Aotrou..." (Joa.20,19-20)

Ar wech-mañ, e gwirionez, emañ erru ar gourzrec'h : "Pelec'h, Ankoù, emañ da drec'h-te?" (I Cor.15,55). "Ho pezet fiziañs : me 'm eus trec'het ar bed!" (Joa.16,33). Ha trec'her eo Jezuz da viken : "An Aotrou Krist adsavet a-douez ar re varv ne varvo ken : n'en devo ken ar marv galloud ebet warnañ !" (Rm.6,9).

.....

DASPRENET. DRE GENUNVANIEZH

"Hon adunvanet en deus Doue gantañ dre an Aotrou Krist," (II Cor.5,18). Dre gengred ga-neomp eo en deus Jezuz hor salvet. Kengret omp neuze. Evit ober hor mad eus e aberzh e tleomp :

- da gantañ bezañ unanet gantañ : "Evel ma ne c'hell ket ar skourr dougen frouezh ma ne chom ket stag ouzh ar winienn ; evel-se, na c'hwi kennebeut, ma ne chomit ket ennon ; rak en diavaez din, ne c'hellit ober netra..." (Joa. 15,4-5).

- da c'houde, ober diouzh e skouer: "Skouer ameus roet deoc'h evit ma reot evel m'am eus graet..." (Joa.13,15). "An hini a fell dezhañ chom ennañ a zle en em ren evel m'en deus hennezh en em renet ; ha kement hini a chom ennañ ne bec'h ket..." (I Joa.,2,6,3,6).

En diwezh, bezañ lodek en e donkadur: "Ma venn unan bennak dont war va lerc'h, ra gemero e groaz ha ra zeuio d'am heul." (Mat.16, 24). "Kemer da lod a boanioù, evel ur gwir soudard d'an Aotrou Krist..." (II Tim.2,3).

Evit gwir, dre unaniñ hol lodennouigoù gant poanioù dreistlavar ha gant dellidoù divent Jezuz eo hor bo gwir war bep tra, - da lavarout eo, e teuio poanioù ha dellidoù Jezuz da vezañ hor re, ha d'hor salviñ.

Hor pediñ a ra an Aotrou da zistreiñ outañ:

"Distro, hini disent, n'am bo ket ouzhit un dremm c'harv, rak trugarezus on ; ne zalc'han ket droukrañs da viken ; anzav hepken da falloni rak da zasprenet em eus..." (Is.44,22).

Na zistaolomp ket e gouviadenn : "Ma klevit e vouezh hiziv, na galedit ket ho kalonoù..." (Ps.94,8-9).

A-hend-all, "penaos chom hep karout an hini en deus hor c'haret kement ? " ("Adeste") Rak "ar c'hastiz a zegas deomp an eurvad en deus kroaziet warnañ..." (Is.53,5), ha den ne c'hell ober muioc'h eget n'en deus graet: "Den ebet n'eo brasoc'h e garantez eget an hini a ro e vuhez evit e vignoned..." (Joa.15,13).

"Ha ni eta, karomp-eñ, peogwir ez eo eñ eo en deus hor c'haret da gantañ. Ha kement-mañ eo e garout: mirout e c'hourc'hemennoù ; met e c'hourc'hemennoù ned int ket ur bec'h..." (I Joa.4,19;5,3). "Aes eo va yev ha skañv va samm..." (Mat.11,30).

"Rentomp bennozh da Zoue, eñ hag en deus roet deomp an trec'h dre Jezuz Krist, hon Aotrou..." (I Cor.15,57).

"Rentomp bennozh "d'an hini hor c'har hag en deus hor glanaet eus hor pec'hedoù en e wad..." (Apo.1,6).

"Evurus ar re a walc'h o sae e gwad an Oan evit m'o devo gwir war wezenn ar vuhez : mont a raint tre e-barzh Keoded an Neñv..." (Apo.22,14,Vulg.)

"Hag hon Aotrou Krist a dreuzneuzio hor c'horf reuzeudik d'e lakaat kenstumm gant e gorf a c'hloar..." (Phi.3,21).

oooooooooooo
oooooooooooo
oooooo
ooooo
oooo
ooo
oo

TAOLENN

Ur ger a-raok.P.5
Diwar-benn levrioù ar Skritur Sakr. P.7
Diviz en neñv evit mad ar pec'her.P.9
Mab Doue a gemer hon natur a bec'herion.P.11
Eus an neñv d'ur c'hraou
dre gorf ur werc'hez.P.14
Sentus ouzh al lezenn.P.18
An harlu.P.21
Ar bugel a Nazared.P.24
Ar c'halvez a Nazared.P.30
An Doue Penedour.P.33
Ar maen-skoilh.P.37
Un taol-trubarderezh
e-pad ar Pask diwezhañ.P.46
E liorzhan tremenvan.P.55
Dirak ar pennadurezhioù relijiel.P.64
Brizhvarnedigezh er Sanedrin.P.70
Kaset d'ar pretordi.P.73
Dirak pennadurezhioù an alouberion.P.76
Barnet d'ar marv.P.82
War hent ar C'halvar.P.94
Ar c'hastiz euzhus.P.101
Kañvoù ar bed-krouet.P.113
An trec'h meur.P.116
Dasprenet dre genunvaniezh.P.122

EEEEEEEEEEEEEEEEEEEE

Moulet gant ar gelaouenn

Ar rener:Y.Ollivier

CPAPP:50 015

